

BRUD

Niv. 11-12

HANV - DISKAR-AMZER 1961

BRUD

ar Yez hag ar Vro

Kelaouenn lennegel drimizieg **Emgleo Breiz**

Eil dastumadenn
NIVERENN 11-12
HANV - DISKAR-AMZER 1961

KOMANANCHOU :

Komanant-bloaz	15 LN.
Komanant-skoazell	20 LN.
An niverenn	4 LN.

« **BRUD** »
B. P. 17, BREST
C. C. P. 1921-04 RENNES

Niv. 11-12



ar Yez hag ar Vro

TAOLENN

- **BILZIG**, gand Fañch AL LAY
(Lodenn genta) 7

LODENN AR GELAOUENN

- D'al lennerien 88
- *Eur vojenn a lwerzon :*
 - Osin e Douar-ar-Yaouankiz 89
- Keleier... 95

F. AL LAY

BILZIG

(Lodenn Genta)

Embannet eo bet « BILZIG »

evit ar wech kenta

e 1925

gand moulladuriou « BUHEZ BREIZ »

e ti Ad. AR GOAZIOU, e Kemper

« BILZIG » a zo embannet a-nevez gand aotre hegarad an Aotrou Le Lay, Enseller-meur ar skoliou, hag al Leordi Ar Goaziou.

Tro bourk Lokireg

Bilzig a oa ginidig a Lokireg, eur barrez vian a eskopti Treger. Heuillit, hed ar mor, hent ar valtouterien, hag e kavfet anezi e plegig an torrôd, etre beg Enez-Wenn ha beg ar Roh-Vran. Eno emañ, e traoñ gra Pennenez : bevennet eo gand porz ar bagou hag ar palud, an ôd Gwenn-Veur ha Porz Billieg. Diazezet he-deus he zier war eun dachennig ledan, ledannoh eun tammig ha palv ho torn, nemed palv ho torn a vefe ken ledan ha tok an Teusk-Noz a sponte ar gaezed (1) war mêzou Boh.

Warnezi 'ta, ha war he hreiz : iliz ar barrez. Disheñvel ouz an ilizou all ?... A dra zur, ma selaouit tud ar vro; stourm a rafont ouzoh, ha stard, penôz n'an-neus, tro-war-dro, iliz ken kaer hag o iliz, tour ken dantelezet hag o hini, kleier da gana ken seder, ken dudiuz hag o re.

En he hichen, kelhet gand eur harz skô euz eun tu, euz eun tu all gand eur voger, ar presbital; an ti, savet e-kreiz al liorz, a guz e fasadenn wenn dindan deliou eur wezenn fiez.

Amañ, du-hont, tier ar besketerien, hadet e-touez ar herreg, war ribl an trêz, ha, kuzet gand deliou eur bodad till, tier ar valtouterien ha kazarn ar zoudarded.

War penn ar hra, maner an ôtrou kont Tremedern, maner Penn-ar-Run, kastell Brechou. An ôtrou hag an itron a rê eno o ziegez gand o daou vugel e-pad an hañv; deut ar goañv eh-ênt da gastell Tremedern, e koajou braz ar Jaou. Kastell Brechou 'ta a zave e dourell a-uz gwez braz ar hoad till a holoe ar run, adaleg an Trez-Gwenn beteg mengleuziou Kerodren.

Dirazañ war beg ar Palud, touzet evel eur penn katereg, ar vilin-avel, hag an ti gward, hag, a-rez ar mor, ar Fort gand e c'hweh pez kanol. Brezel gand ar Zaozon, soudarded leiz ar hazarn, soudarded endro d'ar hanoliou.

Ha setu ganeom grêt tro ar bourk.

E porz ar bagou, diou hober hag eun toullad bagou pes-

(1) **Eur haez:** eun den hep kalz a spered, eun inosant. Euz eur bugel bian e lavarar ivez, gand karantez: **eur haezig bian.**

keta : braz ha bian, astennet int war an trêz, o hortoz ar mor da zond d'o dihuni. Ha dre-oll ar mor, ar mor a-wechou madelezuz, karantezuz evel eur bugelig, peurliesia rust ha dirollet.

Eno 'ta, en unan euz an tier bian-ze, harp ouz eur garreg, goloet e doenn a drêz, — trêz beteg toull an nor, — e oa ganet Bilzig. It e-barz, va den mad, antreit, Bilzig ne deuo ket d'ho lakaad er-mêz : maro eo, ar paour kêz, pell, pell amzer 'zo. Va zad-koz (Doue d'e bardono !) a gontas din, eun devez ma oam oh ober eur bale — tro ar Palud — penôz e dad dezañ a oa bet eur hamarad braz da Vilzig. Marvad e oa eun tam-mig euz on herent, ha dre-ze, e di a zo kouezet en on danvez.

— Azezit en ho koazez, setu eur skaoñ. Amañ om brao meurbed evid ober eur gêzeadenn, rag, hervez m'her gwelan, falvezoud a ra deoh kleved buez Bilzig. Tanit ho korn, ha, goude, me a gonto anezi deoh.



Lodenn Genta

BUGALEAJ BILZIG

BUGALEAJ BILZIG. E HINIVELEZ

Evelse 'ta, e ti Bilzig emaoñ. E-barz ar gwele-mañ e oe ganet, war an oaled-mañ eun amiegez hen mailluras, hag eun amezegez a roas dezañ da zena.

E dad ? N'eus ket bet anevzet anezañ : beuzet e oa bet, arôg ginivelez ar pôtr. Ar hoaperien, an teodou fall a lavare « e stank ar vilin-avel »; e gwirionez, o tond d'ar gêr euz a Vro-Zaoz, evid dimezi da Janedig.

E vamm ? Ar paour-kêz plah, mervel a eure en eur wilioudi. En deiz-se, trubuill ha glahar en tiig: eur plah, ar vamm, war ar varv-skañ; eur bugelig en e gavell, emzivad an deiz kenta euz e vuez.

Hini pe hini euz an amezeien a deue, eur wech an amzer, da deuler dour benniget war ar vamm, da lavared eur beden-nig eviti. Pebez kalonad !

Eur plah a drebese dre an ti: an amiegez. Unan all kosoh, azezet e penn ar havell, sioul, sioul a ouele, eur chapeled en he dorn, soublet he fenn ganti.

— Pebez kalonad !... O pezit truez oue, o va Doue !

— Red eo evelkent mond da gaoud an ôtrou person, eme an amiegez.

— Ya, ya, eom, a lavaras ar plah koz, — Marharid a oa he ano, mamm-goz ar bugel, mamm e dad — red eo mond... Ar pôtr a ranko beza badezet, hag ar vamm sebeliet... Ne zebro ket ahanom !...

Et int o diou d'ar presbital.

Tok ! tok ! war an nor, hag ar garabasenn da zigeri.

— Petra a c'hoarvez ganeoh, Marharid ?... Petra a fell deoh ?...

— Er gêr emañ an ôtrou person, Frañseza ?

— Ya. Antreit en ti, eme ar garabasenn, eul Leonardez talfaseg, eun dorgosenn a blah, teo ha ledan. Antreit, antreit.

Dirag an ôtrou person, abaf an diou blah, ken abaf ha na gredent digeri o genou. Rust e oa an ôtrou person, den a zoare, mad d'ar paour, med striz war al lezenn. Leonard a

oa, hag o paouez erruoud er vro : ne anaveze ket hoaz oll dud e barrez. Ha c'hwi a oar: al Leonard pôtr rog ma 'z-eo, gwall goapêr eo an Tregeriad, hag an eil atao en disfi ouz egile.

— Eur maleür braz, ôtrou person, eme Marharid... Janedig a zo marvet en noz-mañ... Janedig, Janedig Tangi...

— A!

— E-tro diou ha teir eur...

— A! eme adarre an ôtrou person.

— Ha war he lerh e tilez eur mabig... Pegoulz e vo grêt ar vadeziant, pegoulz an interamant?...

— Ar vadeziant, goude ar huz-heol, evelato, Marharid, c'hwi oar, badeziant ar re vastard. An interamant, n'ouzon ket, evelato... Maro heb anzav he fehed, maro heb sakramant!... Skwer fall d'an oll verhed yaouank... skwer fall d'an oll dud er barrez.

— Petra vo grêt, ôtrou person?

— Digasit ar pôtr d'ar vadeziant d'an abardaez, evelato, ar vamm e korn ar vered. Marharid, c'hwi a dle gouzoud petra da ober diouz ar pôtrig; hervez m'am-eus bet klevet, mab ho mab ez-eo.

Ha Marharid, soublet ganti he fenn, kuzet en he jobilinn, a ouele goustadig.

— Ya, ôtrou person.

— Evelato savit anezañ e doujañs an Aotrou Doue.

— Ya, ya, ôtrou person.

— Ha gras dezañ ne heulio ket roudou e berhenn! Grit dioutañ, dre ho kelennadurez, ar pezh n'eo bet nag e dad nag e vamm.

— Kaled ar blanedenn, ôtrou person!

— Petra a fell deoh!... Pep hini ahanom a steu e hini, dindan dorn ha skoazell an ôtrou Doue.

Ar paour kêz Marharid, pleget dindan ar glahar, a zistroas war he hiz.

Bilzig en e wele a oa kousket mad, juntret gantañ ha stard e zaouarnigou. En e gichen, war ar varv-skañ, e vamm lienet, dirazi eur houlaouenn goar benniget, eur chapeled hag eur groazig kouevr etre he daouarn; ha panevet sklas ar maro en he herhenn hag an disliou war he zal, ho-pije lavarret e vousehoarze d'he mabig bian.

Ha Marharid, stouet d'an douar, a lavare dre he daerou :

— Va mabig eo, Janedig, va mabig eo!

Seblantoud a eure dezi pa zavas he daoulagad, penôz ar vamm he-devoa eun tammig troet he fenn evid selled outi, evid trugarekaad mamm an hini he-devoa kement karet, mamm-goz he bugelig, euz he harantez hag euz he madelez.

— Janedig, va merh! va merh!... It gand an ôtrou Doue!... Doue d'ho tigemer en e Varadoz!... It e peoh, Janedig, ho mab a vo va mabig!...

Ar plahig koz, savet en he zav, an daerou o ruilla war he diouchod, a roas eur pok d'ar vamm, serri a eure dezi he daoulagad :

— Kousk, va merh, kousk! An dud ne absolvont ket... Doue a zo madelezuz!...

A-barz an abardaez, archedet Janedig, Marharid a wiskas he mantell, ha, dindan, paket ar bugelig. Gand ar paeron hag ar vaeronez setu hi er porched. N'eo ket ar person a deuas da ober ar vadeziant : ar hure hag ar zakrist, ar hure, den a zouster hag a vadelez, ar zakrist, eur hamarad da dad ar pôtr.

— Petore ano, Marharid?

— Ivon, Ivonig, ôtrou kure.

— Perag e son hizio ar hloh evel derhent eur gouelberz? a lavare ar person, souezet meurbed, d'e garabasenn, hag e fredone da heul ar hloh :

*Eun arc'hél, a-berz an Aotrou,
A ziskennas euz an Neñvou
D'annoñs da Vari oa choazet
Evid mamm da Zalver ar bed.*

Ar zakrist an-nevoa sonet an Anjeluz goude diwez ar vadeziant, grêt an-neus d'ar hleier kana ginivelez ar bugel dinamm evel hini ar gristenien all.

Goude ar vadeziant, raktal, eo bet sebeliet Janedig. Nebeud a dud o pedi evid ar paour kêz plah, nebeud: an amezeien hag ar gerent. Eun toullig e korn ar vered, eun tamm douar war an arched... Na kan na diskant; ar glazou, goude an Anjeluz, da vianna, a gouezas truezuz, evel daerou an anken, war beziou ar vered lijennet (1) dindan deñvalijenn an noz. Evelse ar zakrist a rê gouela war bez ar vamm ar hleier o-devoa kanet bremaig badeziant he mab.

Marharid, mantret he halon, he-unanig, ar pôtr dindan he mantell, a zistroas d'ar gêr. Lakaad a eure ar bugel en e

(1) Lijennet: pe lizennet, goloet gand eur vrumenn. Eul lijenn (lizenn) D. sk. lijennet eo va daoulagad, gwer va lunedou.

gavell, hag hi, stouet d'an douar, war he daoulin noaz, a lavare en he fedenn:

— Doue da bardono d'an anaon benniget! Doue d'o fardono! Doue d'o digemer en e drugarez!

II

BILZIG E TI E VAMM-GOZ MARHARID

Intañvez abred a oa chomet Marharid gand daou vab. Tañvaet he-devoa bet an dienez, hag he blaz a oa hoaz c'hwero war he halon. Martoloded a oant deut da veza. Al levenez, eur pennadig, a skeudas war he zal. Siwaz! He mab hena a zo bet beuzet o tistrei d'ar gêr, euz a Vro-Zaoz, evid dimezi. Dimezet an daou zen yaouank gand ar maro. Ha bremañ! O bugelig!... Petra 'teuio da veza? Petra?... Koz Marharid!

Ar vamm-goz hag ar bugel a veve o-daouig evuruz evelkent. Nebeud a dra ezomm deze evid beza evuruz.

Deut d'ar gêr, Kola, an eil vab, an-neus grêt digemer mad d'ar pôtr. Med falvezoud a reas dezañ dimezi d'e dro, al lez a rê, eur pennad mad a oa, da eur plahig yaouank, koant ha seder, Izabel-Môn Gerael, Enkrez kuzet e kalon ar vamm-goz. Hag he mabig?... Da zeiz an eured, ar bugel an-nevoa e zaou vloaz echu. Pôtr strij (1), brizardennou e-leiz e dal, war e zioujod, war e fri togn; eur pennad bleo melen dioutañ, ha lemm e lagad gwer-hlaz digor ha frank. Koant ar pôtr? Ket; seder ha dever ennañ.

Ifig a rê e vamm-goz outañ. Penôz Ifig a droas e Bilzig? Ar pôtr n'oa ket evid digej mad e ano: Ifig... Izig... Dizig... Bilzig... E eontr Kola a gavas ar ger a spég, a zalh, hag a halvas anezañ Bilzig, Bilzig ahann, Bilzig alese, ar pôtr atao da heul e eontr. Hemañ, dre garantez evid e vreur, hag ive evid ar bugel, a c'hoarie gantañ, a zave anezañ en êr, a lakae anezañ war varh war e skoaz, hag ar pôtr evuruz a c'hoarze. Bilzig! Bilzig!

Ma! Abaoe eo bet ar pôtr anvet gand an oll Bilzig, e lesano a deuas da veza e ano, ha nebeud a dud er bourk a vije bet kat da rei dezañ e wir ano: Bilzig a oa, Bilzig a jomo.

Mad evid ar pôtr a oa ive Izabel; ha Bilzig a gare anezi. Kement hag e vamm-goz? Nann. Evelkent e kare anezi mad hag he gwaz muioh-mui. Hag hemañ, pa wele ar pôtr o c'hoari en e gichen, a zelle ouz e vamm hag a lavare dezi ha d'e wreg:

(1) **strij**: dister, gwan.

— Sellit, sellit 'ta!... E dad eo, heñvel-beo eo outañ. N'oh ket evid e nah, mamm Marharid: ho mabig bian eo, hep douetañs ebed.

Da e oa da galon ar vamm-goz kleved ar homzou-ze euz perz he mab yaouank.

Izabel ive en em gustume da weled ar pôtr en ti, o c'hoari, o c'hoarzin, o ouela, o trei endro dezi, ha, pa hanas he henta bugel, eur bôtrez, Madelen, Bilzig eviti a jomas he mab hena hag evid ar pôtr, Izabel a oa e vamm, Marharid e vammig-koz.

Eur goañvez, homañ a dapas aoned (2) war an ôd, e-pad ar bezina: klañv, gwall-glañv, Marharid, eiz deiz goude, a oa maro. Kent mervel, Marharid a zalhas ar pôtr, en he hichen, e-tal he gwele, he dorn war e benn. Pemp bloaz an-nevoa d'ar houlez-se.

— Bez sentuz, va mabig, anaoudeg, va mabig bian, e-keñver da vamm Izabel ha da eontr; karantezuz, va mabig... Izabel a vo da vamm... atao, atao... n'eo ket 'ta, Izabel?...

— O! ya, mamm Marharid.

— Bennoz Doue deoh, Izabel... Doue ho pennigo!... Trugarezuz e-keñver an emzivad. Izabel... Skoazell ha dorn d'am bugelig...

Hag o-daou, Kola hag Izabel, o-devoa grêt d'o mamm ar bromesa da vaga ar pôtr ha da zavel anezañ evel unan euz o bugale...

Keuz da Vilzig d'e vamm-goz, ha doureg e ouelas; bugelig e oa, hag ar heuz, ar glahar abred a zil a-dreuz eñvor ar vugale. C'hoari a rê gand e c'hoar Madelen, luskellad a rê e vreur bian nevez hanet, Yannig, ha seder adarre ar pôtr. Dizeñvor? Ne oa ket; bugelig.

Rankoud a eure ozah an ti mond adarre war ar mor: red e oa dezañ beva e diegez. Ét eo d'an Haor-Nevez. Eun tam-mig arhant a zigasas d'ar gêr, kent kuitaad ar porz. Hag abaoe... abaoe... Displijadur, dienez, enkreuz e-barz an ti... Poan da Izabel evid pourvezi d'he bugale. Lavaret ho-pije penôz ar pôtr a houzañve tristidigez e vamm, eñ diagent ken seder, atao o sutellad, o kana, bremañ gand Madelen ha Yannig, pluchet en eur hogn bennag, sioul, sioul evel aon dezañ pa wele e vamm ankeniet, an dour war he daoulagad. N'oa ket hep abeg ankeniet Izabel: tri vugel he-devoa, unan all ah-a da henel, brazez ahub (3) e oa; ha Katellig eun nozvez a deuas er bed.

(2) **Aoned**: anoued, yenijenn.

(3) **Brazez ahub**: dougerez prest da wilioudi.

En ampoent ma wilioudas Izabel, dre ar bourk e rede ar brud penôz lestr Kola Fañch ar Gouez a oa bet kollet, korv ha madou hag all. Peñse an-nevoa grêt, en eun tu bennag, war ôchou mor ar Su. Gwir? Gaou? Den ne ouie. Ar heloiou a gerz, a red buan, ha dreist-oll ar heloiou fall. Hag eun nebeud devezioù goude ma oa bet Izabel en iliz, an ôtrou person a deuas d'he haoud; war var e oa ar paour-kêz plah, abaoe eur pennad amzer, ha, pa welas ar person oh antreal e-barz an ti:

— Goud a ouzon, ôtrou person!... Goud a ouzon!... (hag e kouezas war an oaled, liou ar maro en he herhenn)... Goud a ran, ôtrou person!...

— Doue ho sikouro, Izabel!... Ne zilez ket e vugel reuzedig: skuilla a ra e vadelez war e grouadur glaharet... Dou-jit d'e youl, Izabel... Pedit anezañ da rei deoh e skoazell...

— O va fried, va fried paour, va fried kêz!... Truez, va Doue!... Truez!... a zamante Izabel, he bugaligoù endro dezi o ouela. Truez, va Doue!... evid va fevar bugelig, va fevar bugelig emzivad!...

— Evite, nerz kalon ho-pezo, Izabel, evid ho pugaligoù, a lavare dezi an ôtrou person.

Paour-kêz bugaligoù!...

An amezien, aketuz ouz glahar hag enkreuz an intañvez, a deue d'he hlemm, d'he huzulia, d'he alia.

— Kaled eo ho planedenn, Izabel!... Pevar bugelig!... Intañvez!... paour-kêz! N'eo ket awalh koll an dud, hag ar re a jom war o lerh!... Pevar bugel ha bara da rei deze?...

— Evelkent unan a re ho-peus, Izabel, eme unan euz ar glufaned. Kasit anezañ war ar mêz, pe d'an ospital; n'an-eo deoh na kar na par...

— Ya, ya, kasit anezañ d'an ospital: bravoh e vo dezañ eno, ha c'hwi ho-po unan a nebeutoh da vaga... Anez da ze?... Dour ho-po da eva, dour a zo er puñs. Bara? A beleh? Salver Jezuz, a beleh?...

Bilzig a zelaoue, hag a gleve prezegenn ar gwragez, endro da Izabel. Selled a eure etrezeg e vamm. Homañ, goustadig, a zachas ar pôtr beteg enni, Madelen ha Yannig a oa krog en he zavañjer, Katellig a oa kousket en he havell:

— Evuruz, maleüruz, eme Izabel dre he daerou, unanet om bet gand Doue, unanet e vevfom hag e varvfom!...

Ha daerou ar vugale, mesket gand daerou ar vamm, a ziellas an testeni.

TIEGEZ IZABEL

Izabel a oa plah a benn hag a galon. Red eo dezi beva, arabad eo dezi en em leuskel da vond gand ar glahar. Nann! nann! Red eo dezi delher penn, enebi, stourm, gonid he bara hag hini he bugale.

An daou vianna er gêr, hi gand Bilzig ha Madelen ah-aio d'an ôd, da vigorneta, da goukousa (1), da veskla, ha, pa vo mareou braz, da ormela ha da deureuka (2). Ar hregin dastumet, hi ah-aio d'o gwerza, war ar mêz, da Wimaeg, da Lanneur, da Blouigno ha da Werrand. Eur bouteg war he fenn, Izabel ah-ê, dre ar homananchou, ar mereriou hag ar bourkou, ha peurvuia gwerzet he boutegad, e teue ganti en distro pastellouigou kig, eun tamm lard-teuz, eur voza-dennig vleud, eur gôlenn-bome, eun irvinenn, hag, en he godell, eur gwennegig bennag.

E-pad ma veze oh ober he zro Bilzig a dôle evez ouz ar re all.

— N'o huita ket, n'o dilez ket! a gemenne Izabel d'ar pôtr. Ro he sugell da Gatellig... gwisk e zillad da Yannig... ha tôl evez mad oute... Diwall aneze!...

Nehamant d'ar vamm, evel just, ha n'oa ket hep abeg. Arôg kuitaad an ti, Izabel a roe d'ar vugale peb a skudellad vad a zoubenn al lard, trawalh evid mond beteg kreisteiz, da Gatellig e roe da zena.

Et ar vamm en he hent...

Pa zihune ar bôtrezig, Bilzig a roe dezi he zugell, ha, pa ouele, e luskelle anezi, hag, evid he lakaad da devel, goustadig e kane dezi, evel d'ar vugaligou, ar ganaouennig:

*Tao ! tao ! biannig,
Ha me a gano dit,
Na da hortoz da vammig
Da rei bronnig dit.*

(1) **Koukous**, -enn : coques. **Koukousa** : klask koukous.

(2) **Teureug**, -enn : oursins. **Teureuka** : klask teureug.

*Da vammig ' zo dañserez,
Da dadig ' zo meoier,
Ha te ha me, biannig,
A ranko chom er gêr.*

Pa veze brao an amzer, kousket Katellig en he havell, tomm an heol, Bilzig hag an daou all ah-ê da c'hoari war an ôd, en trêz, gand ar vugale all. Ha da redeg, da houren, da vera o horv hag o dillad (3). Eur wech an amzer, Bilzig a deue da weled hag-eñ e oa dihun ar bôtrez. Hag adarre d'an trêz. Naon deze ha skuiz, neuze an trikon touteg (4) a deue d'ar gêr, hag, a-wechou, o mamm a veze er gêr, o hortoz. Droug a oa enni pa gave he hini diweza o wac'hal hag o harmi, sklaset he zreid en he gwele. Med gourdrouz ha gourhemenn a dreuz buan penn eur pôtr na nao na deg vloaz, hag, antronoz vintin, n'he-deze ket Izabel pignet ar hra, gand he boutegad meskl, ma veze Bilzig hag an daou all ouz heul kañfarted ar bourk. Madelen ha Yannig a zache anezañ gante.

— Deus, Bilzig, deus... Katellig ne zihuno ket!...

Ha Bilzig en em leuske da vond, a-enep urz ha gourhemenn e vamm. Homañ n'oa ket nehet da weled he bugale o redeg dre ar bourk rag, pa 'h-ê abred euz ar beure da werza he boutegad, peurliesia n'he-deze ket amzer da gem-penn aneze.

Pa chome er gêr, e roe deze he ôtre da vond da c'hoari gand re all, e-pad ma veze oh ober he ziegez. Neuze e veze skubet an ti, gwalhet an dillad, puret an annez, dreset ar brageier, al lereier, an hivizou, ar rochedou, neuze e veze gwalhet o dioujod, o daouarn, kribet o bleo d'ar vugale; hag evelse an ti hag ar vugale a veze kempennet pa chome ar vamm er gêr.

Pa veze divalo an amzer, c'hoant n'o-doa ket ar vugale da vond da redeg. Bilzig, aketuz da zelher dever enne, a gane deze, a c'hoarie gante; pecherou (5) a rê da Gatellig evid he delher sioul ha seder. Tapoud a rê troad kleiz ar bôtrez hag e harlinke dezi seul he zroad:

— Hemañ eo ar pradig e-leh m'an-nevoa peuret ar hadig!

Etre e viz-meud hag e viz-yod e save biz-meud troad Katellig, ha deuz an eil d'egile:

(3) **Mera o horv hag o dillad** : en em ganna a reent ha regi o dillad.
(4) **Trikon touteg** : an tri bugel. Pa vezer o c'hoari kartou, « **an trikon** » eo an tri Roue. **Touteg** : mezeg, aonig.
(5) **Pecherou** : allazigou.

*Hemañ henn gwelas,
Hemañ henn redas,
Hemañ henn tapas,
Hemañ henn debras !*

Ha, pa errue gand ar biz-bian :

*Hemañ eo ar bizig bian bian kamm
N'an-nevoa bet tamun digand e vamm,
Tamm digand e vamm !...*

Hag e harlinke dezi seul he zroad, ha Katellig a c'hoarze, a c'hoarze ken a reude, hag ar re all evelti.

— Gra deom bremañ eur c'hoari all! a lavare Madelen.

Aliez 'e teue bugale an amezeien da c'hoari gante, ha pep hini a roe e ali.

— Bia bia bia la!

— Nann! nann!... ar galafeterenn!

— Al logodennig! a lavare unan all.

— Alo! eme Bilzig: Bia bia bia la... Lakait amañ war an dôl pep hini e viz-yod en e zav.

Grêt gante eur helh ha ledan, Bilzig a droe e viz e kreiz, en eur lavared:

*Bia bia bia la
Piou a yelo da gika ?
« C'est la brunig »
A Bempoulig
He-deus torret he askellig
Rastell, dirastell,
Tenn da viz er-mêz ar ganell
Pe m'henn troho gand va hontell.*

Gwaz d'an hini a veze tapet dezañ e viz! Pinienn dezañ ha petore pinienn?... Mond da bokad deg gwech d'an dre-zenn-bod pe d'ar billig, da denna gwinn euz an treust, da fluta moh munud. Pinienn ar bôtred ne veze ket ken kaled.

Skuiza a rê buan ar vugale gand eur c'hoari, ha da unan all. Ar galafeterenn!...

Madelen a ziskroge ar sklisen euz an tach, eur bôtred a azeze war an oaled; ar pôtr a veze dindan, a lakae e benn war barlenn ar bôtred, stignet mad e vragou war e beñsou. Hag an tôliou sklisen da sklokal dezañ war e reor. Dao dezañ heb droug na poan!

*Breven, breven, mab da breven
Gand piou emañ ar galafeterenn?*

Hag ar sklisen a rede euz an eil dorn d'egile. Ha c'hoar-zadeg, va Doue! pa na zivine ket gand piou e veze ar sklisen.

Goude e teue tro c'hoari al logodennig. Boz war voz uhel-uhelloh hoaz ar vugale a zave o daouarn.

— Peleh êt al logodennig euz an toull-mañ?

— En toull all.

Hag evelse beteg an hini diweza.

— Peleh êt al logodennig euz an toull-mañ?

— E toull ar bern plouz.

— Peleh êt ar bern plouz?

— Devet gand an tan.

— Peleh êt an tan?

— Lahet gand an dour.

— Peleh êt an dour?

— Evet gand an ejenned.

— Peleh êt an ejenned?

— Da glask peb a vaz skô da ganna gwreg ar go! gwreg ar go!

Ha pep hini da skei war daouarn an eil egile. Ha skrijadeg, c'hoar-zadeg!

Hag evelse e tremene an amzer pa veze divalo, keit ha ma veze Izabel o werza he boutegad kregin.

Pa veze brao? Ahan! pa veze brao?... Salver Jezuz ben-niget! Al laboused êt da nij, ankouaet gourhemennou ar vamm, ankouaet he urziou; an heol, an trêz, ar mor, ar bagou, ar c'hoariou ha me oar pegement a draou all a entize, a heskine o c'hoant. Fall a rênt, arabad eo lavared nann. Siwaz! Otrou Doue, on zikourit, mirit na 'h-afem on-unan da goll warlerh ar menozioù goullou, ar pedennou didal am-eum bet dibunet dirag ho furnez!

War ledander ar bed, e donder an neñvou, na kavet hoh-eus-hu eur galloud nerzuz awalh evid trehi war ar c'hoant? Kreñv eo ar garantez, a lavarer, ken kreñv hag ar maro! Ha pegen muioh on oll zechou all!... Klevit aneze, mad pe fall, endro d'ho kalon o kana, o richana, o klemm, o hourdrouz, o hourhemenn pe o pedi. Enebi a rit-hu oute? Trehet hoh-eus-hu war darn aneze?... Selaouit, ha na glevit-hu ket eur vouezig flour o kana he hanaouennig? Dinerza a ra ho kalon

hag ho spered, ha setu c'hwî gonezet, goustadig, goustadig eh-it, d'e heul, war an hent ye (6), med ken lufr, ken rampluz ar plijadureziou! Distrei war ho kiz a fell deoh? Rampla a ra ho troad, n'oh ket evid enebi, c'hwî, koulskoude, den a skiant, marteze den fur. Hag e fell deoh penôz eur bugel evel Bilzig, eur pôtrig dibreder, a vefe evid harza ouz e c'hoantegeziou, ouz e siou, ouz e dechou pe ouz e heugennou (7). Kriz a vefe al lezenn evid eur bugel, leusk (8) ha dall evidoh-hu, tud a bouez hag a oad?...

Eun devez 'ta, Bilzig ah-eas gand ar re all da c'hoari, ha, pa erruas ar vamm, goullou an ti: droug enni, evel just, skuiz e oa hag o paouez kleved tamall he bugale da veza bet, gand kañfarted all ar bourk, o laerez piz ha fao e park ar Mestrezeg. Ha beh war Bilzig!

— Penôz, mihieg, foreant (9) 'zo ahanout, o laerez out bet, ne peuz-te ket a vez?... E-leh tôle evez ouz ar re vian, eh-ez gante da redeg, da dourvarc'had (10); gante eh-ez er bagou bian, me oar, beuzi a ri aneze!...

Hag e gwirionez, re aliez, pa ne veze ket o mamm er gêr, e weled aneze o ruzata war ar herreg, o haloupad war an ôd, gleb-dour-teil, pe o ruza o boutou, leun a frigas hag a fank war an henchou.

Evelkent gaou a oa bet lavaret d'ar vamm: pizenn na favenn n'o-devoa tañvet en deiz-se; med kaer o-devoa bet Bilzig hag an daou all stourm ouz o mamm e oant bet tamallet heb abeg, Izabel a dapas krôg en eun tamm kordenn voan.

— N'am skoit ket, mamm Izabel, me ho ped, n'am skoit ket, en an' Doue, n'an-in ken d'an trêz, me chomo er gêr.

Ne anzavas ket penôz, pa zileze an ti, peurliesia e veze evid ober plijadur d'e c'hoar ha d'e vreur. Eñ ne c'hoarie ket, ral e veze, Katellig atao gantañ war e choug. Izabel en em zouete a gement-se; eun tôle pe zaou he-deus roet d'ar pôtr, truez dezi outañ.

— Paour kêz bugel reuzeudig!

Ha, gand korn he zavañjer, e sehas e zaerou:

— Paour kêz bugel!

Eur pokig dezañ. Hag ar pôtr:

— O, mamm Izabel!

(6) **Hent ye** : hent êz, laouen.

(7) **Heugenn** : froudenn.

(8) **Leusk** (laosk) : dizamant.

(9) **Foreant** (forean) : kantreer, lampoun.

(10) **Tourvarc'had** : kantren, lampounad.

Hag e ouele gwalh e galon.

Ne raio ken, nann, ne raio ken, a-grenn, er gêr e chomo, n'an-aio ken er bagou, n'an-aio ken da haloupad. Gand e vreur hag e c'hoarezed, en trêz e c'hoario, pa vo brao, hag er gêr pa vo divalo. Touet an-neus, kreñchet an-neus en e zorn deou, ha savet anezañ dirag ar groaz. Pôtr a galon hag a zoare, med, siwaz! nemed eur bugelig n'an-eo! Ha petra a fell deoh? Eur pôtr deg vloaz n'an-eo ket evelkent eun den grêt. Kalon vad an-nevoa, karantezuz e-keñver e vamm, e vreur hag e c'hoarezed; kared a rê aneze a-greiz e galon: siwaz! ankouaüz e oa ha, pa veze brao an amzer, tomm an heol, pa wele ar vugale all o c'hoari en trêz pe er bourk, kelennou, urziou, gourhemennou Izabel a-nebeudou a zile dre e goun.

— Deus da c'hoari! a lavare dezañ ar gañfarted all.

— Deom d'an trêz, Bilzig! a hourgomze Madelen ha Yannig.

— Brao e vo du-hont, war an trêz, c'hoari gand ar re all! a c'houeze dezañ, en e skouarn, huanadenn ar c'hoantegez.

Ha Bilzig, nebeud ha nebeud gonezet, Katellig war e choug, an daou all ouz e heul, ha d'an trêz, ha da c'hoari. Rebech a ra dezañ e goustiañs. O! ne vo ket pell: bremaig, dioustu e vo distro. Bremaig, dioustu, pegoulz? Ankounac'haet an amzer dremenet. Ankounac'haet, o! na pebez ger! O ankounah, evuruz an hini a zarempred, evuruz an ene eh-eus displeget da vrumenn madelezuz warnañ.

Ankounah, bugelig Doue, pleg da ziuouaskell, deus war va barlenn, harp da benn war va halon, deus ha me a gano dit. Luskellet gand va hanaouenn, kanaouenn va buez tremenet, serr da zaoulagad, kousk, bugelig, kousk da benn war va halon.

Chom aze, evid mired na deufe ar houn, euz goueled va eñvor, ar houn goapêr ha chifuz da ziskouez din gand e viz, war an hent am-eus heuliet, ar bleuennou n'am-eus ket bet kuntuillet, ar frouez mad ha doureg am-eus bet disprizet. Kousk war va barlenn, ankounah, bugelig Doue, evid na deuo ken ar houn... Ha koulskoude, koulskoude, dihun, ankounah, dihun, dihun!... Sav war da ziuouaskell, kê! kê! Lez, lez ar houn, ya, lez ar houn da sklerijenna va menoz.

Na da guz-heol e vuez, piou na gar, arôg mond da gousked, lezel ar houn da vleina e spered a-uz e zeveziou evuruz? Ha, war dachenn ledan ar vuez, piou na gar, eur wech hoaz, dibaba e-touez ar bleuniou dic'houez ar bleuennigou a c'houez vad, o-deus sklerijennet e hent ha sederaet e galon?...

BILZIG HA PER AN OTROU PERSON

Bilzig, ankouaet 'ta gantañ e le, eun devez, brao an amzer anezi, êt Izabel en hent, Katellig war e skoaz, Yannig krog en e zorn, ha Madelen war e lerh, ah-eas d'an trêz.

Eun toullad mad a gañfarted a oa eno unanet, pôtrede ha merhed; darn a oa o c'hoari patati, darn all o houren; ar merhed darn aneze en o fluch, a c'hoarie eiz meinigou, hag ar re all gand tri pe bevar bôtr a oa o c'hoari mouchig-dall.

E-pad eun diskuizadenn, unan euz ar bôtred a lavaras :

— Klevit 'ta; ar Pôtr-Ru, deh d'abardaez, a zo bet e gwezenn ber an ôtrou person... Dare eo ar per, ha mad; ar Pôtr-Ru a roas unan din da dañva... Mad!

— Eom, eme Fieg ar Moal, eom da dañva aneze!... Ar person n'emañ ket er gêr, gwelet am-eus anezañ, eñ hag e gure, o sevel gand ar hra. Êt int, marvad, da leina d'ar maner.

— Ar garabasenn, eme unan all, a zo o kanna, e-tal Lenn-Hireg, ha Pipi, ki ar presbital, a zo ganti!

— Eom da dañva ar per!

— Ya, ha ma vem tapet o laerez? eme Bilzig.

— Tapet? Diod 'zo ahanout!... Gand piou?... N'eus den en ti, eom!... Aon ah-euz-te, marteze?...

— Aon, me?... Aon, me?

Êt int, pôtrede ha merhed hag all, a-hed an ôd, evid na vijent ket gwelet, beteg garz skô ar presbital. Daou, ar re hardisa, Jojo hag ar Pôtr-Ru, a grasas er wezenn; darn abafoh, finnoh marteze, a guntuille hag a zebre spezard, kastrillez, da hortoz ar per; darn all gand ar merhed a azezas war ar voger. Pep hini a oa krog : mad per an ôtrou person.

Erruoud a eure, d'e dro, Bilzig gand an tri all.

— Mad ar per, pôtr! Mad ar spezard! Mad ar hastrillez!

— Ro deom peb a hini, Jojo! eme Bilzig.

— Tôl deze peb a hini, a grias Oulier da Jojo, peb a hini!

— Dal!

Ha Jojo a stlapas eur vozad da Vilzig. Roet a zo bet deze

ive eun toullad spezard, ha da Vadalen eur hodellad kastrillez. Hag oll evuruz, ankouaet gante o laeroñsi, ha trefuet, krial a rênt, ha c'hoarzin ha skrijal! Kement ha ker bian, ken ma deuas ar zakrist koz, hanter vouzar koulskoude, d'o hleved. Hemañ a oa deut d'ar presbital, da ober petra?... Kent mond da zon an Añjeluz. Na padal ma welas ar bôtred el liorz, hag eñ da grial, diwar-bouez e benn!

— Al laer! al laer!

Eun troad skubellenn en eun dorn, eun dreujenn gôl en egile, hag eñ d'ar bôtred, d'al laeron.

Ar re-mañ a oa skañv o zreid. Houp! Eul lamm, ha d'an traoñ euz ar wezenn, eul lamm all, ha, dreist ar voger, pe a-dreuz ar harz, er-mêz al liorz. Ha da redeg!...

Darn aneze evelkent an-neus tizet ar zakrist. Piou?... Ar re gabluz?... Ya marteze... Bilzig hag e drikon.

Pa weljont ar zakrist, eun trohad baz gantañ e pep dorn hag eñ o youhal forz e vuez : « Al laer! » an tri vogel, spontet, a deuas da glask skoazell ha repu digand o breur Bilzig, aon deze. Ha Bilzig hualet, sparlet gante, a jomas eno, sonnet dirag ar zakrist. A! ma vije bet e-unan!... Ya, med n'oa ket e-unan.

Chom a eure 'ta Bilzig gand e vreur hag e ziou c'hoar, ha pa lakaas ar zakrist e zorn dezañ war e skoaz, na troad na dorn ne fiñvas.

— Ahanta 'ta, marmouzien! mihieien! boued ar gounnar!...

O fevar int êt gand ar zakrist.

— N'eo ket me! n'eo ket me! a valbouzenne Bilzig.

— Heñ! heñ! heñ! a hlaourenne an tri all.

Pevar maltouter a oa o c'hoari pilpot, 'hed moger ar vered, dirag dor-dal ar presbital. Pa glevjont ar zakrist o krial : « Al laer! » buan ha buan o-deuz dilezet an tôl, daoust dezañ da veza jil ha da veza arhant (tri dôl zao!) war ar vil (1). An nor a oa moraillet, med kement a dôliou-treid o-deus roet dezi, ken m'o-deus he zorret. Gwelet gante al laeron : Bilzig, Katellig krog en e choug, Yannig krog en e zorn deou, ha Madelen krog en e borpant, hag o fevar o vlejaj evel pevar leue. Hag ar zakrist eun tamm foueltrenn baz gantañ e pep dorn, ouz heul e laeron. Ar valtouterien, souezet oll dirag eun hevelep arvest, n'int ket bet evid mired da c'hoarzin, ken a reudent :

— Al laeron! al laeron!

(1) **Jil an tôl** : Pa vezer o c'hoari pilpod, an tôl a zo gwenn p'emañ ar vil (ar galoch) stok ouz ar paled.

Ar zakrist, dirag an nor didalbennet :

— Santez Vari, mamm da Zoue!... Petra lavaro an ôtrou person...

Darbet eo bet dezañ simpla, an dreujenn gôl a gouezas euz e zorn.

P'o-deus bet klevet ano euz an ôtrou person, ar valtouterien, peurvuia lañchennet mad koulskoude, peg o zeod ouz o staoñ, ha kuit ha buan. An ôtrou person!...

Petra raio ar zakrist gand e laeron? Kreisteiz eo, poent eo dezañ mond da zon an Añjeluz.

Eur grabanad da Vilzig, eun têt-troad dezañ en e reor :

— Marmouz fall! loudig... me lavaro d'an ôtrou person!

Ha Bilzig, seder meurbed, a deuas d'ar gêr, paet an-nevoa, ha mad, e berenn. Echu ar gôz. Echu ar gôz?...

Souezet an ôtrou person dirag dor-dal ar presbital.

— Torret an nor ! a vouskomze ar person.

— Torret an nor ! a fredone ar hure.

Ar garabasenn, distro euz tal al lenn, a deuas da gaoud he ôtronez :

— Petra zo c'hoarvezet, Frañseza ?

— Al laer ! al laer ! ôtrou person.

— Al laer en-deus torret an nor ?

— Nann, ôtrou person.

— Piou 'ta !... Piou ?

— Ar valtouterien.

— Ar valtouterien? eme ar person, strafuillet oll.

— Ya, hag ar zakrist.

— Ar zakrist?... Petra ? Ar zakrist !... Torret va dor !... Al laer, ar valtouterien, ar zakrist, evelato petra zo c'hoarvezet amañ ?

Ar zakrist an-nevoa gwelet ar person hag ar hure o tiskenn d'ar bourk, buan ha buan e tilezas e stern gwiader, hasta a reas afo da zond da gonta deze an doare. Penn-da-benn an-neuz displeget anezi dirag an ôtrou person...

Êt int, ar person, ar hure, ar zakrist, ar garabasenn hag, evel just, Pipi war o lerh, d'al liorz. Pebez arvest ! Hejet ar wezenn ber, mahet an douar tro-war-dro, flastret ar harotez, an ognon, ar pour, an irvin, kuntuillet ha dideliet ar hasi, ar hastrillez hag ar spezard.

Droug en ôtrou person, ken a verve :

— Piou ?

— Kañfarted ar bourk, ôtrou person ! eme ar zakrist.

— Piou ? Piou ?

— Bilzig a oa gante, n'oa ket el liorz evelkent, en diavêz e oa : flatal a raio ar re all.

— It d'henn kerhad, ha digasit anezañ ganeoh !

Ar person an-nevoa tremenet eun hanter devez, laouen meurbed, e ti an ôtrou Kont. Eul lein vad an-nevoa debret : istr, eun alumenn viou, eur pesk (eun doubloudenn) (2), eun tamm kig-leue poazet en amann, hag, evid an diwez, eun tamm gwastell ar Rouanez, jistr mad ha gwin Bourdel da eva, ha kafe goude lein... N'oa ket figuz an ôtrou person! Bilzig, ma vije bet eno, en e leh, an-nije bet labouret mad ivez ouz têt an ôtrou Kont, hir ha lemm meurbed e oa e zent, don e gov ha direvuz (3). Ya, med n'oa ket bet pedet d'ar pred, paour-kêz Bilzig!

An ôtrou person 'ta a oa evuruz meurbed o tistrei d'ar gêr, hag eun toullad kañfarted...

Setu ar zakrist ha Bilzig; hemañ a grene en e billou.

— Ahanta 'ta, pôtr, eme an ôtrou person, ha divergont, te eo al laer?

— N'eo ket me, ôtrou person.

— Piou 'ta?

— N'eo ket me.

— Evelato piou? Lavar piou.

Kaer an-neus bet an ôtrou person goulenn digand ar pôtr piou a oa al laer pe al laeron, ano ebed na dennas dioutañ.

— Tôlit anezañ er-mêz evelato!

An neventi-mañ en em skignas dre ar bourk: al laer a zo bet er presbital!

An ôtrou Kont, p'henn klevas, a deuas da houd an doare.

— Laerez an ôtrou person!...

An ôtrou a lavaras d'e vevel:

— Buan, it da gerhad barner Tremedern. Arabad eo leuskel ar gañfarted da ober o fennou skañv, red eo rei deze eur gentel hag a bego oute. Gwialenn ar barner a deuo a-benn aneze.

Barner an ôtrou, an ôtrou Kerjantjili, eur pôtr yaouank koz viret, a oa anavezet gand an oll, ha dreist-oll gand kañfarted ar vro; hag hemañ ivez a anaveze mad aneze, ne

(2) **Toulboudenn**: turbod

(3) **Direvuz**: a zebr euz pep tra.

oa ket evid o anduri dirag e zaoulagad. Goap a rênt outañ, p'an-deze evet eun dakadennig, eur bannahig, a re (hag aliez ar bôtred o-devoa abeg da ober goap outañ); difreza a rênt anezañ : monkuz (4) e oa eun tammig; ha, pa veze tommet mad d'ar pôtr koz, e redent war e lerh, hag eh-ênt da ambroug anezañ, en eur gana:

*Kerjantjili, ar barveg gwenn,
Galochou braz, porpant lien.*

Esa a rê tapoud anezo; siwaz! ponner e oa e halochou, hag eh-ê gand e hent, en eur hrozmolad:

— Ar wialenn! ar wialenn, kañfarted!

Divezo ar pôtr koz, ar vugale ne dostaent ket outañ, n'an-ênt ket, e hellit va hredi, da houlenn digantañ e aluzenn, rag, pa zigoueze dezañ tizoud unan bennag aneze, ahan! neuze ar wialenn a c'hoarie; ha, pa veze eur hlemm eneb hini pe hini euz ar bôtred, gwir pe haou, ar wialenn ah-ê endro. Brezel 'ta etre ar vugale hag ar barner. Kemenn an ôtrou Kont a dalveze urz d'ar pôtr koz: ar wialenn a labouro!

Ar barner a ziskennas ar hra gand e zaou archer: unan euz ar re-mañ a yeas e pep ti.

— Urz d'ar vugale da zond d'ar presbital, a berz an ôtrou barner!

Trefu er bourk, enkreuz e kalon ar gañfarted... A! mar gallfent!... Ya, med re ziwezad eo, ne hallfont ket tenna, euz fin foñs o bouzellou, ar per o-devoa debret. Siwaz! pell, re bell e oa erru ar per-ze. Ha pegement a blijadur o-devoa gouzañvet o tastum, o kuntuill, o tebri ar per, ar hastrillez! Ha bremañ... Ha mar deo gwir, evel ma prezeg an ôtrou person, penôz ar binijenn a vo muchet war ar pehed... Ar wialenn ah-aio war-rôg.

Laouen ha seder meurbed e oa an ôtrou barner o tiskenn ar hra, gand e zaou archer.

(4) **Monkuz**: komz a rê dre e fri.

V

BILZIG DIRAG AR BARNER

Trouz hag enkreuz er bourk; petra eh-êr d'ober d'ar vugale? Hag ar vugale hag o herent d'ar presbital.

Evel just, Bilzig a zo bet galvet ar henta dirag ar barner. Hemañ a oa azezet ouz tól ar zal vraz, en e gichen, a-zeou, ar person, a-gleiz, ar hure, an daou archer, hag ar zakrist e toull an nor, hag er-mêz, el liorz, ar vugale hag o zud, war an dôl, dirag ar barner, diou wialenn ôzil.

Bilzig a zellas a gorn ouz ar barner, hag a-dreuz ouz an diou wialenn.

— Lavar din, mabig, ha te zo bet e gwezenn ber an ôtrou person?

— N'on ket, ôtrou.

— Ma, n'eo ket te, mabig, a zo bet tapet gand ar zakrist o tebri per?

— Geo!

— Ar per-ze, marteze, a oa kouezet o-unan ez kenou? Ger ebed.

— Respont, mabig, ne vo ket grêt a zroug dit, ma vez fur... Lavar ar wirionez. N'out ket bet er wezenn?

— Nann, ôtrou.

— Goud a ran, med bugale all a oa eno, ne oas-te ket, moarvad, da-unan, hag anavezoud mad a rez-te ar re all. Lavar piou int?

Bilzig ger ne rannas.

— Me oar ervad eh anavezoe aneze, lavar piou a oa ganit, hag e vi laosket da vond, ha dioustu! Piou a oa ganit?

— Madelen, Yannig, Katellig, ôtrou, a oa ganen.

— Digasit aneze amañ! eme ar barner d'an archerien.

An tri vugelig a oa el liorz o c'hortoz o breur. An archer a dapas krog enne hag o boutas er zal.

Ar person, ar hure, ar zakrist, an archerien n'an-int ket bet evid en em vired da c'hoarzin. Ha da c'hoarzin ive ar re a oa e-barz an antre hag ar re a oa en diavêz. Ar barner

ne c'hoarze ket, droug ennañ, bronduet e ziouchod, fuc'hal a rê!

Eun tîl lagad a gorn d'an archer:

— Krogit ennañ!... C'hoarzin goap ouz ar varn, ouz ar barner! Krogit ennañ!... ar wialenn!...

— N'am skoit ket, ôtrou, n'eo ket me!

— Ober goap! goap!... Lavar piou?

Ger ne respontas ar pôtr.

Eun archer a dapas krog er wialenn.

— Piou?... Lavar piou.

— Lavarin ket.

— A! a! 'Lavari ket?...

Poan a zo bet gand ar pôtr, gwevn e gorv evel eur zilienn; kroget an-neus gand e zent e dorn eun archer. Setu eñ war an dôl, liammet troad ha dorn.

— Lavared a ri?...

Ger.

Eun tîl!

En êr ar wialenn a c'hwiban. Eur skrijadenn!

— 'Lavarin ket! 'Lavarin ket!

Ar wialenn a bege 'ouz krohen e beñsou: unan! daou! tri! pevar! pemp!

Semplet ar pôtr... Pa deuas ennañ, endro dezañ e vreur hag e c'hoarezed o ouela, dirazañ ar barner hag ar person.

— Penneg out, mabig, penneg; imor fall a zo ennout, ijin fall, 'm-eus aon. Diwall, mab, diwall, ha dalh mad, din-dan eñvor ar homzou fur ah-an da zeski dit:

*Nep na zent ket ouz ar stur
Ouz ar « wialenn » a raio zur!*

— N'eo ket me! n'eo ket me! a advouskomze ar pôtr, en eur valbouzenni, n'eo ket me!

— Prens da vragou, hag er-mêz!

Bilzig a grogas e dorn Katellig, an daou all d'e heul, liou ar maro en e gerhenn. Ankeniet, e galon a lamme en e greiz, poan gantañ o tenna e alan, an daerou o ruilla war e ziouchod.

War e lerh, pemp pe c'hwec'h pôtr all o-deus tañvet blaz ar wialenn; hini aneze ne zalhas penn ouz ar barner. Hag eñ hag ar person o-deuz klevet penn-da-benn an doare, klevet ive penôz Bilzig n'an-nevoa bet nep perz el laeroñsi;

debret an-nevoa bet eur berenn, gwir eo, med skañv e oa e behed, kriz ar binijenn.

— N'eus forz! eme ar barner; ken gwaz an hini a zalh ar zah hag an hini a laka e-barz.

Med an ôtrou person n'oa ket ken skañv e venoz, ha meur a wech, ha pell goude, pa wele ar pôtr, a rê eun distro war an arvest c'hoariet en e zal, hag e goustiañs dezañ a rebeche gwialenn ar barner. Oll bugale ar bourk an-nevoa gallet doñvaad, Bilzig biskoaz. Bilzig, pa wele an ôtrou person, a lakae e zorn war e beñsou, ha da redeg: kaoud a rê dezañ, seblantoud a rê dezañ e houzañve ar wialenn war e grohen.

Evid ar barner ar wialenn a oa e lezenn e-keñver ar bôtred, ha na Bilzig nag e binijenn n'o-devoa war daolenn e eñvor kleuzet o aroudenn. Dir e galon eneb an druez; e-pad e vuez a varner, gwelet an-nevoa gwaz, pegen gwaz, ha gwasoh hoaz, hag e goustiañs, pell amzer a oa abaoe, ne fiñve ken en e greiz; maro e oa ar preñvig bian-ze dirag pinijennou ken dister: eun tîl gwialenn!...

Pa erruas Bilzig er gêr, Izabel a oa o ficha lein.

— Jezuz! Petra 'zo c'hoarvezet ganeoh-hu?

Hag ar vugale da ouela.

Izabel n'oa ket bet beteg ar presbital, goud mad a rê penôz Bilzig n'an-nevoa ket laeret, ha n'oa ket deut en he hredenn e vije bet skourjezet. Poan galon dezi dirag daerou he fôtr.

— Na ouelit ket, bugaligou, na ouelit ket, paour kêz pôtr!... Plega, va bugelig, pe derri!...

— N'eo ket me, mamm Izabel, n'eo ket me!...

Ha ne oad ket evid tenna netra all deuz e benn. Skourjezet e oa bet heb abeg, n'an-nevoa ket laeret. Debret an-nevoa eur berenn, laeret n'an-nevoa ket.

BILZIG AH-A DA GLASK AN ALUZENN

Deut an hañv, hag evid Izabel an amzer a zienez, e-pad an hañv ne vez gwerzet na meskl na bigorned: netra da honid er vro arôg an east. Red eo deze beva koulskoude; mond a rafont, o-fevar, da glask an aluzenn.

E Breiz-Izel, e vezer mad evid ar paour, hag e pep ti e vo evitañ eun tamm bara, eun tamm kig, aliez eur skudellad soubenn. Izabel 'ta a heulio ar pardonioù; endro deveziou ar pardon (derhent ar pardon, deiz ar pardon ha deiz an adpardon), an ozah hag ar wreg a zigor frankoh ar yalh, an arh hag an armel. Hag evelse Izabel a zastume tammouigou bara, eur bastellad kig bennag, bosadennou bleud hag eur gwennegig bennag, evid beva e-pad ar zizun. Gand ar pardonioù braz, an aluzennou a veze fonnusoh, med ne gare ket o darempredi: re a beorien a gave war an henchou hag endro d'an iliz. Eno en em zastume, en em unane an dibab euz an dud dilezet gand Doue.

Na bet oh-hu e pardon Sant-Yann-ar-Biz, pe e pardon Kernitron? Ma! ma n'oh ket bet, it, hag e welfet a bep seurt infamet... Gwelit hemañ mahagnet e oll izili, henhont astennet a-hed e gorr war hent ar belerined, a glemm, a derm, klevit-eñ o huanadi war e wall blanedenn: « Ho pet truez ouz eur paour kêz!... Ho pet truez!... » Hennez, azezet harp ouz ar hleuz, e flahou en e gichen, euzuz da weled, a ziskouez e ziuhar debret gand ar gouliou hag ar hontron: « Sellit a druez ouz eun den reuzeudig, c'hwil hag a zo yah ha divahagn. » Darn all, tort a beb tu, kamm, jilgamm, pengamm, a jale, a huanade, a glemme, a derme gwasoh-gwaz en eil eged egile, evid dispega deuz yalh ar belerined eun diner, eur gwennegig bennag marteze.

Deut an noz, tort, kamm ha pengamm ha da redeg, ankouaet gante o gouliou, o hleñvejou, o siou. Ha neuze, e-pad an noz, ho-pije gwelet aneze, merhed, gwazed ha bugale hag all, o tebri, oh eva, evel da valarje, ar hig, ar bara, ar jistr, ar gwin-ardant, gonezet gand o fedennou hag o hlemmou...

Epad ma oa bet Izabel o tarempredi ar pardonioù, Bilzig a reas anaoudegez gand bugale ar beorien all, ha gante

e teskas eun toullad troiou kaer: penôz e veze goulennet an aluzenn pa veze gwreg an ti he-unan er gêr, ha penôz pa veze tud all ganti; penôz heb dispign gwenneg, prena eur vouchenn bara gwenn war dôl ar stal; ha, p'o-deze c'hoant kerent pe berhenn ar vugale da zebri gad pe gonifl, penôz stigma antell pe las er hirtier ma tremene an anevaled gouez. Desket an-nevoa ive en em bilad, hag, a-barz eun nebeudig, hini aneze ne oa ken skañv a droad, ken prim a zorn, ha piladeg anezi (ha se aliesoh eged bemdez), ral e veze ma na deue ket a-benn euz ar bôtred all.

Goude pardon ar Rozera, Izabel, skuiz a gorr hag a ene, o ren eun heveleb buez, a jomas er gêr: deut e oa an amzer da zastum meskl, bigorned ha koukous, ha gweloh e oa ganti gonid he bara, daoust dezañ da veza du ha kaled, o vond d'an ôd, evid gonid anezañ oh astenn he dorn.

Gand he aluzennou — piz Izabel — evelkent he-deus prenet eur garg voude; eur youdenn, mesket gand tammouigou bezin seh, a zalho tommdr en ti, e-pad ar goañv. Bleud he-devoa en he arh, evid lakaad toaz e go; bara a vo ha kram-poez, ha pastellou kig a oa a-zistribill ouz an treust, evid ober soubenn.

Abaoe ma oa intañvez, biskoaz ken pinvidig all ne oa bet. Pinvidig, o! pinvidig, Izabel!... Pinvidigez Izabel?... Daou her, yudal a reont an eil deuz egile. Pinvidigez! Gweñ meur-bed eo ar ger-ze, en em astenn a ra adaleg ar hastell beteg an ti-soul. Ha piou a nivero al leve a ra pinvidigez eun den gloruz ha piou an dienez a ra hini Izabel?

Ma, n'eus forz!... Mond a eure 'ta adarre d'an ôd gand he bugale. Evid ar boutegadou kenta ma werzas, e-leh arhant, gloan e tigasas ganti d'ar gêr. Gloan he-devoa ezomm evid ober dillad dezi, d'ar vugale. Enkardi, neza, ober stamm a ouie; ar vugale o-devo lereier, kamizolennou, kalabousennou gloan tomm. Pitouillez a raio Bilzig e-pad ar goañv noz, pa 'h-efer d'an ti-neza. Izabel a nezo, a raio stamm gand ar gloan hag ar pitouill.

Hag evelse gand poan he horv, nerz he halon, Izabel he-devoa adhrêt he ziegez destrujet gand ar maro, evuruz pa zelle ouz he zi, hag ennañ pevar bugel deut da vad.

BILZIG AH-A D'AN TI-NEZA

Goude gouel Mikêl eh-a merenn er bern plouz hag e teu an neza-noz d'ar gêr.

*Da ouel ar Chandelour,
Ar gegel en dour,
Ar hanteleur en tan,
Hag ar merhed d'o gwele goude koan.*

E-pad ar goañv, Madelen, Yannig ha Katellig, tomm dezo, kousket mad en o gwele, Izabel ha Bilzig ah-ê d'an ti-neza.

An ti a oa tostig da hini Izabel, e-harz eur garreg vraz. Eno en em unane an darnvuia euz merhed ha gwrazez ar bourk, ar re, da vianna, o-devoa eun ober bennag war ar stern. Darn a rê stamm, ar re-mañ a jome e-kichen ar gou-lou-lutig, endro d'an oaled, gand ar wazed koz hag ar bôtred yaouank; darn all a neze gloan pe lin, pe ganab; hag ar re all, e traoñ an ti, o kribina, oh enkardi, o vread pe o paluhad. Pep hini a zigase gantañ e skaoñ, ha pep hini d'e dro e houlaouenn-rousin hag e horzenn lann pe geuneud.

Eno ho-pije klevet ar heloiou, an neventiou: hemañ pe honnez an-nevoa grêt an dra-mañ-dra, Yannig a rê al lez da Varharid, ha Jaketa a oa darempredet gand Per ar Hamm; bag ar Habon he-devoa pesketet diou zousenn siliou; ha kara-basenn an ôtrou person, al Leonardez divalo-ze, a oa deut da veza lorh ral enni, abaoe eur pennadig...

— Fê ganti!...

— Abalamour da betra?

— Ha paneved, a lavare unan all... med peoh...

— Ya, ya, peoh!...

— Ahanta! merhed, echu eo ho ragach?...

— Kontit deom eur gêz bennag, Jarlig koz.

— Ya, ya!... Kontit, Jarlig koz, a lavare dezañ Bilzig, azezet war an oaled, en e gichen. Kontit, Jarlig, kontit, mar plij.

Jarlig a dennas e gorn euz e henou, skei a reas anezañ war ivin biz-meud e zorn kleiz.

— Eur wech a oa, eur wech 'oa ket...

— Êt ar gêz en e roll, eme Bilzig a vouez uhel.

— A! a! Kaoud a ra ze dit-te, pôtr... 'M-eus aon te a zo eur hañfart...

Hag e lakaas e zorn war penn ar bugel.

Jarlig a oa eur martolod koz, bian a vent, krommet gand an oad, atao eur boned becheneg (1) gantañ war e benn (moal e oa), eur haban mezer dreset war e gein; eur hornig berr o krena etre e zent uzet gand an duellenn. Sacha a rê war ar horn-ze e-pad an deiz, ha kaer an-deze sach, tamm moged ebed ne deue: butun karot a implije Jarlig, butun trohet a-skolpennadou, moest an treujennou, diêz meurbed da dana. Ha Jarlig a zache, zache, a greñche, moged tamm ne deue.

Lesanvet e oa an Turluter-ôd, atao o turmuch (2) er gourlenn pe er gerrigi, o peñseal e-touez ar bezin dizol (3). Karet gand an oll, gand ar valtouterien 'lavarant ket... Beva a rê Jarlig koz, an Turluter-ôd, gand e verh heñvel ouz he zad ha Jobig ar marh-pôtr, en eun ti bian, euz tu Porz-Bilieg.

Pa deue Jarlig d'an ti-neza, e ouie ervad penôz e vije goulnet digantañ konta eur gêz. Furchal a rê en e eñvor, hag ahane e tispege tra pe dra; eur gêz, eun divinadell, eun ouidell. Pôtr fin ha goapêr eun tammig.

E gorn, klenket gantañ e godell guz e borpant, Jarlig a greñchas eur wech pe ziu el ludu.

— Peoh! peoh!...

— Pehini a gontin-me deoh?... **Pôtr e Vaz-Houarn; Tignannennig; Roul-Boul; Yann heb Aon; Ar Zilienn Goz; Ar Marh Bian, Qui-c'hac'han-demei-a-rankan (4) ?...**

— Ket! ket! anavezoud a rêr aneze!...

— Unan nevez, unan vrao! a hourgomzas Bilzig.

— Ma! hirio 'ta eh an da gonta deoh penôz eur pôtrig a skiant, Jañ Glaodadig, lesanvet Bilzig, a drehas war ar bleiz.

Bilzig?... Souezet an oll. Bilzig?... Den biskoaz n'an-nevoa klevet ano euz ar Bilzig-se.

Goapêr ar pôtr koz, am-eus lavaret deoh.

(1) **Boned becheneg**: boned gand eun doupenn (bechenn).

(2) **Turmuch**: Klask, furchal er berniou bezin.

(3) **Bezin dizol**: bezin digaset ha lezet war an trêz gand ar mor.

(4) **Kôz ar marh bian**: eur gontadenn tennet euz hini « Psyché », an hini eo. Pa deu ar marh bian er prad, en em lak da c'houirinal: **Quic'hal a ran, demei a rankan** », geriou distreset gand ar marvailler.

— N'eo ket me, Jarlig?

— Oh! nann!... Tad-koz da dad-koz-you... marteze.

Jañ Glaodadig, pe Bilzig — anvit anezañ evel ma karfet — c'hoant dezañ da vond da vale bro. D'ar houlz-se 'ta, pell, pell, pell a zo abaoe (daou vloaz tremenet hag eun draig ouspenn), ar bleiz a bretante dezañ kousked e-unan e-barz an ti, al loened all er-mêz. Ar re-mañ droug enne. E piou ne vije? Droug ive e Jañ Glaodadig, eeun ne gave ket an doare-ze. Hag eñ en hent, da glask ar bleiz. O chom e oa d'ar houlz-se, Jañ Glaodadig ha nann ar bleiz, e-kichen ti Izabel.

— E-kichen ti Izabel? eme unan bennag.

— Ya, pôtr.

— O! n'eo ket gwir, Jarlig koz!

— Penôz n'eo ket gwir? Tad-koz va zad-kuñv an-nevoa anavezet mad anezañ, eur hamarad braz da Jañ Glaodadig, hag hennez eo an hini a gontas din ar gôz.

Den na zislavaras ar pôtr koz. Daoust petra a rê d'ar re a oa en ti-neza, e petore amzer e veve Jañ Glaodadig? Beo e oa bet, ha gwir penn-da-benn an oberou burzuduz ahê Jarlig koz da zisplega diraze.

« — Setu, eme Jarlig, Jañ Glaodadig êt en e hent, savet gantañ ar hra; e tal kichen kra Pennenez, eur hi a firloste e toull dor Lellig an Touz. »

Ar bôtred hag ar merhed, dever enne, a zigore o genou ledan, ken ledan ha reor forn ar poazer.

— E toull dor Lellig an Touz?...

— Lellig an Touz a zo amañ!

— Ma n'am hredit, it da weled.

— Med marteze ive, eme Bilzig, ha ne oa ket eun diod, pell ahane, marteze Lellig an Touz a oa ive tad-koz tad-koz-you Lellig.

— Siket eh-eus da viz en toull: Lellig an Touz, eme Jarlig, a oa tad-koz tad-koz-you Lellig.

« Ar hi — Job e ano — anaoudegez vraz da Jañ Glaodadig, a deuas d'e gaoud, hag a houlenas digantañ — d'ar houlz-se an anevaled a gôzee, abaoe mud int deut da veza:

« — Da behel eh-ez-te, Jañ Glaodadig ?

« Jañ Glaodadig a respontas:

*Da foar, ar foar ar bichibonig,
Du-ze, da goste Koad-an-Noz,*

*Da weled pe 'r bleiz pe me
A gousko er-mêz fenez.*

« — Mar kerez, me 'h-aio ive ganit?

« — Ma! deus 'ta.

« Ha setu int o-daou o vond, war o fouez, war hent Pont-Menou. Brao an amzer, tomm an heol. E diskenn gra ar Horve, arôg erruoud gand ar pont, e weljont eur haz du, du-pod, astennet en disheol war ar hleuz, dindan eur bod lann. Hemañ a hanter-zigoras e valvennou: eun töl-lagad a gorn da Jañ Glaodadig ha da Job.

« — Miaou! miaou!... Pôtred, da behel eh-it-hu evelse?

« — Ni ah-a, pôtr kêz, eme Jañ Glaodadig,

Da foar, da foar ar bichibonig...

« — Miaou!... a lavaras ar haz, en eur vlinka etrezeg ar hi. Mar karit, me a yelo ive ganeoh?

« — Ma! deus 'ta.

« Ar haz a zo disfiuz meurbed; goustadig, e lagad melen digor war ar hi, e tiskennas a-ziwar e gleuz, en eur astenn e izili, gwev e gorr evel hini eun aer.

« — Arabad eo dit kaoud aon, eme Jañ Glaodadig: Job ne raio ket a zroug dit.

« Hag evelkent en em lakaas en tu kleiz da Jañ Glaodadig.

« Erruoud a rejont war-dro deg eur e Plistin, savet gante gra Lanskolva, skuiz an tri beajour. Jañ Glaodadig a azezas, harp e gein en eur hleuz, e penn ar hra, ar hi en e gichen, ar haz war e varlenn. Tenna a eure e gorn, e voest tont hag e zirenn euz e hodell, hag eñ da fumi eur horniad. »

— Keit ha m'emaint oh ober eun diskuizadenn, eme Jarlig, me ah-a da ober evel Jañ Glaodadig.

Gand e wask e tapas eur hlaouenn-dan, ha tan war e gorn. Ha Jarlig da zacha war an duellenn.

Bilzig, war korn an oaled, digor gantañ e henou, a rê pitouillez tre ma halle.

— Karet am-mije ive, Jarlig koz, beza bet gante, gand tad-koz va zad-koz-you.

— Pa vi brasoh, kosoh, da dro a deuio, hag evelte eh-i da redeg da reuz.

E-pad an diskuizadenn, unan euz an nezanerezed a lavaras:

— Eun divinadell. Divin dit an divinadell :

*Kamm, jilgamm, da beleh 'h ez-te ?...
Reor touzet forz 'zo dit-te,
Pa n'on ket euz da di-te.*

Ha pep hini da glask, da skrabad e eñvor. Bilzig a grafe e benn. Jarlig koz a c'houezas dezañ:

— Ar prad ar reor touzet, ar waz ar jilgamm.

— Ar prad hag ar waz! eme Bilzig gonideg.

— « Divin dit a ziskouez e zent da gement hini a deu en ti? »

— An drezenn-bod! a lavaras tri pe bevar.

— « Divin dit a zo bet beo, hag a zo maro, hag a vale war an dud varo. » Piou a zibuno?

Den ne respontas.

— Ar votez-ler, pa vale war eur bez.

— Divin dit — homañ a zo diêsoh, eme eur plah koz azezet war ar fornigell:

*Brazez ar vamm
Brazez ar verh diwar he mamm?*

Tapet berr ar vugale, hag ive ar re vraz.

— Ma setu : Brazez ar vamm, ar varaz leun a zour; brazez ar verh: he hanaf leun a zour; diwar he mamm: leuniet gand dour ar varaz.

— Unan all hoaz, mammig koz?

— Divin dit:

*Daou o toulla,
Daou o selled toulla,
Daou o selaou toulla,
Hag unan o skei war an toull.*

Den ne zivinas an divinadell.

— Ar pemoh, genaouien a zo ahanoh! Pa vez o turnial: daou droad o toulla, daou lagad o selled toulla, dioukouarn o selaou toulla, hag al lost o skei war toull e reor.

Ha c'hoarzedeg!

Keit ha ma oa ar re yaouank o tivinoud, ar gwragez a brezege etreze.

— Klev 'ta, Nana, na gwir e vefe ar pezh a lavarar: Herve

Yann n'an-neus ket gonezet an teñzor kuzet e feunteun sant Haran?... Ar re goz a lavar penôz an Dukez Anna a zo eno koachet dindan « gazul gê », hag an hini he dizolioio hag he zenno ahane, a deuio d'ar gêr pinvidig-mor. Herve Yann a zo kreñv, med, hervez m'am-eus klevet n'an-eo ket bet kreñv a-walh, n'an-eo ket bet evid dougen an Dukez nag evid ganti sevel pazennou ar feunteun.

— Da biou an teñzor? eme Jarlig. E yalh piou e kouezo?...

— C'hwi n'oh ket bet beteg feunteun Sant-Haran, Jarlig koz?... N'oh ket bet o hervel an Dukez?

— Nann, va fôtr, nann! Ne oan ket marvad kreñv awalh.

— Lavared a rêr ive penôz e vezer spontet etre ar chapel hag ar feunteun.

— Eno, el leh all, spontet e vezer dre-oll gand an Teuskou-noz, ar gwrahed, ar gornandoned, ha karigell an Ankou. Med n'eo ket bet roet d'an oll dud o gweled pe o hleved. Ar galloud-se n'an-eo ket roet — eur Ro Doue marvad — nemed d'ar gaezed pe d'an dud bajaneg, d'an dud diwezad.

— A ba! eme Bilzig souezet.

— Selaou 'ta, pôtr, selaou, ha serr da henou.

— « Ar Manah an-neus kontet din, din va-unan, ya, ha meur a wech, eme Sentig ar Glaz, penôz e oa bet spontet war Mezou-Boh, o tond d'ar gêr, noz anezi, e-tro nao ha deg eur, d'ar houlz ma oa oh ober al lez da verh miliner Mengi. Noz teñval pell a oa, pa 'n em gavas e kreiz ar Mezou. Hag eñ o klevet eur youhadenn. N'oa ket spontig, c'hwi a oar, ar Manah d'ar houlz-se, yaouank e oa ha n'an-nevoa ket aon rag e skeud. Hag eñ da respont: Ho! ho! hoop!... N'oa ket gantañ peurechu e hopadenn, an hoper en e gichen. Salver Jezuz! Santez-Anna-Wened! Piou ne vije ket bet spontet? Ha kaer an-nevoa selled endro dezañ, den ne wele; ne wele nemed skeudenn hir-hir an hoper. Bale, kerzed a rê ar Manah, ha buan, m'henn asur deoh, an Teusk en e gichen. Hag eñ da redeg, an hoper atao war e zeuliou. Ha trouz ne gleve. Ar galon an-nevoa bet da zevel e zaoulagad, ha, dirazañ, euzuz, euzuz, eun den — n'oa ket eun den evel just — e benn gantañ hanter guzet en eur valkenn du. Hag eur youhadenn! Eur youhadenn ken euzuz, ken spontuz, ken a zebhlantas d'ar Manah e strake e oll izili, e fraille an douar dre e greiz... N'eo ket bet chomet ar Manah da glask manno war an hent: skañv e droad, flêr en e vragou, en eur redadenn eh-erruas er gêr. Hag abaoe n'eo ket bet tapet o vond d'ober al lez da verh miliner Mengi... »

— O! bemdez e vez gwelet tra pe dra burzuduz evelse. Ha gand ped a zo bet c'hoarvezet...

— Ganen-me biskoaz, eme Jarlig koz, ha koulskoude, koulskoude...

— Ma! an deiz all, Anton ar Zaoz, o vond d'an ôd, abred euz ar beure, a zemvelas eur gornandonez o kribad he bleo, en eur bod lann etre ar bourk ha Pennenez. Tremen a eure en he hichen, ha, gand eun tôle krib, he-deus faoutet dezan biz bian e zorn deou. E viz n'eo ket peur-yah hoaz.

— Ha Pôtr-Lotig 'ta, a lavaras unan all, ya, ya! Pemzeg deiz a vo warhoaz, en eur vond da Doull-ar-Hirri, etre diou ha teir eur euz ar beure, a zo bet heuliet, adaleg Troallenn beteg gra Mespant, gand eun Teusk-noz. Gwelet mad an-neus bet anezañ, sklêr al loar evel an deiz; n'ouzon ket penôz n'eo ket bet diodet ar pôtr.

— O! diod eo a bell zo, eme Jarlig koz.

— Amañ, amañ endro d'an ti-neza, daoust hag-eñ ne vez ket aliez gwelet skweriou. N'ho-peus-hu ket a zoñj — pegoulz? — teir pe beder hoañvez a zo abaoe — e veze, bennoz, dindan sklerijenn al loar, eul liñsel wenn o lammed euz an eil bod lann d'egile. Hag aliez, ha gand kalz a dud eo bet klevet ha mad ha sklêr, o wigourad, dre wenojennou lann Pennenez, karigell an Ankou. Hag ar hannerezed-noz?... Hag ar hole briz?... Hag ar gornandonez?...

— Alo! alo! eme Jarlig koz, dilezom ar hôziou goullou-ze n'int mad nemed da sponta an dioded, ha deom da weled hag-eñ eo diskuiz Jañ Glaodadig. Mall eo gantañ, moarvad, mond en e hent, n'eo ket erru hoaz e Koad-an-Noz, du-ze pell, en tu all d'ar meneziou.

« Ar hi, ar haz ha Jañ Glaodadig a zavas en o zav. Kaer an amzer, plên an hent, eun dudi bale. War Lanndevrest, dirag Koad-Tronah, eun dañvad, eun trohad maout-saoz kornieg, a oa o peuri. Trouz boutou Jañ Glaodadig a spontas ar maout, sevel a eure e benn.

« — Debonjour dit, maout! eme Jañ Glaodadig.

« Be e e e be !... da beleh eh-it-hu evelse, pôtréd ?... Darbet eo bet deoh beza spontet ahanon... Petra ar foeltr a c'hoarvez ganeoh? Fonnuz-ral eh-it gand hoh hent.

« — Ni ah-a, pôtr kêt, eme Job ar hi, evel-henn, war on fouez,

*Da foar, da foar ar bichibonig...
Da weled pe 'r bleiz pe ni
A gousko er-mêz fenoz.*

« Na padal ma klevas komz euz ar bleiz, be! be! e e, bestead eo deut ar maout da veza... Eur stotadennig an-neus grêt, ha pemp pe c'hweh bilienn euz a-zindan e lost. Be e e !...

« — Arabad eo dit kaoud aon, eme ar hi, ni a deuo a-benn euz ar bleiz.

« — Deus ganeom! eme ar haz.

« — Deus, eme Jañ Glaodadig, deus!

« Gonezet ar maout gante. Hag en hent ar pevar belerin, reud gante o fenn, evel ar wazed p'o-devez evet eur werenad mad a jigodenn. Hag e kôzeent, hag e prezegent, dever enno.

« — P'eo gwir, eme ar haz, penôz ar velhouedenn a drehas war ar bleiz, evelkent pôtréd diskuiz eveldom-ni n'o-devo ket kalz a boan evid teuler eur habon evel hennez er-mêz e di.

« — He! he! a reas ar maout.

« — Hroñ! hroñ! a reas ar hi.

« — Gwazed eveldom-ni! eme Jañ Glaodadig, kreñv ha kaloneg.

« Tremenet gante Tremel, Lann-ar-Manah, o pignal gra sonn Plounerin, hag int o weled, e-touez ar vein, ar brug hag al lann orodet (5), eur boh, eur boh barveg ha kornieg. Hemañ a ziframme tamm yeot ahann, tamm yeot alese, hag a zave e benn eur wech an amzer da zelled endro dezañ. Inouet ar boh e-unan; eun trouz bennag, marvad, an-neus klevet, hag e benn a ziflukas euz a-dreg eur garreg.

« — Ho! ho! ho! emezañ. Ho! ho! ho!

Hag eñ o tostaad ouz an hent.

« — Da beleh an diaoul eh-it-hu evelse, pôtréd?

« — Ni ah-a, eme Jañ Glaodadig,

Da foar, da foar ar bichibonig... h. a.

« — O! o! me 'h-a ganeoh ive.

« — Deus 'ta!

« Evuruz ar boh da vond da vale bro, d'an emgann: rag n'hoh ket heb goud, marvad, penôz ar boh a zo brezeller, atao e gerniel gantañ bantet, prest da dourta amezeg, estren pe divroad.

« En tu all da Blounerin, eur hillog, eun toullad yer ha polezi d'e heul, sonn e benn, ruz e gribenn, pluñv e lost

(5) Orodet : kraboseg.

gwer-hlaz, lugernuz, o vran̄sigellad war e gein, a henche e verhed etrezeg eur bern teil.

« — Rog! rog! ko! ko!... deut, va dousigou koant, deut!

« Hag e skrabe.

« — Rog! rog!

« A-bell, war an hent, en eur weled Jañ Glaodadig hag e genseurted:

« — Ko! ko! gog! rog! rog!

« Hag eñ dirag e zimezelled, ha da houlenn — pôtr reud, mar plij, ar hillog! — digand on baleerien:

« — Da beleh eh it-hu, pôtred?

« Pa glevas gand Jañ Glaodadig e oant o vond da Goad-an-Noz da glask ar bleiz evid henn teuler er-mêz e di:

« — O! me a oar mad peleh emañ o chom. Anavezoud mad a ran ar bleiz, diêz e vo deoh henn paka: kreñv eo, ha, 'm eus aon...

« — Deus ganeom, deus, hag e vleini ahanom beteg an ti.

« Mall n'an-nevoa ket ar hillog da guitaad e yer.

« — E! e! aon an-eus! a viaouas ar haz.

« — Eur brabañser! a veas ar maout.

« — Loh ennañ dirag ar re vian: ar yer, ar filiped, ar polued (6), ar pinterien, al laouenaned! a harzas ar hi.

« — Eur foerer, eur c'houzigell! a vegelias ar boh.

« Droug er hillog. Blinka an-neus grêt ouz e yer, evid rei dezo da houd penôz e oa red dezañ mond gand ar re all, dindan boan da veza disprizet gand an oll, ha da goueza en dismegañs.

« — Alo! alo! eme Jañ Glaodadig, gwaz eo ar hillog, kerse eo gantañ dilezel e vestrezed... Med, pôtr, kred ahanon, emezañ d'ar hillog, karantezusoh e vefont ez-keñver, en distro, gonideg; pep hini aneze a raio dit ar pecherou ar re domma... Deus, pôtr, deus!...

« Kimiadi a reas goustadig, goustadig euz e wragez:

« — Kenavo! kenavo ar henta!...

« Bleinet gand ar hillog, Jañ Glaodadig hag e gompagnunez a erruas er hoard, goude an abardaez, da zerr-noz.

« — Setu ti ar bleiz, eme ar hillog, en eur ziskouez deze eur hoz ti-soul.

« Goullo; int e-barz. Goud mad a rênt penôz ar bleiz ne deue d'ar gêr nemed evid mond d'e wele.

(6) **Polu** : bohruzig.

« — Pep hini en e leh, eme Jañ Glaodadig: ar haz war an oaled, ar hi dindan an dôl, ar boh e harz ar skeul, ar maout war ar hrignol, Jañ Glaodadig a-dreg an nor, hag ar hillog war e glud.

« Noz teñval anezi, ar bleiz a deuas d'ar gêr, goullo e gov. E toull an nor:

« — O! o! emezañ, c'hwez ar maout!...

« Hemañ ha padal m'henn klevas ha da veal:

« — Be, be, e e!...

« — Daonet vin! eme ar bleiz. Eur maout em zi... em zi!...

« Eun tôl bout war an nor, hag e-barz, ha d'an oaled da c'hwesa e houlaouenn-lutig.

« Petra 'zo aze?...

« Paoñ! paoñ! fout! fout!... Hag eur friad d'ar bleiz. Kant mil elienenn a strinkas en e zaoulagad; dre e spont e lammas dindan an dôl. Hagn! hagn! eur grogadenn en e vorzed; eur yudadenn hag eñ da esa mond er-mêz. E troad ar skeul petra a oa eno? Diaoul ar rod! Petra? N'eus ket bet amzer da zigeri e zaoulagad, tapet eo bet gand piou? Gand petra? Hou! Hag eñ en êr... N'oa ket erruet mad war ar hrignol, ar maout — flêria a rê gand an aon — a zistagas gantañ gwella tôl tourt an-nevoa biskoaz roet en e vuez... Hag ar bleiz d'an traoñ, buannoh eged ma oa savet. D'an traoñ, Jañ Glaodadig a roas dezañ eun tôl troad en e reor ken reud, ken a gavas, ar pôtr kêz, a dra zur, e oa savet dezañ diouaskell. Ruilla an-neus grêt ouspenn ugent troatad euz toull e zor. Pa deuas ennañ e-unan, e klevas ar hillog o kana: Kokorikoko! kokorikoko!... Kanaouenn an emgann, kanaouenn ar gonid!

« — Malloz Doue a zo kouezet war va zi. Birviken troad, m'henn tou, ne dôlin ennañ!

« Dalhet mad an-neus ar bleiz e le: abaoe an anevaled all a zo chomet en ti dilezet gantañ! »

— Paour kêz bleiz! eme Bilzig.

Echu ar gôz, darn euz ar merhed a houlenne ma vije kanet eur zon, eur werz, eun oidell bennag. A-wechou ive e veze lennet e levr **Buez ar Zent**, pe e hini **Ar pevar mab Emon**. Goude e veze lavaret gras, ha pep hini d'e wele.

BILZIG HAG E VENOZIOU

Keit ha ma pade ar goañv, Bilzig, en ti-neza, gand ar merhed, ar wazed, a zeske ar pez o-devoa o-unan desket gand o zadou koz. Skol vad, ar gwella skol. A-nebeudou evelse e sile en e eñvor, en e spered, nerz ha furnez, oll hened e vamm-vro; arabad eo ankounac'haad he zechou, he siou, he youlou mad pe fall.

Evelse ive ar Vretoned yaouank, o halon hag o ene moulet war re o zadou koz, a reno o buez, sklerijennet gand ar skweriou a deu deze euz fin foñs goueled ar bloaveziou, pa oa o gouenn skignet war douarou ar Zav-Heol, arôg ma teuas o zud koz en enez Breiz.

Ha Bilzig, pôtr abred, lemm ha prim, a zune, a zene ar hôziou, al lavariou, ar zoniou, ha dindan e eñvor digor-frank e tastume aneze. Ha pa 'h-ê, eur wech an amzer, da vesa saout ha deñved e amezegez war an torrôd yeoteg, e-unanig, dirag an dremmwel, ar hôziou, al lavariou, ar zoniou a deue da nij dirag daoulagad e gown. Aliez, dirag ar mor, e chome sonnet da heuill war ar wagenn hent eur vag pe hini eul lestr, pe a-dreuz an oabl nij ar gwennilied, nij ar brini-mor. Na karet an-nije bet mond gante! Peleh, n'eus forz peleh, gand ma vije bet êt. Mond da vale, da redeg bro evel « Pôtr e Vaz-Houarn », evid savetei priñsez; evel « Tignasen-nig », eñ ah-aio ive e karroz alaouret, hag evel « Yann Heb Aon » netra ne vo kat d'henn sponta. Hag e kane, ar pôtrig emzivad, reuzeudig, dirag ar mor, war an torrôd:

*Mari-Morgan, turlutud,
Deus davedon d'ar Palud
Hag ahane d'an Trêz-Gwenn
Hag ahane d'ar Velevenn!*

Kaer an-neze kana, Mari-Morgan ne deue ket da gerhad anezañ.

A-wechou all, dirag ar mor dirollet, war e spered en em skigne eul lijenn, eur vrumenn a velkoni, ha neuze, goustadig, e fredone eur zonig bennag klevet gantañ en ti-neza, hag homañ dreist ar re all:

*Deue da rei d'ar wezennig
Avel dous ha glizenn dener,
Vid ma vleunio ar rozennig,
Pell diouti ar gwall-amzer!*

*Abred a-walah e c'houezo
Avel gwalarn war ar rozenn
Abred a-walh e sklabeo
E deliou war hent an anken!*

Ha, daoust d'e baour-kêz deveziou da veza kelhet gand an ezommou, daoust d'an dienez da bega war e grohen ha war e galon, abeg e keve ar pôtr evelkent e nerz e yaouankiz, da leuskel e venoziou da nijal, gwennilied dibreder, a-dreuz oabl koumouleg an huñvreiou.

Hag a-greiz an nebeuta a-wechou, keit ha ma veze o soñjal evelse en e stad, aliez e netra :

— « Bilzig ! Bilzig ! a grie warnañ Madelen pe Yannig, Bilzig, ar vloh a zo o laerez !... » pe « Poent eo deom mond d'ar gêr... Selaou: an dañvad bian a vee war-lerh e vamm »:

Mammig koz, deus « d'an der » (1)

— Gwir eo ! eme Bilzig. Med selaouit bremañ petra respont ar vamm-dañvadez : « P'am-mo debret, tamm ahann, tamm alese, me a yelo ! »

(1) Evid difreza an oanig: deus d'ar gêr.

BILZIG ATAO O PICHOTA TRA PE DRA EVID AN TIEGEZ

A-wechou all, Bilzig, pa 'h-ê da redeg an ôchou, a gave Jarlig koz o turmuch er gourlenn. Bilzig a gare beza en e gompagnunez: n'oa ket ken rust hag ar re all en e geñver. Hag o-daou eh-ênt da beñseal, pa veze groz ar mor ha rust an amzer. Mall en-deze da vont d'an ôd, plijadur o tiôcha (1) tammou koad evid ober tan: ezomm a veze atao a draou tan e ti Izabel. Ar bezin seh a zo mageduz ha gwelloh eo soubenn mitonnellet gand tan sklêr eged soubenn magedet. E-pad ar marvor, en hañv, e teue gantañ godelladou holen dastumet war ar herreg er skalfennigou dizehet gand an heol.

— Na gweled a rez-te, pôtr, a lavare dezañ Jarlig koz, na gweled a rez-te an didalvez-hont, evel eur vran-vor du, en e zav war ar garreg?... Diwall... razañ.

Divennet mad e oa peñseal, dastum holen, ha kerhad dour mor da ficha boued d'an dud pe d'al loened. Brigadier ar valtouterien a oa striz war al lezenn.

— Aketuz eo ar Hernevad-se... Diwall!...

— O! n'eus forz, Jarlig! a responte Bilzig, en eur vus-c'hoarzin, n'eus forz!...

E-pad ar goañv, Bilzig ah-ê 'ta, abred euz ar beure pe diwezad euz an noz, en eur redadenn, da weled hag-eñ e veze manet eun draig bennag er gourlenn. Ha kaer o-devoa ar valtouterien redeg war e lerh, biskoaz ne oent bet evid henn tizoud.

Hag ar pôtr a rê goap oute, sutellad a rê deze, pa dremene en o hichen, ton kantik **ar Baradoz**. Droug er valtouterien: desket e oa bet deze ar homzou a oa dindan an ton, komzou eneb d'ar brigadier.

— Marmouz fall! eme ar brigadier, eun devez ma oa Bilzig o c'hoari kornigell gand ar vugale all dirag an ti-gward. Marmouz fall, tól evez, mar tapan ahanout!...

Hag e sache dezañ war e ziouskouarn.

Eun nebeudig goude eun tól-amzer, Bilzig ah-eas da beñseal,

(1) **Diôcha**: tenna euz a ziwar an ôd (aot).

ha gantañ e tigasas e kreiz an noz daou bez tamm koad dañvez da Izabel d'ober tan e-pad eur miz.

— Diwall, Bilzig, a lavare dezañ Izabel, diwall, va fôtr, meset eo on zi!...

Hag evelkent evuruz ar vamm pa wele ar pôtr oh erruoud er gêr, diochet gantañ tra pe dra. Ezomm he-devoa: yen ar goañv, yen an ti, aoned d'ar vugale, ha red ive poazad ar pred.

Piou he zamallo?... Piou?... Droug da biou?... Gaou da biou e rê?... D'ar valtouterien?... D'ar valtouterien!... Hag al lezenn?... Al lezenn!... Diocha tammou koad heb talvoudegez, garanet, krignet gand ar garrilied! Al lezenn... grêt gand piou? hag evid piou?... gand an hini kreñv eneb an hini blank, evid ar pinvidig, ma n'eo ket eneb d'ar paour!...

Bilzig a greske a gorr hag a skiant: falvezoud a reas dezañ ive pourvezi an ti a gig hag a besked. Eun toullad higennou a gavas, o intalinka (2) an-neus grêt, hag o staga a eure war eur gordenn, leogeta a oar, stigma a raio e gordennad higennou war an trêz, ha pesked a vo da zebri, eur wech an amzer, e ti Izabel.

Kig a vo ive. Kig?... Euz a beleh?... Ha penôz?... Bilzig (ankouaet hoh-eus-hu?), keit ha ma oa bet o redeg ar pardonou, an-nevoa desket gand ar gañfarted all skoulma lasou orjal, evid tizoud gad pe gonifl. Bete-vremañ n'an-nevoa ket kredet henn ober: aon an-nevoa rag ar barner ha rag gward an ôtrou kont, Gargam. Gargam a oa eul lesano, Fañch ar Peul e ano. Soudard e oa bet gand an ôtrou, ha bet er brezel: goullet, torret e vorzed kleiz gand eur vouled kanol; kamm e oa chomet abaoe: ahane e lesano Gargam.

Poan galon d'ar pôtr, pa gleve e vamm o klemm: « Tamm kig ebed en ti! » Hag aliez ar vugale a ranke mond d'o gwele gand eun tamm patatez seh en o hov. Ha du-hont, e koad Kerodren, a-iz an torrôd, a zo gedon ha konifled, pez a garer. Kaoud a eure eun orjalenn... e higennou an-neus stignet war an trêz, dindan ar hoad.

Katellig, en ampoent-se, a skoas klañv gand ar rudell, Yannig gand an dreo. Tamm kig en ti evid ober deze soubenn domm, tamm kig ebed evid rei deze nerz da drehi war ar hleñved, ha da yac'haad.

— Gwaz a ze! eme Bilzig dezañ e-unan, gwaz a ze! kig o-devo.

Gwir pe haou gand Bilzig? Piou a raio a-grenn an disparti? Gwir pe haou?... Buez eur bugel a dalv evidoh krohen eur

(2) **Intalinka**: gg. étalinguer.

had?... An ôtrou kont ha Gargam, daoust hag int o-deus eun heveleb menoz?

Bilzig ne jomas ket da glask kemend-all. Berr e venoz war an doare-ze : klañv e oa Katellig, kastiz ha treud e vreur Yannig, kig ne oa ket da rei deze, ezomm o-devoa da veza bevet mad, prederiet mad; gedon ha konifled a zo du-hont e koad Kerodren, dond a reont da c'hoari war an trêz, war-dro goulou-deiz : mar gall o zapoud, tizet e vefont.

Sioulig 'ta e skoulmas pemp las orjal e penn ar wenojen-nigou a ziskenne euz ar hoad war an trêz.

Antronoz vintin, abred euz ar beure, da houlou-deiz, Bilzig a oa bet o weled e lasou, hag o voueta e higennou, ha gantañ en e vouteg diou vleisenn, eun touill-trêz, eul levneg hag eur moullleg. Pesked a vo fenoz da zebri e ti Izabel, ar vugale n'ah-afont ket d'o gwele goullou o hov. Ha kig a vo ivez, kig mad! E bouteg Bilzig e oa eur had.

— Eur had? Salver Jezuz benniget! Eur had! eme Izabel. Hag an ôtrou?... Ha Gargam?... O, Bilzig!...

Ar vugale o halon a dride dirag kement a binvidigez.

Bilzig a anzavas deuz e vamm penôz an-nevoa skoulmet lasou e koad Kerodren.

— O va fôtr! Ha ma vezez tapet?... Eh-i d'ar galeou. Ha ni? Diwall!... An ôtrou kont, te 'oar, Bleiz ar Jaou, a, zo gwall-griz e galon... Distruja dezañ e hedon!...

— Ar vugale o-devo kig, mamm Izabel! Hag arabad eo deoh kaoud aon, mamm Izabel : me dôlo evez, ha Gargam a ranko beza lemm e lagad ha skañv e droad, mar teu d'am zizoud.

Ha laouen Bilzig dirag laouenedigez e vreur hag e ziou c'hoar. Krohen ar had a zo bet siket gand ar vugale en eun toull don e-barz o liorz. Piou ah-aio eno d'e glask? Den ebed.

Ha Bilzig a dize pesked war e higennou, ha, keit ha ma padas kleñved Katellig, gad ha konifl gand e lasou.

Er bourkou bian ne vezer ket pell o houd doare an nesa, hag ar glufaned o-devoa kavet an tu da ober da Vadelen anzav e tebre kig gad, eur wech an amzer. Hag evel just, ar re-mañ mall deze da skigna ar brud euz an eil ti d'egile.

— Debrî gedon an ôtrou!... Mari-Jozeb!... Gedon an ôtrou, an ôtrou kont! Bleiz Tremedern! Bleiz ar Jaou... Ha kre-doud!

Darn aneze a rê sin ar groaz war o genou ha war o zal, gand o biz-meud, evid pellaad an drouk-spered.

— Gedon an ôtrou!... An Arabad, Bleiz ar Jaou!...

Hag e vousc'hoarze etreze ar merhed, hag e ragachent. Ger ahann, geriou, komzou alese, ho-pije klevet : ar Jaou, ar Hont, ar Bleiz, ar Merhed!

— Heñvel eo ouz markiz Gwerrand, eme Sentig.

— Ya,

*Etre Montroulez ha Gwerrand
'N-neus ar markiz eur plah ha kant.*

— Gwañoh, eme Jaketa, rag

*Etre ar Jaou ha gra Mespant
'N-neus on ôtrou ouspenn daou hant!*

Hag e vousc'hoarzent.

— Evelkent, eme Soaz Godig, evelkent, abaoe m'eo dimezet, eo deut eun tammig war vad.

— Lavar war welloh. An itron yaouank, an êlig Doue, he-deus doñveet anezañ, pleget eun tammig e imor. Ha ma n'eo ken Bleiz Koad-ar-Jaou, gwall rog eo hoaz, rust ha divergont, kriz a galon, eme Fantig an Henañ.

— Hag e vevel, eme unan all, a zo gwaz pe wasoh. Hag ar paour-kêz Bilzig, ma vez tizet gante!...

Flatet eo bet ar pôtr : tud a galon vad a vez atao kavet da renta zervij d'o nesa, ha Gargam an-neus klevet an doare.

Gargam an-nevoa, meur a wech, gwelet Bilzig o stigma e gordennad higennou war an trêz, hag o troidella endro d'ar hoad. Evelkent biskoaz n'an-nevoa dezañ tamallet ar gedon.

— Eur hoz marmouz fall evel hennez, stigma lasou e koad an ôtrou!... Bilzig!... Boulhurun! Daonet ' vo krohen kuru-nou va ene!...

Evelse e toue-doue Gargam. Na c'hwi ho-poa kredet penôz Gargam e-nevoa desket al leou-douejou flour-ze war varlenn eur vamm a wad uhel?...

Daou enebour all da Vilzig : an ôtrou kont hag e vevel Gargam.

Hag evelse Bilzig a oa e disfi da galz a dud er bourk, ha gwir eo, killen e oa, goaper; eneb dezañ ive ar mammou.

Piladeg a veze aliez etre ar bôtred. Ar re-mañ, pa deuent d'ar gêr, drastet ha diframmet o dillad, pa veze goulennet digante penôz o-devoa grêt evid o frega, a damalle aneze, gwir pe haou, da Vilzig. Hemañ ne veze ket eno evid en em zivenn, hag ar mammou, c'hwi 'oar, douget atao da rei o absolvenn d'o holladennoù. Ha droug enne eneb Bilzig, ha koulskoude, ped gwech n'o-devoa ket klevet o mibien o youhal war-lerh ar pôtr:

— Bilzig ! Bilzig ! Bastard !...

Ha Bilzig, heskinet evelse, a ziode hag a skoe didruez : kreñv e oa, ha lardadennoù a roe deze. Hag ar mammou a-du gand o fôtrez a grie ive :

— Bilzig ! Bilzig ! Bastard !... Kê da glask da dad beuzet e stank ar vilin-avel !...

Pôtr mad, koulskoude, ha karantezuz, a lavare Izabel. Prim, med eeun. Pôtr moan ha mistr, treut, med gwevn a gorv ha skañv a droad, lemm a lagad hag a spered, e oa d'ar houlz-se ar pôtr. Den ne oa evid dond a-benn outañ, pa veze kounnaret: eo, e vamm Izabel, honnez a deue. Eun diaoul er-mêz, eun oanig er gêr.

X

BILZIG A YA D'AR HATEKIZ

An devezioù a-hed an devezioù en em astenne; Bilzig a rene e unneg vloaz ha n'an-nevoa ket hoaz grêt e bask kenta. Ken brudet fall e oa ken n'oa ket bet falvezet gand an ôtrou person henn digemer er hatekiz, daoust d'ar hure da veza bet lavaret dezañ penôz Bilzig a oa eur pôtr dihun, hag a deuje buan war vad. Siwaz ! an oll a oa eneb d'ar pôtr.

Ger ne rannas an ôtrou person. Evelkent eun devez — Bilzig n'oa ket er gêr — eun tammig keuz marvad d'an ôtrou person, beteg ti Izabel e teuas :

— Demad deoh, Izabel ! Deut oun d'ho kaved ha da gaozeal ganeoh diwar-benn ho mab hena Bilzig. Gouzoud a rit pegen droug ez eo ar pôtr : goap a ra evelato ouz ar valtouterien, ouz Gargam; en overenn-bred n'éz eo ket evid paouez. Unneg vloaz en-devezo a-barz eun nebeud, ha n'en-deus ket great e Bask kenta. Red eo delher reud var ar pôtr, pe e teuiio da veza eur gwall den evelato.

— Reud ! ôtrou person, netra a vad ne dennfet dioutañ. Bilzig a zo eur pôtrig karantezuz, mad evidon, mad evid va bugale; eun êl n'an-eo ket, gwir eo...

— Nann, Izabel, na pell ahane, ha, ma kredan brud ar bourk...

— Brud ar bourk, ôtrou person ?... Ar gaou hag ar pehed gantañ atao ! Nann ! nann !... Bastard ahann ! bastard alese ! skouarnad ahann, têt-troad alesont. Kalz a boan an-neus ar pôtr-ze grêt d'ar valtouterien, evid beza diôchet eun tamm koad pe daou, e-pad ar goañv, skorn hag erh war an douar, evid ober tan da domma pe da boazad on frejou, pe evid beza dastumet bozadennigou holen evid salla on boued ? Divennet eo, me oar. Kalz a zroug an-neus-eñ grêt evid beza distrujet pemp pe c'hweh gad (goulennit digand pôtrez ar homañchou), evid rei, pa vezent klañv, eun tamm kig fresk d'am bugale ? Evidon-me, ôtrou person, n'on ket evid henn tamall, henn graio neb a garo. Skandalet em-eus bet anezañ... O ! nebeud, nebeud, ôtrou person... « Mamm Izabel, mamm Izabel, evid Yannig ha Katellig, a lavare ar pôtr !... » Hag ar vamm, ôtrou person, n'he-deus ket bet nerz-kalon awalh... ar vugale klañv... da...

— Nebon ! Nebon ! Izabel. Gouzoud a ran ervad penôz ho stad a zo hag a zo bet truezuz meurbed. Evelato, gedon an ôtrou !... Me a gaozeo gand an ôtrou... Ha digasit ar pôtr d'ar hatekiz hag e vezo gwelet... Na desket ho-peus-c'hwî dezañ e bedennou ?

— O ! ya, ôtrou person, hag ive e hourhemennou; goud a ra aneze dindan eñvor, ha tammouigou all a gatekiz. Deski a ra ar pôtr ar pez a gar, pôtr a skiant e vo hennez, med red e vo goud penôz dond a-benn anezañ, her bleina.

— Ma ! Digasit anezañ d'ar presbital, ar hatekiz a zigoro dimerher, da zeg eur. Hag ahendall evelato penôz ez-a ar bed ganeoh ?

— Mad awalh, ôtrou person, peogwir on-deus eun tammig bara da zebri, a-wechou eun tamm pesked, hag e hellit va hredi, ral e vez war an dôl kig gedon an ôtrou... N'om ket figuz, hag ar vugale, pa vent yah...

— Alo ! kenavo ar henta, Izabel. Yehed mad deoh ha d'ho pugale !

— Deoh ivez, ôtrou person.

Ar merher war-lerh, Bilzig, gand tri pe bevar bôtr all evelatañ, ah-eas d'ar presbital.

Tok ! tok ! war an nor. Ar garabasenn o tond da zigeri :

— Hastit afo, paotred. Peleh ez-oh-tu choumet ? Ar re all a zo aze; an ôtrou person evelato a zo oh ho kortoz. Evelato ! A-raog antreal er zal, tennit ho poutou, marvad n'ez-an-me ket da skuba war-lerh kañfarted evelдох-hu.

Tennet o boutou gand ar bôtred, hag int er zal. Jarlig ar Pinter, Fañch Mourzig, Jojo ar Spagnol hag e genderv Ôlier ar Pôtr-Ru, Lellig an Touz, Pierrig-Mari Gola, Fañch ar Skouarneg, Lellig ar Monkuz ha kalz a re all a oa eno en o zav, an ôtrou person en e gador azezet ouz an dôl, eul levr hag eun delienn baper dirazañ, eur bluenn en e zorn.

Bilzig n'an-nevoa ket ankouaet devez ar barner, hag en em lakaas war ar regenn diweza, a-dreñv Lellig ar Monkuz.

— Da genta, paotred, eme an ôtrou person, me a ya da skriva hoh anoiou.

Ha pep hini a zigejas e ano, hini e dad, hini e vamm, hag ar person a skrive, a skrive...

Tro Bilzig a erruas.

— Da ano, paotr ?

— Ivonig Tangi.

— Hini da dad ?

Ger.

— Da dad ?

Ar vugale all da vousec'hoarzin...

— Bas... bas... bas... as tard eo, ôtrou person, a vesteodas Lellig ar Monkuz.

E gomz n'oa ket gantañ peurechuet, ma oa dorn Bilzig war e chod; eur grabanad an-neus tapet, ha dispeget mad, m'henn asur deoh. Ha setu savet eur gabaill: tôliou treid ahann, tôliou treid alesont, ha ger. An ôtrou person, gand kalz a boan, a deuas a-benn da lakaad ar peoh. Ar pedennou lavaret :

— Bremañ, eme an ôtrou person, ez-an da houlen diganeoh eun tammig katekiz... Bilzig ! Ped Doue zo ?

— Unan hepken.

— Ped person a zo en Drinded ?

— An Tad, ar Mab, hag ar Spered-Glan.

Lellig ar Monkuz a oa eur pôtrig divaoue (1), leusk a gorv, bah a spered, besteed, ha gantañ atao e veg arôg. Mesket, kemmesket an-nevoa en e benn an Drinded, an tri Ferson, eun Doue hepken, ha ken luziet e oant ken n'oa ket evid o dibuni. Deut e dro da respont :

— Ped Doue a zo, Lellig ?

— Tri i i i, ôtrou person.

— Unan Lellig, unan hepken.

Ha Lellig, mezeg ha trefuet, aon dezañ da veza rasklet.

— Peb Doue zo ?

— Leiz ar beel horo, eme Bilzig dezañ en eur c'houezadenn.

— N'an-e e e ket gwir, eme Lellig, ha kreñv.

— Penôz n'eo ket gwir ? eme an ôtrou person, souezet.

Ar person a grede gantañ penôz Lellig a responte d'e houlen. Ha droug en ôtrou person.

— Penaoz, genaoueg a zo ahanout, penaoz n'eo ket gwir e zo eun Doue hepken ?...

— He... he... he... mañ e... e... e... an hini a lavar ô... ô... ôtrou...

— Serr da henou, selaou mad ha taol evez. Ped Person a zo en Drinded ?

— Tri... i... i... Ket, ket, ôtrou person.

(1) Divaoue: ponner a spered.

— Ped ? Digej, ha buan.

— Pevar : An tad, ar Mab, ar Spered-Santel, Evelse bezet grêt.

Hag ar bôtred da c'hoarzin, da c'hoarzin ken a reudent (abaoe Lellig a zo bet lesanvet « Evelse bezet grêt »).

An ôtrou person ne c'hoarze ket.

— Daoust ha te a ouezo gwelloc'h da zakramañchou ?... Ped Sakramant a zo en Iliz ?

Setu Lellig tapet berr. Ped Sakramant a zo en Iliz ? Bilzig dezañ etre daou : « Seiz ».

— Seiz, ôtrou person.

— Mad sur, evelato, Lellig ! Niver anezo.

Bilzig en eur c'houezadenn :

— Teir roched ha peder hiviz.

Ha Lellig dievez :

— Te... te... teir roched ha... ha... pe... pe... peder hiviz.

Eur gelienenn, eur fubuenn ho-pije bet klevet o nijal dre ar zal. Darbet eo bet d'an ôtrou person koueza en droug-sant.

Hag ar bôtred all adarre da c'hoarzin, pa weljont ne goueze ket kurunou an ôtrou person war o fenn.

Droug en ôtrou person, ken a verve; sevel a eure er-mêz euz e gador.

— Piou en-deus d'it-te desket an traou brao-ze, marmouz fall ?

Ha Lellig a vleñje evel eul leue : oueñ ! oueñ !

— Piou ?... Lavar piou ?...

— Oueñ ! oueñ !... Bi... Bi... a hlaourenne ar pôtr, ha birviken n'eo bet evid mond pelloc'h... Bi... Bi... Bi...

— Rasklet e vezi, marmouz !

Berraet an-neuz an ôtrou person ar hatekiz, gand an droug a oa ennañ.

— Er-meaz ha buan, evelato !

Hag ar vugale evuruz, hag er-mêz. Jojo a jomas da zelled ouz ki ar presbital (Pipi, anavezoud a rit anezañ), astennet a-hed e gorr evel eul lañjore war dreujou an nor, beg e lost eun tammig gantañ en diavêz.

— Jojo, laka da droad war e lost, eme Bilzig.

Ho Jojo a-blomm a dôlas e droad kleiz war beg lost Pipi. E droad ? N'an-nevoa ket ankouaet marvad e voutez-koad er gêr, hag an tachou marh a oa enni ?

Eun harzadenn, eur yudadenn, eul lamm hag ar hi krog e breh Bilzig. Ar bôtred all d'ar red, er-mêz ar porz.

Evuruz eo bet ma oa eno ar person, anez da ze Bilzig a vije bet infamet gand ar hi, diframmet dezañ e dammouigou dillad ha tammou mad euz e grohen.

— Peoh, Pipi !

Hag a dôliou treid, an ôtrou person a stlapas ar hi e kreiz ar porz.

Ar gwad a zivere euz breh ar pôtr :

— Petra ez-peus great dezañ ?

— Netra, ôtrou person !

Hag eñ ive ha d'ar red hag er-mêz. Ne gare ket beza e-kichen an ôtrou person: gwialenn ar barner, c'hwi 'oar!... Ha dindan eñvor, me ho ped d'am hredi, ar pôtr a zalho, ha stard, krogadenn Pipi hag a lakaio anezi gand gwialenn ar barner...

Ar zadorn war-lerh, touteg ar bôtred o tond d'ar presbital, med buan ha buan o daoulagad a zederaas.

— An ôtrou kure a raio hizio ar hatekiz, eme ar garabasenn en eur zigeri an nor.

Gwella den a dôle troad war an douar, an ôtrou kure. Pa antreas er zal :

— Demad deoh, ôtrou kure ! eme ar bôtred.

— Demad deoh, bugaligou !... Azezit, azezit, lavarom da genta : Ni ho salud, Mari...

Hag ar bôtred en eur vouez : Ni ho salud, Mari... Echu ar bedenn.

— Ar wech diweza, an ôtrou person an-nevoa ganeoh diluziet kentel ar Sakramañchou; hirio me ah-a da zisplega dirazoh galloud an Otrou Doue : « An Otrou Doue, bugaligou, eñ eo an hini an-neus grêt peb tra : an neñv, an douar, ar mor, an dud, al loened, ar pesked, an traou a welit hag ar re a zo kuzet ouzoch. Eñ a laka da ruilla, a-dreuz an oabl, an heol benniget, al loar hag ar stered; eñ a zo e peb leh, e peb amzer, heb diwez na derou. »

Hag ar vugale a zelaoue piz ha sioul kelennadurez an ôtrou kure.

— Meulit-eñ, bugaligou, ra vezo meulet a-vremañ ha da viskoaz !

Bilzig a lavaras da Jojo :

— Klev 'ta, daoust hag emañ an Otrou Doue ivez e grignol da vamm-goz ?...

— E grignol va mamm-goz? eme Jojo souezet... Va mamm goz n'he-deus grignol ebed.

— Genaoueg a zo ahanout, bajaneg !

Jojo, sklerijennet :

— Doue a zo dre-oll, ôtrou kure, sur, sur?...

— Ya, sur, va fôtr !

— Neuze emañ e grignol mamm-goz Jojo? eme Bilzig.

— Ya, sur !

— Tapet ! tapet oh, ôtrou kure, mamm-goz Jojo n'he-deus grignol ebed.

Euz a beleh, euz a betore perz, ar beleg fall an-nevoa tennet an dapadenn-ze ?

Ar vugale a c'hoarze, ha Bilzig a zeblantas dezañ beza dizoloet eun dra burzuduz : eun diotach hepken... An ôtrou kure a ziskouezas dezañ, sklêr evel an deiz, penôz ne oa nemed eur bugelig diskiant, daoust dezañ da veza lemm a deod hag a spered. Ha Bilzig, evelkent, keuz dezañ da veza grêt poan d'an ôtrou kure — karoud a rê an ôtrou kure — a deuas d'e gaoud goude ar hatekiz.

— Otrou kure ! ôtrou kure !

— Petra, mabig, petra a c'hoarvez ganit ?

Hag e zorn war penn ar pôtr.

— Absolvenn ! absolvenn ! ôtrou kure, eme ar pôtr, goustadig, goustadig.

— Gouenn vad a zo ennout, Bilzig !... Bugelig dibreder, kalon vad, Doue d'az zikouro, va bugel !

Abae an deiz-se, Bilzig a zelaouas sioul hag aketuz kenteliou an ôtrou kure; frêz hag eeun e teskas e gatekiz, ha penn-da-benn.

Ar hure ive, abaoe, pa gave ar pôtr war an torrôd o vesa saout ha deñved e amezegez, pe o c'hoari gand e vreur hag e c'hoarezed, a jome gantañ da gêzeal : alia, kelenn, bleina a rê anezañ. Hag evelse, etre ar beleg hag ar pôtr, a-nebeudou, e savas eur garantez dispar a beb tu, eur garantez a drugarez euz perz ar beleg evid ar pôtrig dister, disprizet kasaet gand kalz, eur garantez a anaoudegez euz perz ar pôtr emzivad evid an den a zouster hag a skiant a brize gantañ diskenn beteg eur bugelig dister eveltañ.

C'hoantaet eo bet gand ar hure deski d'ar pôtr lenn, skriva, ive niveri... Ha Bilzig a-nebeudou a zeskas e lizerennou, a zigejas aneze war an trêz gand e viz-yod, ha goude, gand eun drein spern eh aroudennas al lizerennou.

Eun devez ar hure a gasas ar pôtr gantañ d'e gampr, hag eno e tiskouezas dezañ, war eun delienn baper, gand eur bluenn, liou enni, penôz trei, distrei peb lizerenn.

Ar henteliou a badas keit hag ar hatekiz. Goude ar pôtr a rankas gonid e dammig boued; skol al levriou a oa echu evitañ, skol ar vuez a bado, rust ha kaled.

E bask a reas gand kalon, daoust d'ar goap a oa bet grêt outañ, abalamour d'e zillad : e vragou, eur bragou berliñj glaz bet d'e dad ha berraet gand Izabel; e borpant, bet digand ar hure, kalz re ledan ha re hir, enkaet ha berraet ive gand ar vamm. Hag e voutou ? Hag e dok ?

Kavet e oa bet war ar prez eur boutou-ler poultrennet, dilezet, bet gwechall da Varharid koz, kalz re vraz d'ar pôtr: digaledet int bet gand al lardigenn, duet gand ar galhudenn. Hag e dok ? Salver ! e dok ! tok eured eur maltouter !

Na gweled a rit-hu ar pôtr, eun tok re uhel gantañ war e benn, en e dreid eur boutou re hir, e zaouarn hanter-guzet gand diouvreh e borpant, hag e vragou berliñj glaz troñset war e voutou !

N'eus forz ! Goud a rê ar pôtr penôz ne oa ket gwall faro, ne oa ket gwisket hervez ar hiz; goud a rê ive penôz e vamm a oa paour, penôz n'he-devoa ket a arhant evid prena dillad. Gwaz a ze ! gwaz a ze !

E bask an-neus grêt gand kalon ha feiz, furchet an-neus ha piz, e goustiañs. Penn fall e oa, taskanier, killenn (2), dond a raio da veza eur pôtr fur.

Bilzig, deut soñj dezañ en e vamm, ar vamm n'an-nevoa ket bet anavezet, a ziwriennas ar yeot a guze he mên-bez, hag eviti an-neus pedet a wir galon, ive evid e dad, evid e vammig-koz Marharid, hag evid e vamm Izabel. O ! e vamm Izabel, n'oa dezañ, hervez al lezenn, na kar na par, ha savet he-devoa anezañ, gand poan he horv ha karantez he halon. Lakaet e-neus aneze da bara war e ene a vugelig, hag e gorzaillen en em waskas pa zavas war daolenn e eñvor skeudenn ar re a gare, skeudenn ar re... Hag an dour en e zaoulagad, ar pôtr a voustre war e galon. Nikun n'eus gouezet, rag ouz den n'an-neus anzavet ar menozioù o-devoa d'ar houlz-se trubuillet e spered hag e ene...

Tremenet amzer Fask, ar vuez pemdezieg a liammas anezañ en he devezioù, en he oberou. Ha nebeud ha nebeud, kenteliou, kelennadurez ar hatekiz a zo en em vrumennet en e goustiañs.

(2) **Taskanier** : rioter, rendaeler, — **Killenn** : rendaeler ha droug, an hini a vez atao o klask tabud ha trabas.

Evelkent ar hreunenn hadet e kalon ar pôtr, beo a jomas, e gwirionez blank hag orodet (3). An techou fall a drehas war ar re vad; distrei a eure, hervez ar Skritur, d'e hudurnez. Douget eo an den d'ar fall, peurvuia dieguz en em leusk da vond war mare e youlou fall. Enebi oute?... Pegen kuñv, pegen dous eo diskuiza ar penn war blueg bouk an didalvoudegez! Da vianna, e kalon Bilzig e veve ar hreunennig: marteze eun devez, eun devez hañv ye (4) ha klouar e teuo war wellaad ha da vleunia.

Bremañ, Bilzig a ziskenn, buan ha buan, ar pazennou an-nevoa pignet e amzer e bask etrezeg ar Vadelez; deut e oa evel diagent, da veza eur hañfart droug hag imorieg (5), atao o klask an tu da c'hoari tro pe dro d'ar re an-nevoa d'en em glemm oute... A! a! mar gallfe... Ar valtouterien, Pipi, Gargam, ar Barner... Ya, med eun tammig koz marmouz fall n'oa ken... Ar re all...

(3) **Blank** : gwan. — **Orodet** : kraboseg, krakig.

(4) **Ye** : laouen, lugernuz.

(5) **Imorieg** : drougrañsuz.

BILZIG HAG AR VALTOUTERIEN

Bilzig 'ta, e-pad ar goañv, a rede an ôchou ha tra pe dra e tiôche. Droug er valtouterien o reddeg war e lerh.

Eur wech, etre doub-deiz ha doub-noz, goude eun tâl-amzer, Bilzig a oa o furchal kerreg an enezenn: rust e oa ar mor. Seblantoud a eure dezañ, e mesk inoenn (1) an tarziou-mor, gweled peñseou o tond d'an daze. D'ar red e teuas da gaoud Jarlig koz, eñ ive o vesa ar mor, kuzet a-dreñv eur garreg, war lein an enezenn.

Na padal ma klevas e oa peñse war an ôd, ha Jarlig ker-kent hag ar pôtr en daze.

— Barrikennoù didalet, gwin a oa enne! eme ar pôtr koz. Daoust ha ne gavfom-ni ket unan, unanig hepken en he fez?...

Ha gand beg e dead e lipe e vuzell, troñsal a rê e fri.

— Gwin, pôtr, gwin!... Klaskom en eur hogn bennag... Marteze.

— Jarlig! Jarlig!... unan... amañ!...

— Petra ' vo grêt?... N'om ket evid he zenna ahann!...

— Hag ar valtouterien?...

— Ar valtouterien?... eme Jarlig koz. A! ya, ar valtouterien!... Kê, ha d'ar red, dindan beg ar Roh-Vran. Eno e ri eun tammig tandad gand lann ha raden seh...

— Eun tandad, Jarlig?

— Ya, pôtr, hag hast afo, ha ken buan all an distro.

Bilzig, sonnet dirag an den koz:

— Eun tandad! ober tan!...

— Ken divaoue-ze out deut da veza, te?... Hag ar valtouterien!... Buan ha buan eh-afont da domma... a! a!... du-hont, d'an tantad, ha da lavared o fedennou, hag, e-pad an amzer-ze, ni... ar gwin...

Hag ar pôtr d'ar red, a-dreuz an ôd, da veg ar Roh-Vran. Jarlig koz, daoust d'e gozni, n'oa ket hualet. Bet eo beteg

(1) **Inoenn** : eonenn.

e di e-unan hag hini Izabel, hag o zri, Jarlig, Jobig, e verh hag Izabel gand peb a varaz, ha d'an enezenn.

Ahane, pa errujont, e weljont an tantad.

— Eun tantad? eme Izabel.

— Ar valtouterien a zo du-hont o tomma, a respontas Jarlig, ha Bilzig ne zaleo ket.

Toullet ar varrikenn gand eur wimeled, leuniet ar barazou.

— Arabad eo deom ober re a drouz evelkent ! eme Jarlig... Med setu Bilzig...

Ha peb a varazad win war o fenn hag int d'ar gêr, maltouter ebed n'o-deus kavet war o hent : êt e oant, ha d'ar red, da weled an tantad...

Antronoz vintin, n'oa brud dre ar bourk nemed euz tantad beg ar Roh-Vran, hag euz ar varrikennou gwin didalet, kavet war an ôd endro d'an enezenn. Tre ar mor, en izelvor, leun a dud o redeg an ôchou; an darnvuia o oa endro d'an enezenn ha da veg ar hastell, pep hini o klask tañva ar gwin.

Ar valtouterien gand o fuzuliou, o zabrinier, o fistolennou, a dôle evez mad.

Eun toulladig martoloded a gavas, e gaolienn eur garreg eur varrikenn en he fez. Hag int a dôliou mein d'he didala. Galvet o-deus ar re a oa en o hichen da gemer o ferz er varrikenn. Gwazed ha merhed hag all, gand o boutou koad, ha da eva! da eva!... Grêt o-deus, kement ha ker bian, ken ma en em unanas endro d'ar varrikenn eun toullad mad a dud, ha pep hini an-neus bet e voutezad gwin.

Ar valtouterien a gouezas war an tôl : digemeret mad int bet, difrêzet, lesanvet : « Didalvez ! Chas gourlenn ! » Ha pep hini evelkent en eur youhal, a eve, eve. Ha boutez pe voutez ah-ê atao er varrikenn.

Gallet o-deus evelkent, ar valtouterien, gand kalz a boan, lakaad ar gwin da redeg. Neuze, ho-pije bet klevet kaerra jolori ha jabadao a zo bet biskoaz klevet, e Breiz-Izel, etre Montroulez ha Lannuon. Beza ' oa eno marvad, daou pe dri hant den, gwazed, merhed, kañfarted, trefuet, trelatet o fenn, hanter-vezo pe vezo darn aneze, hag a grie, a youhe, a zutelle endro d'ar valtouterien. An arvest-se en em zizolle e mesk ar herreg, a-uz d'an tôliou mor a deue da frega dindan o zreid :

— Chas gourlenn ! Loened louz ! Amprevaned !...

Ha padal na dreist trouz ar jolori, kroz an tarziou mor er haoliennou hir, setu e sav eur vouezig sklêr diwar kern uhella beg ar hastell. Pep hini a anaveze an ton hag ive ar zon, son Brigadier ar maltouter.

War beg ar garreg, Bilzig hag eun toullad pôtréd ha pôtrezed a gane ar han; ar wazed hag ar merhed, d'an traoñ adaleg beg ar hastell beteg an enezenn, a ziskane. Piou an-nevoa grêt an ouidell-ze? Piou? Tamall a rêd anezi da Jarlig koz.

Ar zonig-se a oa bet grêt da vrigadier ar valtouterien, eur Hernevad kajuz (2) ha killenn.

Evruruz eo bet ma teuas ar person hag ar hure war an ôd, da ober an disparti etre ar vartoloded hag ar valtouterien; paneved da ze, na petra a vije bet c'hoarvezet eno !

Eun nebeud goude, ar peoh a renas adarre er bourk. Med ar valtouterien, pôtréd lemm, daoust, ha marteze abalamour d'o didalvoudegezh, o-devoa dalhet eñvor euz arvest ar gwin. A-nebeudou o-deus dizoloet an doare, penôz Bilzig an-nevoa kavet ar varrikenn win, penôz an-nevoa grêt tantad beg ar Roh-Vran, ha penôz Jarlig koz hag e verh, Izabel ha Bilzig o-devoa diôchet ar gwin peñse. Re ziwezad ! Evet ar gwin.

— N'euz forz ! Me gavo deze o marchou, a lavare ar brigadier, d'in-me e paefont ar gwin hag ar zon. Me a raio deze o boutou !...

— Brigadier, eme Jarlig koz, eun devez, pell goude, ma kleve anezañ o toui Doue penôz Bilzig hag eñ, Jarlig koz, ah-aje o-daou d'ar galeou — Brigadier, ho leou-douejou ne dalvezont ket kalz a dra. Evidon-me forz ne ran ahanoh, ha fê a vefe ganen diskouez penôz eur zonig ken dister he-deus tizet ahanoh. Ha m'an-neus Bilzig evet eur werennad gwin Bourdel (ha digej mad a ran va geriou), m'an-neus Bilzig evet eur bannah gwin, ar gwin-ze an-neus grêt vad d'e galon, da galon eur paour kêz kristen, muioh a vad eged an hini ho-peus skuillet ha lakaet da redeg ha da goll er mor. Da biou hennez an-neus sklêraet e lagad, tommet e galon ha sederaet e spered ?

Abaoe, Bilzig, hag a dost, a zo bet heuliet gand ar valtouterien. Med hemañ n'oa ket eun diod, skañv meurbed e oa e dreid, ha piou ahanoh a nivero an troiou goullo an-neus grêt deze pilpazad war an torrôchou ?

Gargam, euz e du, a ziwalle ha piz gedon e ôtrou : karet an-nije bet ive kregi e skouarn ar pôtr.

Ha Bilzig ah-ê d'e higennou, da beñseal; sutellad a rê d'ar valtouterien ton kantik ar Baradoz, difrêzal a rê Gargam. Krohen kurunou ! Eur pôtr ral Bilzig, pa lavaran deoh !

(2) **Kajuz** : tagnouz.

BILZIG HA PIFI

Ped gwech ive an-nevoa klasket an tu da dapoud Pipi, ki ar presbital? Med Pipi a oa gloruz an tamm anezañ. Klevit 'ta : ki an ôtrou person !... Ha ne veze ket gwelet bemdez o redeg dre ar bourk... Med eur hi, n'eus forz pegen c'houzigell (1) dezañ da veza, n'eo evelkent nemed eur hi; deut eur zorhenn bennag dezañ, evel ar re all, hemañ ne wele ket pelloh ha beg e fri.

Kiez ar Brigadier a oa e rut : deut eun heugenn da Bipi da vond da giesa.

Digor dor ar presbital, Pipi a dennas gantañ e dreid er-mêz an ti, hag eñ en hent.

Ar bôtred, kañfarted droug, evel n'emañ gante ar hiz e peb bro, a dôliou mein a rede war-lerh ar giez hag ar chas. Hag ar vein a frone endro deze hag a-wechou war o hrohen.

Keuz da Bipi dirag eun heveleb arvest da veza kuitaet e bresbital. Netra evitañ da deskaoua war an dachenn-mañ. Endro d'ar giez e rode, e rede, e lamme, e harze, e kroze hag e skrigne o dent, pôtred divergont meurbed, chas gouez hir ha lemm o dent, hag evid eur c'houezadennig an-nevoa tañveet deuz ar giez!... Kizidig Pipi, kosaad a rê. Ha m'anniñe bet gouezet!... Eun tamm kiez fall... Nemed eun diod ne oa... Ha petra a lavaro an ôtrou person hag ar garabasenn?... Mond da giesa !... Mond da giesa !... Distrei a raio war e giz d'ar gêr, absolvenn e behed a houlenno digand ar garabasenn.

Keit ha ma wente, en e spered a gi, an oll menozioù fur-ze, ar vugale a dostaas goustadig outañ. Eun tól mên da Bipi, spontet, ha dre e spont, Pipi ah-eas da glask repu e kraou moh Per ar Ham. Tizet! Tizet Pipi! Petra 'vo grêt dioutañ? Eur goz kastolorenn doull a oa war ar bern teil.

— Stagom anezi dezañ ouz e lost ! eme Bilzig.

Bilzig a stagas, ha stard, m'henn asur deoh, gand eun tamm neud gouel, ar gastolorenn ouz lost Pipi... Kizidig hoaz, ar paour kêz lost, abaoe ma oa bet darbet dezi beza bet friket gand boutez koad Jojo.

(1) C'houzigell : lorchuz.

Hast gand Pipi da zilezel e graou ha da bellaad diouz ar gañfarted.

— Er-mêz, koz-ki !... er-mêz !...

Eun tól baz dezañ war e gein, er-mêz ! Eun tól troad dezañ en e reor ha dindan skrijadennou ar bôtred... houp! eul lamm hag eñ war an hent. Tennet a boan ! Evuruz !... Med petra, petra ? Drign ! drign ! baoñ ! baoñ ! Ar gastolorenn a lamm war e lerh, euz an eil mên d'egile. Ha Pipi da redeg. Houp ! houp ! Med ar gastolorenn daonet, krog en e lost, ne zistage ket. Houp ! houp ! D'an daoulamm-ruz, hag ar vugale war e lerh o youhal. Ar vein a fron endro dezañ. Buan, buannoh hoaz!... Pipi diod-nay... Peleh eh-a?... Drign! drign!

— Hu ! hu ! Pipi... a grie ar bôtred, Bilzig er penn kenta.

E deod, eun troatad er-mêz e henou, e lost dinerzet a-rez an douar, Pipi ah-ê, hag atao war e lerh ar gastolorenn. Kement ha ker bian ken abarz an diwez ar paour kêz ki a gouezas, kastolorenn hag all, e toull dor ar presbital. Eno ar garabasenn a gavas anezañ hanter-varo, d'an abardaez arôg koad.

Pecherou a zo bet grêt da Bipi, ha gand ar garabasenn ha gand an ôtrou person. Paour kêz Pipi !... Goustadig, goustadig, ar gastolorenn a zo bet distaget : kignet ha dirusklet beg lost Pipi. Paour kêz Pipi!... Prederiet mad eo bet gand e vestr, ha, dreist-oll, gand e vestrez. Yahaet ar pôtr; dizonet (2) evid atao ? Evid eur pennad da vianna da vond da giesa... Eur gentel vad ha talvoudeg da Bipi, rag n'eus deskamant gweloh eged an hini a vez roet deom hag a zigermerom, med, klevit 'ta, diwar on houst on-unan.

Abaoe Pipi a zelle a-dreuz ouz ar bôtred, grognañ, harzal a rê oute; ha pa wele Bilzig ! Pa veze gand ar garabasenn, neuze e hrogne, neuze e harze, tre ma halle; pa veze e-unan, avad, e lost etre e ziouhar, e rede, aon dezañ, rag an tól-mein a gleve o fronal endro d'e ziouskouarn.

Eun tamm enklask e eure an ôtrou person, hag e teuas da houd penôz ar vugale o-devoa, war ar hi, roet o absolvenn d'an ôtrou person, evid e rustoni en o heñver. Hag ive, marvad evid paea dezañ ar per, ar hastrillez, ar spezard o-devoa dezañ debret e devez o laeroñsi.

Na piou tamall? Bilzig? Hemañ, gwir eo, an-nevoa staget ar gastolorenn, med oll gañfarted ar bourk o-devoa o ferz en droidell grêt da Bipi.

— Peoh ! peoh ! a vouskomze an ôtrou person, pa lavare

(2) Dizonet : galleg « sevré ».

dezañ e garabasenn penôz e oa red skourjeza a-nevez ar bôtred.

Seder na laouen ne oa ket evelkent an ôtrou person.

— Koz kañfarted! Kredi ober droug da gi an ôtrou person !... Tregeriz !... Tregeriz !... Ha Bilzig ?... Bilzig !...

XIII

BILZIG HA KAZEG AR BARNER

Imorieg (1) 'ta e oa ar pôtr ha dalhet an-nevoa hoaz war e beñsou blaz gwialenn ar Barner; biskoaz evelkent en e empenn n'an-nevoa bet siket penôz, eun devez, e hallje, eñ paour kêz reuzeudig, restôli d'ar barner an derou mad, bet digantañ, pe war e hourhemenn, e sal vraz ar presbital.

Ar barner a oa eun ôtrou ha n'oa ket brao delher penn outañ. Gwir eo, pa deue d'ar bourk, peurlies, pa zave gand ar hra, an hent ne veze ket re ledan evitañ. Petra 'fôt deoh ? Pep hini ahanom an-eus e si' Hini ar barner?... Eur bannah a gare, eur bannah gwin-ardant.

— Eun dakadennig, Mari-Janig, a lavare an ôtrou barner d'an ostizez, eun dakadenn !...

Trelatet eun tammig penn an ôtrou barner; neuze pa gave eur martolod koz bennag :

— Na kemer a rafes-te eur bannahig, Fañch?

— Evelkent, ôtrou barner.

— Peb a dakadennig deom, Mari-Janig.

Nebeud goude, e veze gwelet endro d'ar barner, pemp pe c'hweh pôtr koz.

— Eun dakenn, Mari-Janig !...

Hag an ôtrou barner evuruz, evuruz, hanter-vezo, ma veze skañv a spered, gwall bonner e veze a dreid, ha teo e deod. Ha peurvuia ive, pôtr ar bourk, Bilzig er penn kenta, a veze ouz e hed, hag, en eur gana, eh-ênt da ambroug anezañ beteg Kroaz Pennenez :

*Kerjantjili barveg wenn,
Galochou braz, porpant lien.*

Eun dervez 'ta ar barner a deuas d'ar bourk. D'ober petra ? Ze na zell ket ouzoh, na kennebeud ouzon-me. Dond a eure d'ar bourk, ha war varh, war gazeg e tlejen lavared. E varh (e jao a lavarje eur blohig) a oa eta eur gazeg, Bidoullig he ano, eur gazeg wenn, koz douar. Staga a eure ar barner e

(1) Imorieg : drougrañsuz.

gazeg e marchosi Mari-Janig, eva a eure eur bannahig, hag eñ d'ober e vennad.

Ar vugale a zo klufan, ken klufan hag ar merhed; ar barner, èt en e hent, setu int er marchosi. Gliz a rê. Hag int da zelled ouz ar gazeg: gwelet koulskoude o-devoa bet Bidoullig meur a gant gwech. Bilzig a oa, evel ma oa dleet, en o zouez. Ha penôz... (Piou henn lavaro?... Eñ marvad ne ouie ket e-unan) e savas en e venoz koun gwialenn ar barner, hag ive ar c'hoant, an ezomm d'henn tizoud d'e dro.

Keit ha ma oa bet o redeg ar pardonioù gand bugale ar beorien, o ruza e voutou war henchou Breiz-lzel, an-nevoa desket — c'hwi her goar ervad — kalz a droioù burzuduz. Evid ober fringal eur marh pe eur gazeg — gwelet an-nevoa henn ober meur a wech — daoust pegen koz dezañ pe dezi da veza, n'oa ket red rei dezañ pe dezi kalz a gerh; eur bodig drez, dindan e lost, a oa gwelloc'h eget kerh na gwin-ardant.

Sioulig, ger da zen, Bilzig a glaskas, a gavas, a zidelias eur bodig drez ha ne viras nemed begig ar brank kaled ha leun a zrein. Tostaad a eure, heb ober van a netra, ouz ar gazeg, hag ar begig drein a zikas e-mesk ar reun, dindan lost ar gazeg. Hag eñ er-mêz ar marchosi da c'hoari kornigell gand Jojo ha daou pe dri all.

Nebeud goude, ar Barner, evet gantañ peder pe bemp takadennig, a deuas d'ar marchosi :

— Erru ar barner ! ar barner !

Eur zutelladenn :

— Nebon ! Kañfarted, eh-it da vond alese !

Eun tîl sutell etre e zent :

— Ar wialenn ! ar wialenn !

Hag ar bôtred, o daouarn gante en o godellou, a gerzas er-mêz. Hag ar barner a hroz mole :

— Kañfarted ! ar wialenn. Soñj hoh-eus ?... ar wialenn !

Distaget gantañ Bidoullig; ponner e oa ar barner, beh dezañ, en eur c'houeza evel eul louz, en em zevel war an dipr : e dreid er sklegioù :

— Hu ! hu ! Bidoullig.

Ha Bidoullig da heja e lost, dever enni eun tammig, laouen da vond d'he hraou. Siwaz ! an drein a stokas ar hig; Bidoullig a oa kizidig meurbed euz an tu-ze, ha, gand he zroad kleiz a-dreñv, e tistagas eur flipad...

— Ho ! ho ! Petra, Bidoullig ? eme ar barner souezet.

Bidoullig o rual ! Ouspenn deg vloaz a oa abaoe ma n'he-devoa grêt kemend-all ! Ha ne oad ket e miz ebrel !

Hag o-daou, ar barner hag ar gazeg, o sevel ar hra, med ne oant ket en o jeu, neuz ebed ne rê Bidoullig, hag ar barner, pa wele e gazeg o plega, o heja he dioukouarn, droug enni, a heje ive e benn.

Bidoullig, an douster, ar furnez, petra a c'hoarveze ganti ?

Mouzet an eil ouz egile.

— Petra a c'hoarvez ganti ? a adlavare ar mestr dezañ e-unan... Biskoaz he fenn fall n'he-devoa bet grêt !... Petra ?...

Bidoullig ive, dre he spered a gazeg a lavare :

— Re a dakadennou, marvad, an-neus evet hirio an ôtrou hag, heb goud, 'm-eus aon, an-neus mesket gand reun va lost eun drein bennag drez pe spenn.

Hag hi a heje he dioukouarn evid diskouez d'he mestr n'an-ê ket mad an traoù ganti.

Erruoud a rejont evelkent war ar plên, kent diskenn da Bennenez.

— Eun tammig d'an drot, Bidoullig !

Hag ar marheg a skoas gand e wialenn eun tîlig war dalier ar gazeg.

Bidoullig, mar plij, a reas digemer treud da becherou he mestr hag henn diskouezas : eun tîl lost war he morzed deou. Ya, med pa zistroas al lost d'e leh, piou a zo bet tizet?... Bidoullig ! An drein en em zikas, en em voutas, ha don, e kig ar gazeg. Hag hi da rual, da hejal he lost, da c'hourignal. Siwaz ! Seul-vui ma 'h-heje he lost, seul-vui an drein a rê o dever ha donnoc'h-don e sikent o beg er hig. Bidoullig a ziode : ruadenn ahann, ruadenn alese; sevel a rê he reor.

Ar barner a gare e Vidoullig. Evelkent petra a c'hoari ganti ?... Penn fall, Bidoullig ?...

Habask n'oa ket an ôtrou barner.

— Alloñ, Bidoullig !

Hag eun tîl gwialenn war skoaz ar gazeg. Homañ, droug enni a zistagas eun tîl ru gand he zroad deou.

— Fê d'am ôtrou d'an doulle ! eme ar barner, evelse emañ kont ?

Hag eun tîl gwialenn zeh a begas war beñsou ar gazeg — eun espled, Bidoullig ! — Homañ, touellet gand an droug a oa enni, a ziskennas gra Pennenez d'an daoulamm-ruz : lavaret ho-pije eun diaoulez. Ya, med ar Barner, droug ennañ ive, dao ! dao ! da Vidoullig gand ar wialenn.

En eur pleg berr war an hent, dirag poull-hao (2) ti ar Faven, heb doujañs evid he mestr, Bidoullig henn divarhas. Kouezet ar barner er poull-hao!... Er poull-hao!... Eur pôtr brao, an ôtrou barner Kerjantjili! E zillad leun a fank hag a frigas, e dok e-kreiz ar poull, e henou leun a hao, hag e vleo, e vleo, Salver Jezuz!

Pa oe savet en e zav nemed hao ne oa.

Ha Bidoullig?... Bidoullig ebed ne welas. Homañ a oa êt gand ar gounnar pe gand ar foeltr pe gand mil malloz an ôtrou Doue, d'an daoulamm-ruz etrezeg he marchosi, e-leh ma oa bet kavet maro-mik, an deiz war-lerh.

E-pad pemzeg deiz n'oa bet ken kôz etre Lokireg, Gwimaeg ha Lanneur nemed euz ar barner hag e gazeg; ar hurunou a vije bet kouezet war tour Kernitron, n'an-nije ket grêt kemend-all a drouz.

Na gweled a rit-hu ar paour-kêz barner, fank hag hao hag all o vond d'ar gêr! Treantet gand an hao gleb-dour-teil. Ha war dreujou o dor klufaned Pennenez o c'hoarzin goap outañ. Marvad ma vije bet kañfarted ar bourk eno, êt e vijent bet da ambroug anezañ beteg e di.

Ar givijerien, hag a gignas ar paour kêz Bidoullig o-deus kavet ar bodig drêz a lakaas ar gazeg fur da drei en diotaj. Roet o-deus anezañ d'ar barner, hag hemañ, sioulig, a reas eun enklask. Den ne oa bet er marchosi nemed an toulladig pôtréd an-nevoa gwelet e-unan, hag en e spered, koulskoude difiuz, ne gouezas ket ar menoz e vije bet unan euz ar re-ze an-nije bet grêt an tôl... An tôliou gwialenn, ôtrou barner, roet heb abeg na reiz, a vez paet, er bed-mañ pe er bed all.

Bilzig, c'hwi henn goar ervad, ne oa na birbiller (3) na brabañser, hag a zalhas evitañ e-unan ano an hini an-nevoa lakaet Bidoullig da ziodi hag he mestr da goueza er poull-hao: c'hoant n'an-nevoa ket da veza tapet diwar-bouez e deod. Hag evelkent, am hredo neb a garo, tamm laouenidigez ebed na dennas Bilzig euz digouez ar barner... Abalamour da betra? Abalamour da betra?... Goulennit digantañ. Eñ e-unan, marvad, ne vije ket bet evid henn displega dirazoh, henn gouzañv a rê.

(2) **Hao**: hañvoez.

(3) **Birbillier**: teodeg.

XIV

BILZIG GWASKET

Evelse Bilzig a greske en oad hag en nerz, en furnez!... Mad atao ha karantezuz evid e vamm Izabel, killenn ive atao gand ar re all. Gwir eo, ar re-mañ ne oant na tener, na trugarezuz en e geñver: ne oad ket evid beza re rust e keñver eun haillon evel Bilzig, a lavare oll dud ar bourk. Mouez an oll, mouez Doue! Ha dao da Vilzig, pa veze tapet en eur pleg berr bennag.

Eun devez 'ta, ma oa o vesa bioh ha deñved e amezegez, e Park ar Mèzou (penôz eh erruas an doare? Bilzig biskoaz n'an-neus henn gouezet), bioh ha deñved hag all êt er park nesa. An anevaled, c'hwi oar, o-deus o fenn o-unan, o menozioz, o zechou, o youlou. En em glevet e oant evid mond da laerez er park all? Marvad. Ha Bilzig da redeg war o lerh. Flastret ar patatez, ar melchon; ar vloh a ziwriennas eur gôlenn sklech (1). Perhenn ar park a erruas war an torfed. Hemañ ne houlenas ket digand ar pôtr hag-eñ an-nevoa meset mad e anevaled, hag-eñ an-nevoa grêt e zevel.

Ar paour kêz Bilzig a baeas evid an oll: evitañ e-unan, evid ar vloh hag evid an deñved. Skouarnad ahann, skouarnad alese, ken a drizillonne e empenn, ha paneved ma oa stag mad e ziouskouarn ouz e benn, a dra zur, e vijent bet chomet etre biz-meud ha biz-yod dorn deou Fañch-Glaoda.

An dud diwar ar mêz n'int ket kizidig evito o-unan, ha pegen nebeud evid ar re all!... Evelkent Bilzig a gavas dezañ penôz... rag kousto pe gousto, eur gôlenn sklech ne dalveze ket ar hrabanajou, ar skouarnajou a oa bet roet dezañ didruez. Hag ar vloh hag an deñved, penn-abeg d'e binijenn, a oa, du-hont, o peuri evel pevar anevalig dinamm ha dinoaz. Eur wechig an amzer, e savent o fenn da zelled ouz ar pôtr, marteze evid ober goap anezañ, piou a oar?

Ha Bilzig d'e dro: ha dao d'ar vloh, dao d'an deñved! Hag ar vloh da vreskign, an deñved da redeg ha da veal euz an eil penn d'ar park d'egile. Ya, med ar vloh a oa bet gand ar hole, eur pemzeg deiz a oa, ha, pa erruas ar bugel ganti

(1) **Kôlenn sklech** = kôlenn-zaout.

er gêr, he ferhenn en-deus dezañ kanet eur hantik all, ha ken didruez all.

Eur wech all, brao an amzer anezi, plên ar mor evel eul lenn, an darnvuia euz pôtre ar bourk a oa o c'hoari er bagou bian, o polead, o ronad. Bilzig, netra dezañ da ober en ampoent-se, a zelle c'hoanteg oute, hag a lipe gand beg e deod ar vihienn a ziskenne war e vuzell; e vreur Yannig a oa en gichen, e viz-yod gantañ don en e fri.

— Bag vian an Touz a zo war flot, Bilzig, eom enni! Deus, Bilzig, deus!

Ha Bilzig, evid ober plijadur d'e vreur, plijadur ive dezañ e-unan, rag ne gare ket kalz chom war e c'hoant, en em leuske da vond...

— Deus, Bilzig!...

Diêz enebi... Hag int o-daou e bag vian an Touz, evuruz. Ha da bolead; redadeg bagou etre ar bôtred, ha beh dezi!

Ya, med an Touz a deuas war ar porz, ezomm dezañ euz e vag. Peleh emañ?... Setu hi du-hont, daou gañfart e-barz... Ho! ho! hou... oup!

Bilzig, lemm e lagad ha sklêr e skouarn, an-nevoa anavezet an Touz ha klevet e hopadenn. Ha flêr en e vragou!... Bilzig a bolee a nerz e gorr, med eneb ar mare!...

Hag an Touz a hrozmole, droug ennañ, war ar chaoser, o hortoz ar vag vian. Ha, pa erruas Bilzig en ôd, daoust d'ar c'hwezenn da redeg war e dal, ha d'e roched da veza gleb war e gein o polead, evid e zeha an Touz a roas dezañ dizamant eur flipad war e fri.

— Marmouz zo ahanout, ar wech kenta eh-i war da benn er mor!

Heb klemm, Bilzig a zigemeras e friad: ar gaou gantañ. Evelkent ar pôtr a huanade, o weled e gamaraded o c'hoari, o vageal du-hont war ar mor plên... Hag eñ... ah-ê d'ar gêr gand e grabanad, Yannig war e lerh o suna e vihienn.

Gwasoh hoaz a c'hoarvezas gantañ, eur pennad goude. War ar pemdeiz, a bell amzer, a-viskoaz marvad, ar bôtred a c'hoarie kornigell; d'ar zul, evid elbedi o dillad, ha mired d'o labeza, eh-ênt war an hent braz, e traoñ gra Pennenez, da c'hoari bleiz.

Ar zul-ze 'ta, arôg ar gousperou, Bilzig gand ar vugale all, pôtre ha merhed, a oa o c'hoari. Tapet e oa bet da vleiz, dezañ da dapoud eur bleiz all. Ar bleiz en em zalhe e distro ar hra, ar vugale all (an deñved), eun tamm uhellou: deze al lañs evid redeg war-bouez traoñ. Ar Bleiz a gan, an deñved a ziskan.

Ar Bleiz. *Deñvedigou, deut d'ho kraou,
Emañ ar Bleiz e Koad-ar-Jaou.*

An Deñved. *Ped ha ped?*

Ar Bleiz. *Nao ha deg...*

An Deñved. *Piou eo ar vamm?*

Ar Bleiz. *Ar Gontez kamm.*

An Deñved. *Piou eo an tad?*

Ar Bleiz. *An Arabad.
Deut d'ar gêr en eur vagad
Pe 'vefet taget
Gand ar Bleiz arajet.*

Ar zul-ze, dre eur burzud, an ôtrou kont ha Gargam a deuas d'ar gousperou: war varh e oant deut deuz Tremedern.

Klevet o-deus kan ar vugale. An ôtrou ne oa ket heb goud piou a oa ar Gontez kamm, na piou an Arabad, hag anavezoud mad a rê ive Bleiz ar Jaou: Eñ a oa ar Bleiz, e vamm ar Gontez kamm, hag e dad an Arabad.

Ha droug en ôtrou. Ar vugale, gwelet gante an ôtrou ha d'ar red d'an traoñ gand ar hra. Bilzig, e pleg an hent n'an-nevoa ket gwelet anezañ, hag a grie diwar-bouez e benn:

— Piou eo an tad? An Arabad... Piou eo ar vamm? Ar Gontez kamm...

Amzer n'an-nevoa ket bet da zelled en-dro dezañ, ma oa Gargam krog en e golier.

— Ahanta 'ta, pôtr, tizet out! Krohen kurunou!...

Eur ger e galleg a lavaras ar mevel d'e vestr. Hemañ a zelas ouz ar pôtr ken didruez, ken divergont!

— Te eo ar mihieg... Distruja va gedon, va honifled!... Dao dezañ, Gargam!

Gwialenn Gargam a biñse hag a bege kement hag hini ar barner, ha Gargam a skoe dizamant war grohen ar pôtr. Bilzig a wac'he, tre ma halle.

Dilezet o-deus anezañ war an hent... Tri devez eo bet war e wele. Arajet ar pôtr. Ha kaer he-deus bet Izabel dizalia anezañ, adstigna a raio lasou e girjer Koad-Kerodren. Gwaz a ze da gonifled an ôtrou!... Ha mar gallfe gwaska Gargam!... Stigna a eure e lasou e koajou hag e lanneier an ôtrou... Ha Gargam a haloupe war-lerh ar pôtr.

BILZIG, GARGAM HA MAB AN ÔTROU

E ti Izabel ar vugale a greske, Bilzig a deue da veza eur pôtr kreñv. Hag e-pad ar goañv an-nevoa sikouret e vamm da besketa, da vezina ha da werza ar pesked, ar hregin hag ar bezin troh ha dizol. Deut an hañv, ha gantañ an heol tomm, ar mor plên ha kompez, an hañv, bennoz Doue, laouenedigez ar vugale. Na gweled a rit-hu aneze, e korvou o roched, diarhenn, o bragou troñset gante beteg o daoulin, o redeg war an ôd, o klask kontelleged, malkoned (1), tareleged, pe er poullou-trêz, er morlennou, oh ober redadegou gand o bagou: gobiri, biskinennou, goeletinier, teir gwerniou greiet deze gand o zadou. Pa deuio ar mor war an arôg, sellit oute o neuñv: emaint evel pesked endro d'ar gerrigi (2), pe o vageal er bagou bian.

Bilzig ha Yannig, goude o fesketez, padal ma hallent tenna o zreid gante er-mêz an ti, ha d'ar red war ar porz da c'hoari gand ar re all, da neuñ, da vageal.

An deiz-se, Bilzig hag e vreur o-devoa bet e ôtre, digand Saïg Jelvest da vond en e vag:

— Kê e-barz, pôtr, a hourhemennas Saïg da Vilzig, med bez aketuz da deuler dezi he eor, e-leh ma henn kavi.

Mab an ôtrou, eur pôtr a bevarzeg vloaz, an ôtrou Beskont, a lavare Gargam, leiz e henou euz ar ger-ze, — an ôtrou Beskont 'ta a falvezas dezañ, an deiz-se ivez, mond da ober eun tammig tro war ar mor. War e benn e dok garlantezet, en e dreid boutou bouklou arhant, gwisket gantañ e borpant voulouz ruz hag e vragou seiz melanijet (3). Brao ral an ôtrou Beskont, eur verhodennig. Hag eñ war ar porz, heuliet a-dost gand Gargam, hemañ e wialenn gantañ atao en e zorn.

Pôtr a bevarzeg vloaz 'ta an ôtrou, ha strij, eur glazard a bôtr heñvel ouz e vamm heb he madelez, lorch ennañ. Klevit 'ta, ne oa ket evelkent mab e dad heb abeg: mab eur Hont!... Na c'hwî a zo beskont? Beskont evel ma lavare ar

(1) **Malkon** : galleg « murette ».

(2) **Kerrigi** : begou kerreg, kerreg bian.

(3) **Melanijet** : melen-sklêr.

garabasenn en he yez a Leonardez. « Besk out » a rê Jarlig koz en eur zifreza anezi. Besk out? Ha ne n'on ket, a drugarez Doue. Ma vije bet Jarlig koz hag ar re all beskonted, marvad n'o-dije ket goapaet evelse. Rag, hag am hredit, mar karit, stankoh eo ar beskonted war douar Breiz-Izel eged ar bili war ôd Porz Bilieg. Ha pep hini a denne e dok d'ar beskont, ive d'e vevel, c'hoarzin goap a rênt dioute a-bell. A-dost? A-dost gwevn ral livenn o hein. Ha soupl o izili diraze, med peoh!... Kizidig meurbed eo ar vartoloded, hag arabad eo harlinkad aneze war eun heveleb doare.

An ôtrou beskont hag e vevel a oa, o-daou war ar porz, c'hoant dezo da vond war ar mor. Gargam a welas eur vag vian ha daou vugel e-barz, hag eñ da hopal:

— Ho! ho! hop!...

Van ne reas Bilzig (eñ a oa er vag gand e vreur): anavezet mad an-nevoa Gargam hag e vestr; dalhet koun an-nevoa en tôliou gwialenn o-devoa, eur zulvez a oe, kinkiset (4) dezañ e beñsou hag e ziouvorzed. Debrî gedon an ôtrou!... Hag abaoe brezel etre ar pôtr ha Gargam... Mar gallfe!... Ya, med Bilzig ne oa nemed eur paour kêz pôtr, ha, rag aon ouz gwasoh « Ho! ho! hop! » e teuas en ôd.

— An ôtrou yaouank a fell dezañ mond da ober eun dro vageal.

— Ma! Deuit er vag.

Yannig a lammas er mor, evid tostaad ar vag ouz ar chaoser. Dour er vag dreist ar vregach (5). Bilzig a oa diarhenn, forz ne rê ouz an dour-mor. An ôtrou hag ar mevel er vag: flak! flak! a ra an dour er vag bransigellet, strinka a ra a beb tu, karget gante o boutou. Boutou ler rubanet an ôtrou!

Gargam a hrozmoles:

— Mihieg zo ahanout! Perag n'ah-eus-te ket taolet dour er-mêz?

— Amzer din n'ho-peus ket roet.

— A! a! Louidig bian!... Te e... e... e... A! te e... n'em-eus ket ankounac'hêt.

— Na me, eme Bilzig outañ e-unan, na me...

Hag e polee goustadig.

— Ha na stignez-te ken da higennou war an trêz, dindan Koad Kerodren?

(4) **Kinkisa** : hilliga, flemma.

(5) **Vregach** : pleñch e diabarz ar vag.

— Geo!

— 'Ha lasou marteze er hirjer?

Ha Gargam a roas eun tîl gwialenn, ha seh, war listenn (6) ar vag. Van ne reas ar pôtr, hag ar vag ah-ê, war he fouez, plên ar mor, lufr evel eur sklaseñ.

Grêt gand on martoloded an dro d'ar bagou braz ha d'ar gobiri eoriet er porz, seder meurbed an ôtrou Beskont, sutellad a rê eur zonig galleg (ne ouie ket ar brezoneg), eur zon desket gantañ du-ze e Bro-Hall.

Gargam a zelaoue sutell e vestr, Bilzig a varville.

Echu ar zutelladenn, Gargam, en eur c'hoarzin, a lavaras d'ar pôtr:

— *Ma! Neuze blazet mad kig gad?*

N'eo ket peur-fall.

A! a! n'eo ket peur-fall?

Nann! nann!

A! a! Hag e vousec'hoarze Gargam.

— Ha blaz ar wialenn ne n'eo ket peur-fall ivez, marvad, med ankounac'hêt eh-eus-te?

— Pell e pad blaz an traou mad! eme ar pôtr.

— Gwelit 'ta, figuz an ôtrou, mar plij; heugi na rez-te ket dirag ar hig-ber? Kig-ber da eur fri louz evel da hini-te!... Diwall, mar kerez, rag mar tapan ahanout!... Krohen kurunou! ya! ya! mar tapan ahanout!...

Hag ar wialenn en e zorn a c'hwibane. Psitt! psitt!

— Ne dapfet ket ahanon, n'eo ket skañv awalh ho troad.

— Skañv awalh, marmouz! mihieg!... Diwall! Laka ahanon en ôd ha buan pe... (Bilzig a vousec'hoarze)... pe war da benn eh-ez da vond er mor.

Grêt an-nije bet Gargam ar pez a lavare. Siwaz! na polead na ronad ne ouie.

— Hast afo kas ahanon en ôd.

— Qu'y a-t-il, Gargam? eme an ôtrou.

— Rien, Monsieur le Vicomte.

— Quel dommage de rentrer!... Restons encore un peu.

— Le garçon dit qu'il lui faut aller à terre!...

— N'eo ket gwir, ôtrou, eme Bilzig: gaou a lavar.

Klevet mad an-nevoa komzou ar pôtr yaouank, ha ma ne

(6) Listenn : riblenn.

gôzee ket ar galleg, Bilzig evelkent, abaoe ma oa bet er skol gand ar hure, her hompren a rê.

— Buan en ôd, marmouz! a hrozmole Gargam.

— Gaou, Gargam! Gaou!

Hag a-nerz e gorv, ar pôtr a bolee. Brañsigellad a rê ar vag. An ôtrou evuruz a c'hoarze. Gargam ne c'hoarze ket.

— Gaou, Gargam! a adlavare Bilzig.

Gargam a ziode. Ne grede ket dirag e vestr...

Tostaad a reont d'ar bord. Savet an daou vartolod en o zav. Kra... a... a... ag... ag!! Diarôg ar vag vian a dourt beg eur garregig, ar Garreg-du. Hag an ôtrou hag e vevel a gouezas o-daou war o reor, an ôtrou e foñs ar vag, en dour, ar mevel war he listenn. Ponner, gwall bonner Gargam, skañv ha lesponj (7) eun tammig ar vag, plada a eure. Ha Gargam hag e veskont, o-daou war o hrabanou, o parlochad en dour-mor. Ha da grial diwar-bouez o fenn. Leh ne oa ket da youhal! Daou pe dri troatad dour ne oa ken dindan kein ar vag, brao an amzer anezi.

An daou beñseo a zavas en o zav, hag int war an trêz, treantet, nemed diveradur ne oant. Gwiskamant voulouz ruz ha seiz melanijet ar beskont, hag e dok garlantezet? Eun druez. Ha Gargam mezeg, droug ennañ, a fuc'he.

Bilzig evelte a oa kouezet er mor; hast n'an-nevoa ket da zond en ôd, aon d'ezañ: gwialenn Gargam!

Ar vartoloded, war ar porz, pa o-deus gwelet ar burzud, d'ar red a deuas da houd an doare.

— Mab gast! Genaoeug! eme an Touz da Vilzig, teuler er mor mab an ôtrou!

Gargam a dapas krog en e skouarn:

— Boued ar gounnar!

Hag eun tîl troad da Vilzig en e reor.

— Krohen kurunou va ene!... Setu da hopr, blaz kig gedon! Blaz ar wialenn! Foreant!

— Koulz eo evelkent ha blaz an dour mor!

Ha Bilzig d'ar red ha d'ar gêr...

Sparlet, hualet e oa Gargam gand e zillad gleb, peg ouz e izili. Kavet gantañ e wialenn, lakaad a rê anezi da c'hwibanad, med Bilzig a oa pell... Bilzig ne oa ket hualet...

War e hent e kavas Saïg Jelvest.

(7) Lesponj : dibarfet, hedro.

— Petra 'ta, pôtr? Na te az-poa kollet an nord?

— Ket, Saïg!

— Petra 'ta?...

— Gwialenn Gargam, Saïg, c'hwi oar, eur zulvez...

— Deñvedigou deut d'o hraou!

Ar wialenn! a! ya!... Ha Saïg a vousec'hoarze en e varo.

— Diwall, pôtr, na goll ket an nord gand Gargam, te oar.

— Arabad eo deoh kaoud aon, Saïg!

Ar vartoloded ambroug a rejont, eur pennadig, an ôtrou yaouank hag e vevel, daou babor gleb-dour-teil.

Er maner, pa errujont, piou ne lakae ken e wialenn da c'hwibanad?... Piou a oa berr e lañchenn?... Gargam!

Displega an doare, penn-da-benn an-nevoa ranket ober d'an Ôtrou ha d'an Itron. Gargam, evel just, a lakaas ar beh ponner war chouk Bilzig: Bilzig ahann, Bilzig alese, Bilzig penn-abeg ma oa kouezet an ôtrou beskont war e reor en dour.

An ôtrou kont, an deiz-se, a oa troet war e du mad: eul louarn an-nevoa lahet e Koad Tremedern, hag evid an Ôtrou, tapoud eul louarn!... E louarn! N'an-nije ket bet roet anezañ evid daou hant skoed... Troet eta war e du mad, c'hoarzin a eure gwalh e galon o kleved Gargam o konta e neuadenn.

— Na karet am-mije bet, Gargam, gweled ahanout o neuñv war da barlochou evel eur hi plomm!

— Ha ma vijent bet beuzet! a lavaras an itron.

— Beuzet er porz, war an trêz!... Red e vo dit, evelkent deski neuñv d'ar pôtr, kleved a rez, Gargam?

— Ya, ya, ôtrou.

An Itron en he madelez a houlennas:

— Hag ar pôtr all, petra eo deut da veza?

— Henez, eme Gargam, henez?... Neuñv a ra evel eur pesk, hag e zillad a zo seh, ha pell zo, war e grohen; evuruz ma n'an-neus ket bet eur roustadenn digand e vamm.

An Itron a gasas he matez da di Izabel da houlenn kelou euz ar pôtr: plahig kuñv ha trugarezuz, itron ar hastell. Hag an deiz war-lerh e teuas he-unan beteg ti Izabel.

— Deus amañ, pôtr, deus. Ahanta 'ta, darbet eo bet dit beza bet beuzet Gargam ha va mab!...

— O! itron, na gredit ket se. Droug eo ar pôtr, med piou en e leh na vije?... Kalon vad an-neus, Itron, ha karantezuz en on heñver... Med hini pe hini a zo atao ouz e heskin,

oh ober goap anezañ, o skei warnañ...

— Karoud a rez da vamm Izabel?

— O! ya, Itron, eme Bilzig, krog e dorn e vamm, e vamm Izabel!

— Karoud a ra ahanoh!

— Goud ha kompren a ra kalz a draou, Itron.

An Itron, goude neuadenn Gargam, he-devoa grêt d'ar hure displega dirazi doare ar vamm hag hini he bugale. Hag abaoe, gand ar Gontez, eo bet karet ar wreg a-zoare, ar plah a skiant vad, ar vamm m'o-devoa an nehamant, an dienez moulet war he zal nerz he halon, ar vamm dilezet gand an oll, hag he-devoa poaniet, douget he beh (pegen ponner koulskoude) heb klemm, evuruz pa wele he bugale o kreski drant ha ye, evel peder gwezennig, deut an amzer nevez.

Hag abaoe, keit ha ma veze an Itron e Kastell Brechou, e teue, eur wechig an amzer, beteg ti Izabel. Eur gomz, eur ger, eul lazig (8) da bep hini, ha war he lerh eur skeudenn a frealzidigez, eur sklêrijenn e teñvalijenn an deveziou.

(8) Lazig : allazig.

AR BILADEG

Hag ar mor, mor ar vuez gand e wagennigou, a gelhe, a holo e deveziou, ar miziou e tiegez Izabel: hini hag hini e kouezent goustadig, goustadig e donder an dienez hag ar baourentez.

Ar vamm, evel diagent, ah-ê, diou pe deir gwech war ar zizun, da Lanneur, da Wimaeg, da Blegad ha da Blistin da werza he boutegad meskl, koukous ha bigorned, tammouigou pesked: moulleged, levneged, pleised, touilled, morleanezed, prenet ganti pe besketet gand Bilzig hag an tri vogel all.

An deveziou all, trawalh, re dezi aliez da ober, e rê euz he zi: gwalhi a rê, seha, dresa he dillad ha re he bugale. A-wechou evelkent, re skuiz, e teue, goude grêt ganti he zroiou war ar mêz, da azeza, eur pennadig gand ar gwrazez all, e disheol eur wezenn dill a astenne delienneg he skourrou a-uz d'an ôd.

Gwrazez ha merhed ar bourk a deue eno, brao an amzer anezi, war bord ar mor, da vesa o re vraz, krennarded, hag a weled o c'hoari du-hont war an trêz: darn aneze a rê stamm, darn all a wrie, ha red eo din henn lavared pa eo gwir, oll e teuent eno da gêzeal, da virbillad, ivez da glufani. Eno, dindan ar wezenn-ze, e vezent evuruz, ankouaet gante o zrubuill, o displijadur, aliez o anken. Rag ped aneze a oa o gwazed war ar mor, êt pell-pell diouz ar gêr, ha ped all... Med honnez a oa hag a vo o buez, hag a oa bet hini o mam-mou en o-rôg... Ar wezenn dill 'ta he-devoa klevet... Bre-mañ, siwaz... Em bugaleaj beo e oa hoaz ar wezenn, abaoe, koz-douar, krignet gand an oad, dizehet war he zroad, diskaret eo bet gand eur barr-avel.

Ar wezenn dill!... Ped rummad a Lokiregiz a zo bet o tis-heolia, o tisklaôia dindan he deliou: gwazed, merhed, martoloded, pesketerien, maltouterien! Dindan ar wezenn, pe harp outi, pa veze divalo an amzer, glao hag avel anezi, ar wazed eno a deue, sura pe galabousenn war o fenn, war o hein eur porpant eoliet, boutou koad goloet en o zreid, o chik en o genou hag o daouarn en o godellou. Ahane e vesent aketuz o bagou bian ha braz, o bagou boutet gand an avel, sachet gand ar mare, stropet ha ruillet gand an tôliou-mor.

Eno ho-pije klevet tud fur o prezeg. Ahan! Hemañ an-nevoa grêt (ped gwech!) tro ar bed; henhont a oa bet o vrezelli en Indez; ar glazard-mañ, lesanvet ar Prizonier, a oa bet, tri bloaz, er galeou, gand ar Zaozon, hag an hini tosta dezañ a zo o paouez erruoud euz brezel an Amerik.

Tud fur, pa lavaran deoh, tud a skiant vad!

Eun devez bennag, pa n'am-mo netra da ober, me a zanevello deoh ar prezegennoù kaer, ar hôteziou fur meurbed a hane niveruz war o zeod, a zifluka, a nije euz o genou, evel gwenan euz o hest. A! M'o-dije bet ar re-ze deskamant! Siwaz! Anez da ze, kap e vijent bet... da betra, a gav deoh?... A betra?... Ya, a betra?... Daoust ha me oar-me? A netra marvad. A netra?... Nann. Avel, avel, pell ha plouz... pa lavaran deoh... pell ha plouz!

Pa veze brao an amzer, e-pad an hañv, ar besketerien êt d'an ôd, ar merhed 'ta bodennet en o fluch endro d'ar wezenn, a deue, — o stamm gante en o daouarn, pe o beskenn war o biz, eun nadoz gwriad hloan etre o biz-meud hag o biz-yod, daou ha tri re lerou war o breh da zresa, — da glevet an neventiou; darn aneze, klufaned ar re-mañ, a deue eno da weled, da zelaou, ha dreist-oll, lañchennet mad, da gemer perz er ragach. Eno neuze e veze gwasket, miret, astennet, ledet, kempennet ar heloioù, hag ahane, divailluret, dishualet, disparlet, difarlet, kelien dibreder e nijent, a-uz d'ar bourk, kent mond da fronal euz an eil ti d'egile. Seblantoud a ra din... Ha na glevit-hu ket aneze sardoned, frou...

Homañ, he-unanig, gwreg aketuz, a heuill a lagad hag a galon bag he fried. Pleget dindan an avel, emañ du-hont o ravanelli war al leo-drêz; deut eo amañ, he bugelig ganti war he breh da hortoz he gwaz da zond d'ar porz. Gwelithi, azezet war eur vilienn, oh ober pecherou d'he mabig; he-mañ, gand e zaouarnigou, o grog e bronn e vamm, a laka he beg en e henou, en eur c'hoarzin dezi.

Homañ all, kosoh he hini, a zo gantañ o c'hoari, he dorn aketuz a hench e gammejou kenta; skuiz ar bugelig, henn lakaad a raio en he barlenn da barlohad.

Oll emaint o vesa o hrennarded, pôtrez ha pôtrez hag a welit du-hont, war an drêzenn.

Ya zur, an hini an-nevoa hadet pe blantet ar wezenn dill-ze heb douetañs ebed, ah-aio, ma n'emañ, war-eün d'ar Baradoz. Piou biskoaz a oa bet madelezusoh e keñver e genvroiz?

An Iliz, an ostaleri, leur dro ar wezenn dill, tri leh savet,

dibabet, dre venoz an Otrou Doue hag ar Werhez, evid laouenedigez hag evurusted Lokiregiz.

An Iliz, ti ar bedenn, hent ar zilvidigez; an iliz gand he Elez, he zent hag he zentezed alaouret, lijennet e moged an ezañs, sklent dindan zon kruz an ogrou pe unvaniez dudiu ar moueziou; an iliz, levez an eneo santel liammet gand karantez ar Werhez Vari, maget gand bennoziou o Zalver.

An ostaleri, ti ar gwin-ardant, leh karet gand ar wazed: dena, suna, eva a rênt en o gwerenn, mesket gand blaz an dour benniget-se, ankounah o deveziou dishegar, levez o buez dister. Ar werennad kenta a domme deze o halon, a sklerae mammenn o lagad; siwaz! an eilved a lakae an tan da ruilla a-dreuz dre o gwazied, en o empenn an alter da vervi.

Ar wezenn dill, gwezenn benniget, dindanni ped rumad a dud o-devoa leusket o soñjou da vale, da gerzed, da redeg, da nijal a-dreuz broiou burzuduz o c'hoantegez steuet gante war o spered, en o halon, evel ar gwriad-kevnid war ar bod lann dindan glizenn lugernuz eur vintinvez.

Laouenedigez dispar! A-viskoaz, ar vourkiz a oa bet eno en em unanet evid ren eur vuez all, disheñvel, gweet gand eun neudenn, neudenn arhantet an huñvreou, hag an neudenn-ze an oll Vretoned o-deus he havet er havell m'int bet luskellet gand kruz ar mor ha kanaouenn an aveliou.

Pegen uhel e savom-ni, va Jezuz! Ha me war-lerh. Ho! ho! pell war lerh! Etrezeg petore bro?... War an douar, pôtr koz, diskenn buan ha buan!...

✱

Ar merhed 'ta a oa eno en deiz-se, brao ral en disheol, oh ober stamm, o wriad, o kêzeal, o vesa o bugale. Izabel a oa chomet er gêr: redeg a rê he lijou; he ôtre he-devoa roet d'he bugale da vond da c'hoari gand ar re all, ha Bilzig, Madelen, Yannig ha Katellig, o fevar en trêz. Pôtrred ha pôtrezed ar bourk, oll emaint war an drêzenn, o labourad, o c'houezi tre ma hallont, evid sevel tour pe gastell, sterna lestr pe vag arôg ar gurlenn.

Ar vugale eno a-viskoaz o-devoa c'hoariet war an drêzenn-ze; e-leh ma welit anezhe hirio o c'hoari, o zadou, o mam-mou eno a c'hoarias, hag o bugale war o lerh, ha bugale o bugale a heulio o skwer.

En deiz-se, rust ar mor, mareou braz anezi, ar vugale 'ta a oa eno unanet arôg ar gurlenn, eur pennad mad arôg, ha paliou, marriou, pigellou da doulla, ha da zével, da gem-

penn, da benta tier, touriou, bagou ha listri. Kalet eno e labourad, ive e ragached.

Sellit oute. Ha gweled a rit-hu Jojo, ar Pôtr-Ru, Lellig an Touz, Fañch ar Peul, Bilzig hag e vreur, ha kalz a re all hag a anavezit, o palad, o pigellad, o vañsonad; hag ar merhed, ken trefuet all, a zikour o breudeur: klask, kavoud, kerhad, dougen a reont ar vein evid sterna ha kreñvaad al listri hag an tourellou.

Ar mor, e-barz ar porz, a zav, a c'houez; en em astenn, en em leda a ra war an trêz, endro dezi eur houriz wenn dantelezet, dantelezet gand ar gwagennoù en em blege, en em zisplege, a frege, a zifarlee, en eur ziruilha o garlantezennou eonennuz.

— Erru ar mor! erru ar mor!

Hag ar vugale buan ha buan war o zouriou, en o bagou, en o zier. Ha skrijadennou!

— Erru ar mor!...

Ar mor a led e wagennoù war an trêz, a astenn e zivreh endro d'ar gerrigi, d'ar bili; kelha a ra al listri, an tâliou-mor a strop o mogerioù, a freg warne, nebeud-ha-nebeud, tamm-ha-tamm e tispegont an trêz euz ar vein, ar mor a zav, strinka a ra, lammed a ra er bagou, disjuntra a ra an touriou.

Lestr Jojo hag hini ar Pôtr-Ru ah-a d'ar foñs, leun a zour; tour Lellig an Touz a gouez en e boull. Ha kriadeg, youhadeg!... Ha kêziou, prezegennou, ive rezonadeg!

Bilzig, e vreur hag e ziu c'hoar, reud war o zour-tan (re ar re all êt d'ar zol, dismantret, peñse grêt gante), a c'hoarze, a wapae, lorch enne mar plij, fêa ma oa (1) o zour-tan hepken en e zav.

Jojo hag ar Pôtr-Ru, daou daskanier (2) ma oa, kouezet o re en o foull, gwasket o imor, a falvezas deze tenna Bilzig hag e laz (3) diwar o zron. Strinka a rejont dour gante; tâliou treid o-deus roet d'an tour-tan kement ha ker bian o-deus c'hoariet o fenn, ken m'o-deus freget ha diskaret ar bern trêz; Bilzig hag e vartoloded kouezet en dour, karget gante o boutou.

Droug e Bilzig. E piou ne vije ket? Bilzig, eun êl a zouster ne oa ket, c'hwî oar. Eno ho-pije neuze bet gwelet eur bila-deg euz ar starta. Bilzig a grogas e kolier ar Pôtr-Ru, eun

(1) **Fêa ma oa** : o veza ma oa.

(2) **Taskanier** : rendaeleer.

(3) **Laz** : skouadrennad.

tôl dorn dezañ war beg e fri, ha distaget mad, ken mad ken ma strinkas ar gwad war e roched. Hag ar Pôtr-Ru da wac'hal, da vlejal: trehet ar paour kêz Pôtr-Ru, ha dinerzet. Jojo an-nevoa roet lamm da Yannig. Bilzig a deuas da zikour e vreur, eun tôl dorn hag eur voutadenn, ha setu Jojo stlapet a-hed e gorr war an trêz gleb, eun tôl mor a fregas en e gichen: goloet Jojo a zour hag a eonenn.

Seblantoud a eure d'ar vugale all penôz e oa beuzet Jojo, tostaad ne gredent ket, med o zeodou a bolee:

— Bilzig! Zilzig! bastard!

Savet en e zav, Jojo, gleb-dour-teil, ha da grial ha da youhal gand ar re all:

— Bilzig! Zilzig, bastard! Kê da glask da dad beuzet e stank ar Vilin-avel!

Bilzig ha Yannig hag o-daou d'ar gêr; ar bôtred all d'o heul a ambrouge aneze a dôliou-mein:

— Bilzig! Zilzig!

Ar mammou, gwelet gante ar gabaill, a zavas euz a-zindan o gwezenn.

— Petra a zo c'hoarvezet?...

Kavet o-deus ar Pôtr-Ru o tiwada, ha Jojo o tivera hag o-daou o vlejal. Trelatet pennou ar gwragez:

— Jezuz! Mari! Jozeb! eme mamm ar Pôtr-Ru.

Darbet eo bet dezi simpla pa he-deus bet gwelet he fôtr.

— Piou an-neus grêt ze dit?

— Bil... Bil... Bilzig! a hikas ar pôtr.

Ha beh war Bilzig... Ar vugale, heb ehani, a grie:

— Bilzig! Zilzig!

Ar mammou en-dro dezañ:

— Mab gast! Bastard fall a zo ahanout! Amprevan! Ne vefer ket evid da zuja?... Ne vefer ket evid dond a-benn euz ar hañfart-mañ?

Mamm ar Pôtr-Ru a roas dezañ eur skouarnad war eun tu, ha dizamant hini Jojo eur grabanad war an tu all.

Hag evelse ar vugale hag o mammou, en eur grial, a zo bet êt da ambroug Bilzig ha Yannig beteg toull dor Izabel.

Digemer mad a zo bet grêt d'an daou bôtr. Droug (ha ne oa ket heb abeg) er vamm dirag eun heveleb arvest, hag o-daou o-deus tapet beb a lardadenn!...

Nebeud goude, Madelen ha Katellig a erruas er gêr: an daou vreur o ouela azezet war an oaled.

— Penn-abeg n'an-int ket bet euz ar biladeg, mamm Izabel.

— Ma, gwaz a ze!... Ma karfent chom er gêr!...

Ne oa ket he homz ganti peurachuet, pa antreas en ti he amezeg nesa, Saïg Jelvest; anavezoud a rit anezañ.

— Ahanta 'ta, Izabel, petra a nevez? Daerou, 'm-eus aon, a zo en ti?

— Ya, ya, Saïg! An daou gañfart-mañ, pa vent er-mêz, a zo heñvel ouz daou ziaoul dishualet; Bilzig, end-eeun, a zo deut da veza eur gwall bôtr.

— Marteze ivez, Izabel, ne vez ket atao ar gaou gantañ; me a oar ervad petra a zo bet c'hoarvezet en trêz. Mad eh anavezan an doare, n'an-on ket evid tamall ar pôtr, n'an-eo ket da glemm, an daou all, 'lavarant ket: en em zivenn an-neus grêt ha divennet an-neus e vreur. Med n'eo ket ze eo ze: kôzeom nebeud, med kôzeom mad ha sklêr, eeun en e nord!... Ar pôtr-mañ, red eo dezañ beza aliet, kenteliet, bleinet gand eur gwaz. Erru eo poent dezañ mond da honid e vara; kreñv eo a gorr, lemm a spered. Eur mous am-eus ezomm. Na c'hwi, Izabel, a rofe ar pôtr-mañ din?... Me fell din dond a-benn euz ar gwaz-mañ, neketa pôtr?

— O, ya, sur!... A galon vad, Saïg!

— Ha te, Bilzig, plijoud a rafe ganit dond ganen-me?

— Ya, Saïg! ya, o, ya!

— Da hanter lodenn a honezi, kement-se tapet a vo atao evid ho tiegez, Izabel. Med echu ar piladegou, ha dalh an Nord, pôtr! pe da zah, dioustu en ôd!

— Trugarez, Saïg! Bennoz Doue deoh da rei dorn d'an intañvez ha d'he bugale emzivad!... Bennoz Doue deoh, Saïg!

Saïg ne gare ket kalz ar bennoziou, hag a hrozmole en eur vond er-mêz an ti, diwar dreuzou an nor:

— Dilun ar beure, pôtr, eh ambarki, adieu vat! Ha dreist oll te 'oar, er vicher arabad koll an nord! Tôl evez d'ar vag vian... Kenavo, Izabel!

Na pebez laouenedigez e ti Izabel, goude an displijadur! Hag evuruz, pegen evuruz Bilzig!

Daoust hag-eñ a zo eur pôtr ganet ha maget war bord ar mor, ha n'an-neus ket gouzañvet eul levenez dispar, santet e galon o tridal en e greiz p'an-neus tôlet e droad evid ar wech kenta war tiller eur vag pesketa. Eh-a eta Bilzig da vond war ar mor. War ar mor! Martolod e vo evel e dad, evel e dud koz, mous e bourz ar Gwennili, gwel-la ha brava bag a oa er porz. War ar mor!... Gonid a raio

e vara, dorn a raio d'e vamm evid delher he ziegez ha kemenn ar re vian... Eun devez, marteze, ma ro Doue yehed dezañ da ren e vuez a vartolod, ya, eun devez, Izabel ne ranko ken mond gand he bouteg euz an eil komanant d'eben, da werza he hregin.

Goude koan, lavaret ar pedennou, ar vugale a oa êt d'o gwele. Izabel a oa he-unanig, chomet he fenn etre he daouarn, azezet war an oaled.

Sioul, sioul, Bilzig a zavas euz e wele, hag a deuas, diarhenn, e korv e roched, da gaoud e vamm. Kregi a eure en he dorn, ha goustadig, goustadig:

— Mamm Izabel! Mamm Izabel!

— Petra, va fôtr?... Petra?

Ha Bilzig, stouet war e zaoulin, a zoublas e benn war he barlenn, doureg ar pôtr a ouele, ha dre e zaerou;

— Mamm Izabel, trugarez! trugarez, mamm Izabel!

— Doue d'az pennigo, va mabig karantezuz!... Doue d'az pennigo!... He dorn war benn he fôtr.

He fôtr?... Mab he gwad ne oa ket, mab he zristidigez, mab ive he harantez.

Na ger ken n'o-deus rannet.

Bilzig a deuas d'e wele. Dizankeniet, ar pôtr a gouskas evuruz beteg ar beure. Izabel ne gouskas ket nemeur, evuruz evelkent, ar paour kêz plah. Biskoaz kemend-all: sklerijennet he oll buez, gouzañvet ganti gwalh he halon, levez he oberou, laouenedigez he bloaveziou a boan, a zisplijadur hag a zienez. Eur bugelig he-devoa maget karantezuz hag anaoudeg; ar hreunenn hadet e kalon ar pôtr kellidet eo, diwana a raio nerzuz (henn goud a ra bremañ!); hi a zavo war he horzenn:

*Done da rei d'am gwezennig
Avel dous ha glizenn dener,
'Vid ma vleunio va rozennig,
Pell diouti ar gwall-amzer!*

Gouestl Izabel a vo on hini.

Dilezom amañ ar bugelig heuliet ganeom adaleg e hini-velez beteg an deiz a hirio; bugelig eo hoaz Bilzig. Warhoaz e bourz ar **Gwennili** e vo eur hrennard, êt er-mêz a vugaleaj, êt war ar mor da honid e vuez.

BILZIG

Taolenn al lodenn genta

Tro bourk Lokireg	7
-----------------------------	---

Lodenn genta

BUGALEAJ BILZIG

I. — Bugaleaj Bilzig. E hinivelez	11
II. — Bilzig e ti e vamm-goz Marharid	15
III. — Tiegez Izabel	18
IV. — Bilzig ha per an Otrou person	24
V. — Bilzig dirag ar barner	29
VI. — Bilzig ah-a da glask an aluzenn	32
VII. — Bilzig ah-a d'an ti-neza	34
VIII. — Bilzig hag e venoziou	44
IX. — Bilzig atao o pichota tra pe dra evid an tiegez	46
X. — Bilzig a ya d'ar hatekiz	51
XI. — Bilzig hag ar valtouterien	59
XII. — Bilzig ha Pipi	62
XIII. — Bilzig ha kazeg ar barner	65
XIV. — Bilzig gwasket	69
XV. — Bilzig, Gargam ha mab an Otrou	72
XVI. — Ar biladeg	78

BLEZIG

Loann ar Gelaouenn

Loann ar Gelaouenn

BLEZIG

LODENN AR GELAOUENN

D'al lennerien

Petra a zo bet c'hoarvezet gand BRUD?

E buez ar helaouennoù brezoneg e figouez aliez awalh darvoudoù hag a ra dezo mond diwar-wel: diouer arhant, diouer amzer gand an aozerien dalhet gand bep seurt labourioù all. Setu ar pezh a zo bet c'hoarvezet gand BRUD. Red eo bet deom disterna e-pad eur pennad, dre ma oa re a zammou war or hein ha ma kreske bepred an die e ti ar mouller. Ar pezh a zo bet kontet, ha skrivet, gand tud a zo, n'eo nemed gevier ha falstamal-lerez dizonest.

Siwaz! Niver an dud barreg da lenn brezoneg beo, yah ha pobleg, ha da briza e dalvoudegezh, ez a war viannaad atao. Ne helle mui BRUD beva diwar goust he homananterien. Evid gelloud kregi adarre, eo bet red deom goulenn skoazell digand eun toullad mignoned. Ra vezint trugarekaet. Kalz re all a hellfe on sikour. Ezomm on-eus tud a volontez vad da adskriva ar pennadoù, da zerhel ar hef, da furchal e pep leh evid kaoud komananterien nevez. N'hellom ket ober kement tra on unan, ha digemer mad a vo greet d'ar re a deurezo dond ganeom da labourad evid ar brezoneg.

N'eo ket an dornskridoù evelato a vanke deom. Eur bern on-eus arboellet, barzoniez ha yez-plên, rag n'eo ket maro e Breiz gouenn ar skrivagnerien pobleg. Lod euz ar pennadoù-ze a zo talvouduz, embannet e vint eun devez a vo, hag e pedom an aozerien da hortoz gand habaskter.

Ar pezh e-neus roet kalon deom dreist-all da adkregi adarre, eo al liziri niveruz kaset deom gand lennerien BRUD. Nehet e oant o weled ne resevent mui ar gelaouenn, ha ne gomprenent ket atao petra a oa c'hoarvezet. Lavared a reent deom he-doa eur gelaouenn bobleg evel hini Emgleo Breiz he flas merket e-fouez an embannadurioù breizeg. Ha gwir eo. Red eo deom kenderhel kousto pe gousto.

En eur zistrei d'ar vuez, e kinnig BRUD d'e lennerien al lodenn genta euz romant brudet Fañch Al Lay, BILZIG, unan euz romantou gwella lennegezh or hantved. Embannet eo bet an oberenn-ze, da genta, a dammou bian, e ti Ar Goaziou, e Kemper, er bloavezh 1925, dre aked Josef Ollivier, ar Breizad kaloneg. Ne veze ket kavet mui da brena abaoe pell zo, hag e oa poent braz he lakaad adarre etre daouarn ar re a houlenn lenn ha studia ar brezoneg.

Pa vo embannet an diou lodenn, e vo renket adarre BILZIG e stumm eul leor, gand skeudennou, mar deo posubl, hag eur stagadenn, enni diellou talvouduz evid anaoud menozioù Fañch Al Lay.

AR RENER.

OSIN

E DOUAR AR RE YAOUANK

(MOJENN A IWERZON)

(An den koz Osin, mab Fionn, pennrener ar Fianned, a zo bet goulennet outañ gand ar manah Padraig penaoz eo chomet beo tri hant vloaz war-lerh oll dud e amzer... Krog eo Osin da zisplega d'ar manah burzud braz e vuez...)

— Eur mintinvez m'edom, Fionn hag an oll ahanom, o chaseal war ribl Loh Lein, hag o kerzoud da heul eun demmez nevez savet ganeom er gompenez, sed e weljom o tond davedom diouz tu ar Hornog eur marh-red gwenn, war e gein ar gaerra plah yaouank on-dije' gwelet biskoaz. Chom a rejom oll a-zao, bamet gand kened ar plah hag haelled he dalh.

Bez e oa eur gurunenn war ar pennad-bleo alaouret a goueze dezi a-hed he hein, ha dougen a ree eur vantell seiz gell-kistin o tiskenn beteg an douar ha fichet a steredennou aour ruz. Boull e oa he daoulagad glaz evel beradou gliz war eur heotenn ha liou ar rozenn a oa ganti war he dioujod.

Evid ar jao gwenn a oa dindanni, goloet e oa e vrusk hag e dailler gand eur wiskamant a briz uhel; sternet e oa gand eun dibr kinklet a vein prisiuz; ar westenn arhant en e henou a oa dalhet e penn eur brid ler ruz ha pevar houarn en aour melen a zouge dindan e dreid.

Tostaad a reas ar briñsez ouz Fionn, ma zad:

— Eun hir a veaj em-ous-me greet, emezi, da zond beteg ennout, o roue kaloneg ar Fianned!

— Piou out-te, o rouanez oll-goant? a houlennas Fionn outi. Lavar deom da wir ano ha petra out-te deut da glask er vro-mañ.

— M'hel laro dit raktal, o Fionn: Niam-he-Bleo-Aour eo ma ano, e gwirionez, ma zad a zo roue Tir-na-n-og, Douar ar Re Yaouank, pell braz du-ze er Hornog, ha deut on beteg amañ dre garantez evid da vab Osin, ar brezelour taer m'eo deut ar brud anezañ beteg ennom. Goulennet on bet gand pennhered meur a roue gallouduz, hogen dit-te eo e karfen beza pried, Osin, a laras ar briñsez o trei diouz ma zu. Ma

fell dit dond d'am heul da Vro ar Yaouankiz Peurbaduz, ne vo ket meizet ganit ar mizveziou, nag ar bloaveziou, na zoken ar hantvedou o vond e-biou; na skuizder, na kleñved, na kozni, na maro, na glahar, na doan n'o-devo krog warnout, ha termen ebed ne vo d'az nerz na d'az kened.

Ha me, boemet gand kaerded ar briñsez ha mezevennet gand he homzou, a respontas kerkent:

— Ne nahin ket an oll brofou a ginnigez din, o merh eur roue, ha mond a rin ganit pa gari da Zouar ar Re Yaouank.

Ken buan laret, ken buan greet: ha me ha briata ma zad gand karantez, lared kenavo d'am breur Oskar ha d'am mignonned ha toui dezo distrei daveto deiz pe zeiz. Daelou a rede war ma dioujod o kimiadi diouz Fionn, ma zad karet, mantret gand ar glahar, ha diouz ar Fianned, anad warno souez ha poan galon ouz ma gweled o vond da bell. Sevel a ree d'am spered eñvor an deveziou eüruz tremenet ganto o c'hoari gwezboell, o selaou kana ha telenna, pe o chaseal er stankennoù hag er hoadeier.

Sevel a ris war dailler ar marh-red gwenn, a-dreñv ar briñsez bleo melen. A-boan ma oa gaoliatet ganin ar jao, ma taolas teir hrizinkadenn skiltruz ha ma troas wardu ar Hornog.

Teir skrijadenn a gañv a laoskas Fionn hag ar Fianned, diouz o zu, pa weljont ar marh-red o sailla etrezeg an aot, prim evel ar houmoul.

Heb dale tamm e oa steuziet a-dreñv deom bagad ar Fianned ha, tizet ar mor ganeom, e santis or marh o skei aour e dreid war-horre an tonnoù. Ha buannoh evid an avel e-kreiz miz meurz e ree tiz ar jao gwenn wardu Kornog ruz.

Ne gontin ket dit, o Pdraig, kement digouez a gavjom war on hent, lod braouahuz, lod all boemuz pe sebezuz. Tre-men a rejom e-biou d'eur halz a inizi hag a hêriou dianav din, e-biou da gestell uhel divent ha da baleziou pinvidig savet e-kreiz ar mor. Stourm a rankis ouz eur ramz gallouduz e-pad teir nozvez ha tri devez. Goude, or boe da dreuzi eur barrad arne euzuz, gwaso ha skrijusa arnevenn a welis biken em buez, al luhed o tarza dre-oll endro deom, hag ar mor dindannom eet e gouez, an tonnoù gwenn fuloret o sevel beteg an oabl. Daoust d'ar gurun o strakal ha d'ar morniz o sevel ken stank diwar ar hoummou ha ma kouez ar hazard diouz an neñv, lammad ha sailla a ree dalhmad dirazañ or marh-red taer hag herreg.

Abarz ar fin e tavas ar gwall amzer trodro deom hag e tiskoachas a-zioh or penn eun heol skeduz-oll. Edom digouezet war eun aot kaer-burzduduz, hag e laoskas ar jao teir hrizinkadenn laouen pa skoas e dreid ouz an douar nevez tizet ganeom. Mond a ree bremañ a-dreuz tachadou-bro dispar da weled, anezo kompezennou ehon bevvennet er pellder gand tor-

gennoù glaz. Dre oll e lugerne tiez koant, bleuniou e-leiz tro-war-dro.

Kerzoud a reas ar marh gwenn wardu eur palez meurbed kaer, doare dezañ beza savet gand mein-sklerijenn, ken splann e taole flamm ar mogerioù hag an toennou anezañ.

— Pe vro vuzdud eo homañ ha pe balez marzuz eo hennez, o priñsez? a houlennis ouz Niam-he-Bleo-Aour.

— Homañ eo ma bro himidig, Tir-na-n-og, Douar ar Re Yaouank, ha n'eus netra hag em-befe laret dit war he divoud ha ne gavi ket enni. Hag hennez ar palez-meur-ze a zo annez ma zad, roue Bro an dud divarvel, hag ennañ eo e vim eureujet, o Osin Iwerzon!

War on diambroug, e teuas eun niver braz a vrezelourien, ouz o heul kant ha kant plah koantoh an eil evid eben, gwisket gand seiz gwenn fichet a aour melen, o kana hag o koroll. Ar roue hag ar rouanez, deut dirag dor-dal o falez, a bokas d'o merh hag a reas din eun digemer an toniusa dirag oll dud al lez bodet endro dezo:

— Donedigez vad dit, Osin, gwaz dizaon, mab Fionn, penn-rener brudet ar Fianned, eme ar roue. Eüruz dreist e vevi en on touez, amañ e Tir-na-n-og, e-kichen Niam-he-Bleo-Aour, ma merh oll-garet, a zo bet beteg Iwerzon, da vro, en tu all d'ar mor gouez, evid ma teui da veza he fried!

Kaset e oen gand enorioù braz e diabarz ar palez, hag eno e tigoras raktal gouelioù a badas deg devez hed-ha-hed, ha lidet e oe ma eureud gand ar briñsez he mailladennoù aour, merh roue Tir ar Yaouankiz diziwez.

Da heul on eureud, e tremenas ar mizveziou hag ar bloaveziou heb gouzoud din, e-kreiz ar brasa eürusted a oufe den beo ebed tañva. Daou vab a oe ganet deom hag a lakaas ma fried rei dezo da ano Fionn hag Oskar, evid ma talhfent eñvor euz ma zad ha ma breur karet. Dond a rejont braz d'o zro, hogen, eveldom-ni hag evel oll dud Tir-na-n-og, tamm ebed ne gosaent hag e chome peb hini anezo yaouank ha mistr ha yah ha dibreder.

**

Tri hant vloaz, muioh, kalz muioh marteze, a dremenas evelse hag a oe evidon a-boan evel tri bloaveziad, ken eüruz e oan ha ken plijuz e oa beva e-touez tud vad ha laouen Douar ar Re Yaouank, eur gwir baradoz anezañ.

Koulskoude, ne yee tamm ebed diwar ma spered eñvor ma zad, na ma breur, na ma mignonned, na ma bro, hag eun devez e houlennis digand Niam-he-Bleo-Aour rei din aotre mond d'ober eur weladenn d'am zud ha da Iwerzon hlaz, en tu all d'ar mor.

— Bez e roin dit ma aotre da vond, emezi, hag ar marh

gwenn az kaso en enezenn. Ha koulskoude, gwasket on gand an anken : aon braz a zo ennon na deui ken endro d'ar vro-mañ. Az pezh soñj, Osin, ma fried karet, ma taolez troad pe droad ouz an douar, biken ne deui din endro. Selaou mad pezh a laran dit eun eil gwech: ma tigouez dit diskenn diwar ar marh gwenn, distro ebed ne vo evidout da Zouar ar Re Yaouank, o ma gwaz-me, ha birviken ne weli mui ahanon. Evid an deirved gwech e roan dit da houzoud, o mab brudet ar roue Fionn, ma c'hoarvez ganez mond d'an traoñ diwar da jao, biskoaz ken ne vezi evid dond endro beteg da vreg ha da vugale. Red eo din kemenn dit ouspenn n'emañ mui Iwerzon heñvel ouz ar vro peus anavezet ha karet: pell zo emañ eet da anaon Fionn, da dad, hag Oskar, da vreur, hag eet da get gouenp ar Fianned. Ne gavi ken war da zouar nemed tudigou dister ha bagadou menec'h o pedi.

Daoust d'ar pezh a ziskuillas din aze Niam-he-Bleo-Aour, derhel a ris d'am zoñj distrei da Iwerzon, evid eur weladenn ken. Toui d'am fried e sentjen ouz he gourhemenn a ris ha poka dezi ha d'am daou vab. Ha me ha sevel neuze war ar marh gwenn, goude beza kimiadet diouz roue Douar ar Re Yaouank, ar rouanez hag oll dud al lez. Trei kein a rejom dezo oll, ma jao ha me, ha setu ni o vond rag-eeun wardu ar Reter, dreist d'an aot m'or-bova douaret warnañ tri hant vloaz kentoh, dreist d'an tonnou oh enenni dindannom ha dirazon, ha, goude hoaz, e-biou d'an inizi ha d'an oll hêriou ha paleziou savet e-kreiz ar mor ma oam tremenet e-tal o-hichen p'edon a-haoliad ar wech kenta a-dreñv Niam-he-Bleo-Aour.

Pa zigouezis war aoteier Iwerzon, diêz e oe din anaoud bro ma havell. En aner e klaskis kavoud eur roud bennag euz Fionn hag ar Fianned. Ne gavis war ma hent nemed bagadou gwazed ha merhed a zebantas din ne oant ket uhel-loh eged korred. Chom a reent beh tro a-zao dirazon, estlammet gand ment ha dalh ma horv hag ar marh-red ouz ma dougen.

Da veur a hini anezo e houlenis hag eur helou bennag o-doa diwar-benn Fionn hag ar Fianned, petra oant deut da veza ha peleh e helljen en em gavoud ganto. Goude eur hialz a houlenou, e kavis unan gouest da respont din:

— Bez em-eus klevet ar re goz o konta mojenn ar roue Fionn. Brudet e oa, war a lared, evid nerz e zivreh hag evid e galon vad. Gwerziou a zo bet savet e gouezeleg, gwechall-goz, en enor d'e daoliou kaer gand barzed Iwerzon, ha meur a leor a zo bet skrivet gand ar vevh da viroud e envor war ar paper. Kontet e vez er skridou-ze e oa eet kuit Osin, eur mab da Fionn, da Zouar ar Yaouankiz, da heul eur briñsez keneduz deut d'e gerhad da bried dre emañ. Bez e oe an disparti-ze evid Fionn hag evid ar Fianned eur glahar euz ar gwasa ha ne oant ket evid en em ziboania anezi kent dezo mervel, rag morse ne deuas Osin endro diouz Douar ar Re

Yaouank da weled e dad, e vreur hag e vignoned evel m'enoa touet dezo e rafe.

O klevoud kement-se, e kouezis en dristidigez spontusa, hag ar morhed da veza chomet heb dond endro kentoh en Iwerzon a waskas din ma halon. Gweled a reen e oa re wir pezh he-doa kemennet Niam-he-Bleo-Aour araog din kimiadi diouti: pell braz a oa e oa marvet Fionn ha ma heneiled ker, ha den ebed ne gavjen e-nije o gwelet e buez.

Mennoud a reas din avad kas beteg ar penn ma gweladenn dre ma bro hinidig, hag e trois ma marh gwenn wardu Bro-Lagin, da weled ha tres pe dres a jomje euz lez Fionn, ma zad. Siwaz, e-leh kastell Alvin, ne gavis nemed eun dorgenn houez goloet a heot hag eur bernig mein e-touez an drez hag al linad: dilerh ar palez brudet m'oa bet savet ennañ ha m'enoa bevet Fionn hag ar Fianned.

Sammot ma halon gand an doan hag an anken, broudet ma spered gand ar heuz, ha me ha mond dalhmad a-dreuz Iwerzon el lehiou em-oa darempredet gwechall. E-leh an annezio em-oa tremenet enno hag anavezet ganin a-oll-viskoaz, ne gavis nemed dismantrou hag atredou, ha diskennidi ar boblad brezelourien em-oa bevet en o mesk a gaven heñvel-loh ouz bugale evid ouz tud 'n o oad-gour.

Ha me digouezet e Gleann Easa Maoil, e kejis gand eur mor a baotred bodet eno evel merrien. Dioustu pa weljont ahanon, e teuas unan d'am haoud:

— Deus 'ta da rei deom eun taolig dorn, o marheger ken ledan e ziskoaz!

Tostaad a ris outo hag e welis edont o klask sevel eur pikol bladenn-vên a-ziwar an douar. Dibradet o-doa eur penn anezi hag eet e oa eun toullad gwazedigou dre zindan, ar mên o poueza war o skoaz. Nemed re bonner beh e oa evito, ha fallaad a ree darn euz an dougerien, ken na oa kouezet sempl unan bennag anezo ha war var beza peurvrevet dindan ar bladenn.

— Eur galloud divent a zo 'n ez tivreh, o gour yaouank e barr e nerz, hag eur c'hoari a vo evidout sevel ar mên-mañ hag herzel evelse na ve mahet ar wazed-se dindannañ, a lavaras din mestr ar grennarded.

— Eur vez eo, emezon-me, ne hellfe ket eur rummad tud evel emaoch gwinta an tamm tra-mañ hag e stlepel alese. Ma vije bet ma breur Oskar emañ e-nije kroget er sklentenn-ze ha bannet e vije bet gantañ dreist ho pennou.

Taola a ris eur zell piz ouz ar bladenn, hag o stoui eun disterra diwar ma dibr e pakis krog enni gand ma dorn kleiz. Eun taol sach a-nerz ma breh hag ez eas ar peziad-mên da ruilla seiz-ugent troatad ahano.

Allaz! ar frapad-beh em-oa greet a lakaas terri senklenn an dibr ha setu me risklet d'an traoñ war begou ma zreid.

N'edo ket hoaz re vad ma daoudroad war an douar, ma reas eul lamm ar marh-red gwenn: teir hrizinkadenn skiltr a daolas hag e skarzas kuit. Ne oe ket dale o vond diwar wel, e tu ar Hornog, ha chom a ris eno abafet ha mantret e-touez an dudigou sabatuet.

En eun taol, e santis ma oll nerz o vond diouzin, ma divesker a blegas dindannon, eur pouez didruez a lakaas ma hein da gromma, ha merzoud a ris anad e oan troet d'eun denig koz gwan ha kabarh. O tremen ma bizied war ma dremm e komprenis e oa roufennet oll ma zal ha ma diouchod. Eur zell a daolis ouz ma daouarn: gwelet e veze an eskern dindan ar hrohen, ha krog e oa ar grenerez enno. Ne hellis ket selloud pelloh outo: eur vorenn a gouzas dirag ma daoulagad, hag heb dale e koazas dirazon stumm ha liou an traou endro din, hag e kollis ar gweled...

Sed aze displeget dit, o Padraig ar manah, pez a c'hoarvezas ganin-me, Osin, mab Fionn ar brezelour meur, goude beza bet kuiteet ma fried Niam-he-Bleo-Aour evid dond da Iwerzon da glask roudou euz ma zad hag euz ar Fianned, kantvedou goude o maro, ha penaoz on-me chomet beo keit-all war o lersh.

Adaozet ha berreet gand Per DERUG
diwar ar marvaill iwerzoneg:
« *Lai Osin e Douar ar Re Yaouank* » (1)
(Embannet evid ar skoliou
e « *Fiseled Groñvel* », 1961.)

FIONN, AR FIANNED, OSIAN...

— Ar Fianned a oa eur rummad brezelourien karget da lakaad an urz da ren en Iwerzon ha da herzel ouz an estrenien da zilestra en enezenn d'he aloubi. Brudet braz e oant evel chasescurien kirvi ha bleizi. — FIONN (pe Finn) n'oa ket eur roue, e gwirionez, — daoust d'ar pez a lavar Niam, — hogen, ar pevar mil den bennag a oa dindannañ a ree anezañ eur rener gallouduz, damdost kement hag eur roue. — Taoliou kaer Fionn, e vad Osin hag ar Fianned a gaver kontet en eun niver braz a varvaillou iwerzoneg. — Bevet e-nije Fionn wardro an III^{ved} kantved. — « TIR-NA-N-OG » a oa Baradoz ar Hornog, hervez kredenn an Iwerzoniz koz.

— Padraig: pa deu Osin endro d'e vro, goude beza bevet 300 vloaz e Tirnanog, e kav Iwerzon kristeniaet gand abostolerez Sant Padraig.

(1) Troet ha kempennet e brezoneg gand Y. AN DIBERDER ha. Y. AR GOW, — embannet er gelaouenn « SAV ».

KELEIER

Eur zell war an tri miz diweza

Darvoudou a-bouez a zo c'hoarvezet e Breiz abaoe eun nebeud miziu, war dachenn ar stourm evid Breiz hag he Yez. O menegi a reom amañ warlerh berr-ha-berr, n'eo ket avad evid sevel barnedigeziou hir war o divoud: n'om ket boaz da goll on amzer na berniou paper o vurutella, o pismiga hag o leunia kazetennou gand studiadennoù na ziwan diwarno nemed huñvreoù hag avel. Hogen talvezoud a ra ar boan teuler eur zell war ar pez a zo bet greet e-doug an hañv.

1. — Miz gouere: harzet eo gand ar gouarnamant na deufe dirag ar Gamb: ar mennad-lezenn aozet gand Kevrenn an Aferiou Sevenadurel diwar-benn kelennadurez yezou bian Bro-Hall (1). Debré a ziskouez da gannad Breiz emañ a-eneb ar brezoneg er skoliou. Kement-se a zigouez d'ar houls m'eo nahet o goulennou d'al Labourerien-douar, savet da zivenn o micher, ha ma lavar Debré n'emañ ket a-du gand al « Lezenn evid Breiz » goulennet gand ar C.E.L.I.B.

D'an 8 a viz gouere, eun toullad renerien (euz E.B., Kendalc'h, BAS, Falz, ar Bleun-Brug), en em vadet war houlenn Emgleo Breiz, a ginnig da oll strolladou an Emzao en em weled dizale evid dibab penaoz kas ar stourm war-raog. D'ar 17 a viz gouere, dileuridi ar strolladou meneget uhelloc'h en em gav gand re Kuzhul ar Brezhoneg, ar M.O.B., ar J.E.B. ha sekretour-meur « Kreizenn Studi ha Kevrea Gwirioù Breiz ». Ober a reont o menoz diskouez a-wel d'an oll youl an Emzao da zivenn gwirioù ha sevenadurez or bro ha da vruda goulenn al « Lezenn evid Breiz ». Divizet eo prienti daou « daol braz », unan e Kemper d'ar 23 a viz gouere, an eil e Breiz a-bez a-benn ar 14 a viz eost. Al labour a zo rannet etre an oll.

2. — An « taal kenta », e Kemper, a deu brao-braz da vad, aozet a-zoare m'eo bet heb gouzoud netra da « friou-furch » ar polis... Eur wech echu Goueliou Kerne, d'ar zul d'abardaez, eun daou vil den bennag (da nebeuta) a dreuz kêr Kemper penn-da-benn, da heul skritelloù ha lienennou e-leiz douget gand renerien ar strolladou; youhet e vez ken na vez « ar Brezoneg er skol », « Debré d'an traoñ », « Eul lezenn evid Breiz », « Labour d'ar Vretoned e Breiz ! » hag all... Milierou a baperennou a zo strewet e-touez an dud bodet a-hed ar strêd! sabatuet ha dihortoz-krenn ma 'z int, ar C.R.Sed na zigasant o hirri nemed eur wech m'eo erru an ambrogadeg dirag ar prefeti. Dond a ra ar prefet e-unan da rebech o zool d'ar renerien, hogen da viroud na zavfe reuz ha freuz, e lak renta d'ar heneiled ar skritelloù a zo bet skrapet diganto hag e ro

(1) Selloud pelloh.

urz d'ar C.R.Sed mond kuit, ar pezh a reont... garmadeg an dud o tasseni ouz o diskouarn (2).

Tizet eo bet ar pal a glaskem, e-keñver ar gouarnamant ha dirag ar babl : ar stourm a-du gand al « Lezenn evid Breiz » a zo digoret ! Ha gouenn « Ar Brezoneg er skolioù » e-neus tregernet e strêdou Kemper. Kelaouennou Breiz ha Pariz o-deus ranket komz euz an taol, — lod o fenti eun disterra, evel boaz gand ar Barizianed, lod all o tisliveri pal an aozerien hag o fizioud er heleier spazet kaset gand kazetennerien Kemper kentoh eged er re bet roet ganeom war-eeun. Hiviziken e ouezim penaoz ober.

Taol Kemper a zo bet eun dra fall evid paotred ar gouarnamant, ha rebechou kaled a zo kouezet, diouz on-eus gouezet, war tud an urzh hag ar spi, paket berr... O tigouezoud goude reuziou miz mezeven war on hentchou, setu ma lak eun neh iskis da ziwan e-touez renerien ha bureverien Pariz, e-sell Breiz hag he hudennou...

Abeged zo bet deom beza chomet heb lakaad en afer, en araog, renerien Kemper, Breiz penn-kil-ha-troad an oll anezou. Marteze e vije bet gwelloc'h henn ober, hogen ne felle ket deom diêsaad karg renerien ar gouel. Goulenn a reom outo on digarezi ma on-eus gret eur fazi en o heñver... Ar pezh a zo diarvar eo emañ an oll, nemed eun istrogell benag a gavas repu en eur gelaouenn evid dislonka e zahad droug, a-du gand klemm ouz enebiez Pariz da houlennou ar Vretoned. Tri devez goude an « taol », eo bet votet gand Kuzul-Kêr Kemper eur « mennad » a-zoare oh harpa al « Lezenn evid Breiz », startoh a-dra-zur eged an hini kinniget gand ar CELIB pe ar C.A.R. o-unan !

3. — An « eil taol », derhent Gouel Hanter-east, a wel eur mil benag a dud a beb oad o vond en hent evid pega war ar mogerioù, en darn vrasa euz kêrioù, bourhadennou ha kroazhentchou or 5 departamant, eun 10.000 skritell o rebech d'ar gouarnamant chom heb ober tra vad ebed evid Breiz hag herzel oustenn na ve kelennet ar brezoneg en or skolioù. Eun 300.000 a baparennou a zo roet war eun dro da lenn d'ar henvroidi ha d'an dud diavêz, niveruz er vro d'ar mare-ze.

Daoust ma chom peoh ar helaouennou an taol-mañ — nemed unan bennag... euz Pariz — tizet eo ar pal an dro-mañ adarre : roet zo brud, dre Vreiz a-bez, da damallou an Emzao ha setu anavezet dre-oll emañ o houlenn eul lezenn a-ratoz evid or bro. Eun digemer euz ar gwella a zo gret e peb leh d'ar skritelloù ha paperennoù (3).

Gourhemennou kaloneg a gasom d'an oll vignoned o-deus roet an dorn d'ober al labour, anezo tud a beb « kostezenn », hag, ar wech-mañ hoaz, niveruz ar re youank en o zouez. Marteze e vo roet tro dezo ober kemend-

(2) Eun dlead eo menegi amañ e oa bet peget meur a gant skritell ouz mogerioù Kemper e-pad an noz, araog ar gouel. Tri euz an tregont keneil a gemeras perz el labour-ze a oa bet paket o staga ha kaset oant bet d'ober eun ehan en ti-kêr !

(3) E Gwengamp, roget pe skrabet eo bet an oll skritelloù gand polis-kêr. — E meur a barrez koulskoude, ar Vêred eo o-deus lakeet pega ar skritelloù... Beteg war eun ti a--dal da genkiz an Ao. Debré e-unan, e Préfaïlles, ez eo eet unan da bega tamallou Breiz, war a zo bet lavaret deom...

oll adarre, eun deiz bennag da zond heb dale kalz... Ha ganto e teuo ive, neuze, kalz reou all, ne oant ket er gêr d'ar 14 a viz east, pe o-doa bet diegi mond da c'hoari gand peg ouz ar mogerioù, a-well d'an oll.

4. — Trede « taol » an hañv eo an hini bet aozet gand Sindikajoù Labourerien-douar Breiz hag ar CELIB : eur vodadeg vraz, e Pondi, d'an 19 a viz east, da lakaad anaoud goulennoù ar gouerien ha, war eun dro, da rei lañs d'al Lezenn evid Breiz.

« Emgleo Breiz », anezañ Kevrenn Sevenadurel ar CELIB (4), a halv renerien an Emzao da zond niveruz da Bondi, da ziskouez emañ a-grenn gand al labourerien-douar o stourm, n'eo ket hepken da gaoud lezennou evito o-unan, hogen evid digas labour hag eur vuez gwelloc'h d'an oll Vretoned ha diazeza amzer-da-zond Breiz a-bez.

Breiz, berz-braz a ra an Dervez-se, gret outañ gand kelaouennerien Pariz evel ha pa vije bet e gwirionez « Breujou-Meur Breiz » !

D'e heul, savet zo eur « Strollad-Evezia », ennañ dileuridi euz an oll sindikajoù, ken re ar vicherourien ha re ar gouerien, eun nebeud penna-durezioù ha daou gannad euz an Emzao breizeg : unan evid « Emgleo Breiz » (Kevrenn euz ar CELIB), oh ober evid an oll gevredigezioù o pledi war an dachenn sevenadurel, hag unan all evid ar Studierien. Bez e heller fizioud war on daou gannad evid teurel pled ouz kement a zell ouz divenn Spered Breiz ha, beb tro ma vo tu d'henn ober, lakaad an oll da harpa ar goulennoù evid ar yez, da skouer.

Da heul Dervez Pondi ive, lakeet zo bet war ar mogerioù 15.000 skritell ha skignet eun hanter milion a baparennou nevez, embannet gand ar CELIB, al labour staga ha strewi o veza gret gand ar sindikajoù kouerien en or pemp departamant. Goulenn a ra skritell ha paperenn ar CELIB eul Lezenn evid Breiz da helloud trehi war an divroa hag an dilabour.

5. — Red eo menegi amañ a-hend-all eo bet fiziet da « Emgleo Breiz » gand C.E.E.R. ar CELIB (5) ar garg da studia eun « daolenn-goulennoù » sevenadurel da veza lakeet e-barz al « Lezenn evid Breiz » a vo kinniget d'ar gouarnamant ha d'ar Parlamant dindan nebeud hag a vo red, moarvad, d'ar Vretoned bounta stard war-raog evid ma vo roet dezo o c'hoant.

Kaset eo bet eur raktres euz an daolenn-ze gand E.B. d'an oll strolladoù o-deus kemeret perz e labour an hañv-mañ, ma vo roet ganto o zoñj war ar pezh a ginniger hag ar pezh a rafe diouer.

6. — Ha bremañ, penaoz e vo dalhet gand ar stourm baulhet er mizioù tremenet ? Evid ar pred, n'heller ket spisaod pezh a vo d'ober. Diouz kerz an darvoudou e vo, evid ar peb brasa, hag hervez ma vo divizet ober a-gevred gand or strolladoù, — beb tro ma vo talvouduz unani ar strivou adarre.

Evid pezh a zell ouz « Emgleo Breiz », dalhet e vo ar vodadeg-bloaz e miz du, moarvad (kelou a vo kaset d'ar strolladoù). E-keñver al

(4) Ha bez ez eo Emgleo Breiz, evel ma ouezer, eur greizenn-oberia o voda Kendalc'h, BAS, ar Falz, ar Bleun-Brug, ar JEB, an A.B.

(5) « Commission d'Expansion Economique Régionale du C.E.L.I.B. », — hag a hellfer ober anezi e brezoneg « Kevrenn Kreskidigez Arboellerezel Breiz », — ar CELIB o veza badezet ganeom a-hend-all : « Kreizenn Studi ha Kevrea Gwirioù Breiz »...

labour evid ar yez, menozioù ha mennadoù-ober on-eus da ginnig d'or heneiled, darn da veza sevenet ganeom-ni, Bretoned (al Lezenn evid Breiz, gand he lodenn sevenadurel), — darn all da veza studiet ha kaset war-raog darn en dorn gand or henvreudeur ar Hreisteiz (kelennadurez ar yezou bian e Bro-Hall). War an dachenn-ze, nemed traoù dihortoz a c'hoarvezfe ahann di, eur striv nevez a vo klasket ober ar goañv-mañ hag ezomm a vo tud e-leiz (evid eun dra e-nevo asant an oll). Re abred eo hoaz evid diskleria diwar-vremañ petra vo, hogen gouzoud mad a ra or heneiled n'om ket tud da ginnig traoù dihalluz pe re glouar, na kennebeud tud da lezel ar stourm da goaza!

Ar pezh a zo anad eo n'eo ket echu an abadenn!

Peadra zo avad d'an oll beza laouen gand kerz an traoù er mizvezioù diweza: gellat zo bet unani strivou an diou lodenn euz Emzao Breiz a oa chomet dispartiet abaoe bloavezioù, doare ganto beza mouzet da vad an eil e-keñver eben. War an hent-se, labour vad a zo bet greet: kinnigoù Emgleo Breiz a zo bet digemeret gand ar peurlvizia euz ar strolladoù a boagn evid ar vro. Ha stad a zo ennom pa 'z eo deut da vad taoliour-arnod euz ar seurt a oam pell zo o hortoz ar houlz ma vije tro o has da benn.

Gwir eo n'eo ket bet gwelet an oll war an dachenn, evid hoaz, hag e seblant unanig bennag chom, evid ar mare, skoachet en e gornig, pe o redeg warlerh koumoul, pell diouz ar Vreiz wirion a vennom selvel. Hogen, kredi a reom, kenta gwech ma vo bet divizet kendastum adarre nerzou oll lodennoù an emzao, gwelet e vint e-touez ar stourmerien, int ive. N'eus ket goulennet ouz den, an hañv-mañ, trei kein d'e venozioù, ha n'emaer ket e soñj goulenn netra all en amzer-da-zand nemed kenlabourad war an tachennoù ma hell an unvaniez beza greet, ha beza efeduz. N'emaer ket, ouzpenn-ze, o klask diskoulma en eun tool kement kudenn o tistranna ohanom: an amzer emichañs a gompazo meur a dra...

Neuze 'ta n'eo ket en aner on-euz gouzañvet heb respont, e-pad bloavezioù, rebechoù hag aliez kunujennou... lakom direiz (ne fell ket deom implij gerioù all). N'on-oo ket neuze muioh a amzer da foeltra eged bremañ o kemer perz en tabutoù, zoken evid divenn ol labour pe on tud. Gwelloc'h on-eus greet: dalhet on-eus da vond gand an hent dibabet ganeom, daoust ma n'oo ket an esa nag ar plijusa, oh ober or zeiz gwella evid ma teuje an traoù da zarevi er vro baour-mañ a-benn ar fin...

Emaom marteze digouezet d'ar mare gortozet keit-all a zo. Tostaet om da nebeuta. Eul lusk nevez a zo bet roet da emzao Breiz. Da lavaroud ar wirionez: emañ Emzao Breiz o kemer stumm. Deom-ni, deom-ni oll, da houzoud tenna mad Breiz diouz kerz an darvoudoù, bleinet gand ar skiant-prenet medet a-hed an hent hir on-eus ranket bale warnañ.

EMGLEO BREIZ.

Planedenn ar mennad-lezenn diwar-benn kelennadurez ar Yezou Bian

E miz mezeven e teue er-mêz Danevell-skriz an Ao. LE DUC, kannad ha mêr Montroulez, diwar-benn ar Mennad-Lezenn savet evid gwellaad kelennadurez ar yezou bian (pe yezou rannvro), aozet e miz kerzu diweza gand Kevrenn an Deskadurez er Gambr.

Gouzoud a reer e oa bet kinniget tri Mennad-Lezenn e 1959 ha 1960 gand an Ao. Ao. CROUAN, BAYOU hag HOSTACHE, o fal dezo o zri reizha lezenn 1951 hag astenn eun tamm mad leh ar brezoneg, an okitaneg, an euskareg hag ar hatalaneg er skolioù. Stnet e oa bet an hini kenta gand hogozig oll gannaded Breiz, — an eil gand eun toullad kannaded socialist euz ar Hreisteiz, — hag an trede gand eun tregont all bennag euz ar broioù Oc ive. Mad eo digas da zoñj e oa bet diskleriet daou vennad-lezenn all e 1958, kent d'ar IV^{ed} Republik mond d'an traoñ: unan gand eur Hreisteizad, an Ao. COSTE-FLORET, unan all gand eur Breizad, an Ao. TANGUY-PRIGENT, hemañ en ano kannaded Breiz d'ar mare-ze.

D'an Ao. LE DUC e oe fiziet gand Kevrenn an Deskadurez ar garg da studia an tri danvez-lezenn hag aoza ganto eur mennad boutin. Dioustu e klaskas an Ao. LE DUC kaout ali divennourien ar brezoneg ha goulenn a reas e skoazell digand Emgleo Breiz evid seveni e labour. Dre hanterouriez E.B. e reas anaoudegez gand Kuzul Broadel ar Yezou bian, nevez diazezet d'ar mare-ze. Diouz or gwella a rejom oll evid rei ar skoazell gortozet, hag ar skrid embannet e miz mezeven diweza a zo frouez eur henlabour etrezom oll.

N'eo ket deom-ni eta barn talvoudegez ar skrid-se. Evel e peb lezenn, diou lodenn a zo ennañ: ar pezh a vez greet outañ « Diskleriadur an Abegou », hag an notennoù diwar-benn an artikloù. Evid al lodenn-mañ, ne dalv ket ar boan komz anezi: greet eo bet evid beza burutellet gand bureverien ar minister dreistoll. Evid ar pennad kenta, e bal a oa divenn or yezou dirag tud n'ana-vezont diouz ar gudenn nemed an treuzkredennoù boaz; klasket zo bet diskouez dezo pegen iskis — ha warlerhiet, e gwirionez — eo doare-ober Bro-Hall: poania ra da vouga he yezou bian, pa vez ar broioù all oh ober wardro o « eil yezou » gand kement a aked, o senti evelse ouz boazioù ar zevenadurez wirion hag ouz alioù ar gelenadurez...

Aner eo deom bremañ gouzoud ha deut ez-eur a-benn da lavaroud mad hag eeun ha stard awalh kement a oa da veza displeget war ar poent-se ha war poentoù all... Ne dalv ket ar boan terri penn gand se, peogwir, a-boan embannet, skrid an

Ao. LE DUC a zo, gouez d'an Ao. DEBRE, da veza renket en dielloù...

Ali a oa koulskoude an oll gostezennou politik da zigemer al lezenn nevez. Kalz labour a oa bet greet ganeom, gand or heneiled ar Hreisteiz ha gand dileuriad Kuzul ar Yezou bian e Pariz, an Ao. IBARRONDO, eun Euskarad kaloneg ha pennege ma 'z eus. Berniou liziri a oa bet digemeret, oll a-du gand lakaad tremen mennad an Ao. LE DUC. Rener Kevrenn an Deskadurez e-noa goulennet e lakaad war roll labouriou ar Gambr e miz mezeven, ha, goude hoaz, e miz gouere. Disfiziañs a oa ennom koulskoude, a-zivoud planedenn an tamm skrid-se e-noa koustet deom kement a labour: war-hed edom euz eun taol-gwidre nevez a-berz enebourien ar brezoneg...

Ne oam ket faziet!

A-daol trumm e oe dizoloet gand tud an « Hôtel Matignon » eun abeg nevez da viroud na ve sellet ouz an danvez-lezenn gand ar Gambr: ne oa ket, war dachenn kelennadurez ar yezourannvro, peadra da zevel lezenn ebed, hervez Reizadur ar V^{re} Republik! Ha ne deuas ket d'ar Gambr aotre ar gouarnamant da lakaad war he zaolenn-labour mennad-lezenn an Ao. LE DUC. Pa 'z eas an Ao. IHUEL, Rener Kevrenn Kannaded ar C.E.L.I.B., hag an Ao. LE DUC e-unan, da houlen kelou ouz DEBRE, lavaret e oe dezo n'o-doa ar gannaded netra d'ober wardro seurt traou: e karg ministerez an Deskadurez nemetken e vije dibab Petra zo d'ober... Koulskoude, renerien an Deskadurez o-unan eo o-doa, ha meur a wech, diskleriet da zivennourien ar brezoneg (tud ar C.E.L.I.B. ha kannaded deut d'o gweloud, strêd Grenelle) e oa red kemma lezenn Deixonne a-benn gelloud astenn talvoudegez ar yezou bian en arnodennou ha rei eur plas brasoh d'ar henteliou er skolioù!

Ar wirionez eo e talh gwasoh eged biskoaz renerien ar gouarnamant da veza krenn a-ened ar brezoneg hag ar yezou all. Gwechou zo eo bet respontet deom gand komzou seven (« Studiet e vo ar gudenn! »), pe greet deom dambromesaou hag aliet deom heulia an hent-mañ-hent (« Lakait aoz eul lezenn nevez! »). Gwechou all, pa rankont respont ya pe nann, nahet e vez krak-ha-berr rei deom or goulenn. Setu end-eeun ar pe e-neus greet an Ao. CAPELLE, o respont da Emgleo Breiz, da heul goulennadeg al Lisianed; setu ive pe e-neus greet Pennrener ar gouarnamant p'e-neus gwelet e oa prest ar Gambr da zigemer al lezenn nevez! Hag eveljust n'o-deus nag an eil nag egile studiet eun disterra ar gudenn na lennet zoken skrid an Ao. Le Duc!...

Marteze e vo klasket eur wech all hoaz kas an afer dirag ar Parlamant. Penaoz gortoz avad e plegje tud ken aheurtet ha ken berrwel hag or renerien bremañ, n'int gouest da gavoud eun diskoulm da gudenn ebed nemed pa vez re zivezad, dindan pouez an darvoudou, an nerz, hag eur wech m'o-deus paket lamm?

Embannet eo bet skrid an Ao. Le Duc gand « Kuzul Broadel ar Yezou bian » (Conseil National des Langues et Cultures Régionales). Bez e heller goulenn ar skrid-se digand Emgleo Breiz (50 lur evid ar mizou).

« Nann » da houlennoù al liseaned

Goulennet o-doa eur 1.000 bennag a dudou yaouank euz Liseou Brest, Kemper ha Gwened ma vije roet eul leh dereatoh d'ar henteliou brezoneg war « implij-amzer » o skolioù ha digemeret ar yez en amproenn direk a yezou, lakeet a-nevez e taolenn ar vachelouriez (gand poentou o talvezoud evid an arnodenn eto).

Ar goulennou-ze, dastumet gand eur Strolladig savet a-rotaz (1), a oa bet kaset da Vinistr an Deskadurez gand Emgleo Breiz.

D'eur goulennadeg kenta e 1959 e oa bet respontet ne veze ket digemeret seurt reketou a-berz ar skolidi... An taal-mañ, eun « Nann! » frêz ha groñs a zo bet lavaret gand an Ao. CAPELLE, anezañ Rener « an Taolennou-labour hag an Urziadur » e Mererez an Deskadurez... Diêz kenan e vije kelenn ar yezou rannvro en eun doare reiz, hervez an Ao. Capelle, — pe e vefe red krenna an amzer gouestlet d'ar yezou estren. Rag-se eta ne helle ket an Ao. Capelle — diouz e gredi — rei o c'hoant da zinaterien ar goulennadeg!

Evid eur wech, setu ez eus bet respontet en eun doare didro!

Daoust avad hag e kred an Ao. Capelle e chomo peoh ha sioul ar Vretoned goude eur seurt respont?

Labouret mad e-nevo da vianna da lakaad eun niver brao a dud yaouank da zibab **hentchou nevez** evid stourm a-du gand Breiz hag he Yez.

Deveziou Studi Studierien Vreiz

War roll al labour greet e-pad an hañv, e fell deom rei eul leh a enor d'an daou zeveziad-studi aozet gand ar J.E.B. (Studierien Vreiz), en Oriant, d'an 9 ha d'an 10 a viz gwengolo.

An darn vrasa euz ar strolladou breizeg o-deus kemeret perz en deveziou-ze o tond da heul darvoudou miziu gouere hag east.

Ar hudennou sevenadurel ha dreistoll ar stourm evid ar yez a oa danvez-studi an eil devez. Diskleriet eo bet a-zoare gand rener « Emgleo Breiz » ar pe e zo bet greet war an dachenn-mañ ha Petra a hortoz, evid traou ar spered, diouz al « Lezenn evid Breiz » nevez lakeet war ar stern.

Digemeret eo bet gand an oll eur « Mennad » o tamall « Galoud » ar V^{re} Republik da veza o klask mouga Yez Breiz hag o houlen groñs eun diskoulm da gudennou or Bro.

Kaset eo bet ar skrid-se gand « Emgleo Breiz », a-berz ar Studierien, d'ar helaouennou, e Bro-Hall a-bez hag en estren-vro, e saozneg hag e galleg.

(1) Strollad « Le Breton au Baccalauréat ».

Skoliou - Hanv

Meur a skol-hañv a zo bet dalhet an hañv-mañ adarre :

— e miz gouere, hini « **Ar Falz** », e Kastellnevez-ar-Faou, hag hini « **Kamp ar Vrezonegerien** », e Plougraz;

— e miz eost, diou Skol **Kendalc'h** leh-ouz-leh, e Pleiben, — **Kamp B.A.S.** er Gemene, — ha **Kamp Kevrenn ar Yez** (Kendalc'h), e Sant-Herbot evel beb bloaz.

Bez ez eus bet ive **Kamp ar Yugale**, aozet dindan paeroniez Kendalc'h en Ellian, — ha **Skolaj ar Viniouerien**, e Porspoder. Ha moarvad n'eo ket klok ar roll !

Gourhemennou kaloneg d'an oll, renerien, kelennerien, prezezerien ha skol-hañverien ! Eul labour frouezuz kenan a vez greet ganto, evid ar yez, evid on arzou-pobl, evid spered hag amzer-da-zond Breiz.

Evel ma houlenne « Vie Bretonne » ar C.E.L.I.B., eun nebeud miziu zo, red e vije da Vreiz kaoud Kreizennou gouestlet d'ar studiu breizeg, diazezet a-ratoz evid gelloud digemer a-hed an hañv, pe zoken a-hed ar bloaz, stajou hag a ranker bremañ renka ha stalia Doue oar penaoz.

Eun digemer mad a zo bet greet d'ar mennad-se, kaset gand Emgleo Breiz, hag eur plas a vo, evid krouidigez eur seurt Skoliou-Uhel ar Bobl, er « Plan » emaez o prienti evid C.E.E.R. ar C.E.L.I.B.

« Marvailloù ar votez-tan »

Abae daou vloaz ez embann ar gelaouenn « **La Bretagne à Paris** », beb sizun koulz lavared, eur pennad savet e brezoneg hag e galleg gand Per-Jakez HELIAS, dindan an talbenn: « **Daouvennegad furnez** », e 1960, hag, ar bloaz-mañ: « **Lizer a Vreiz** ». Talvoudegez braz o-deus ar pennadou-ze, ken e sell al lennegezh, ken e sell ar yez, — pennoberou gwirion darn mad anezol !

Kavet e vo heb dale kalz deg euz ar pennadou-ze, dastumet en eul leorig kaer, luhskeudennou gand Joz An Doare d'o heul: « **Marvailloù ar Votéz-Tan** ».

Bro-Gembre

E-touez al levriou kembraeg, ken niveruz, a deu bep bloaz da binvidikaad lennegezh Bro-Gembre, on-eus bet an eurvad da lenn unan, nevez embannet, bourruz meurbed: **Y Pendefig Pygddu, stori fach, gan Wil Cwch Angau**, an hini eo (Ar Pinvidig du-peg, istor verr gand W.C.A.).

Piou eo Wil Cwch Angau, embannet gantañ warlene eur romant euz ar plijusa, **Tipyn o Annwyd** (Eun tammig anoued)? Diskleriet eo bet gand kelaouennou Bro-Gembre ez eo Wil Cwch Angau ano-pluenn an Dr. Glyn M. Ashton, mirer levraoueg keltieg Salesbury, e Skol-Veur Caerdydd (Cardiff). Gand meur a Vreizad, dreist-oll gand ar strollad kelennerien, studierien ha micherourien a yeas da Vro-Gembre warlene, eo anavezet mad Glyn M. Ashton. Eñ eo a renkas pep tra evid digemer ar Vretoned ha lakaad o beaj da veza kenteliuz dreist. Ar geltiegerien a oar ouspenn e-neus skrivet G.M. Ashton studiadennou gouizieg diwar-benn lennegezh e vro.

An diou oberenn embannet gantañ a ziskouez ez eo Wil Cwch Angau eur skrivagner a ouenn vad, hag a oar aozza romantou dedennuz, leun a zarvoudou souezuz. Eun istor fentuz ha diverruz eo **Yr Pendefig Pygddu**, o c'hoari endro d'eur mell taro du, gounezet gantañ ar henta priz e Diskouezadeg Meur al Labourez Douar. Bez' ez-eus meur a hini hag a garfe kaoud an aneval ramzel, zoken dre laer, digand e vestrez, ar plah koant Sali Antaron... Doare konta W.C.A. a zigas awechou soñj deom euz hini Jakez Riou.

Alia a reom stard kement hini a oar ar hembraeg da lenn « **Yr Pendefig Pygddu** ». Ne gollo ket e amzer.

✱

Cymdeithas Cyfeillion Llydaw. — Eur helou mad o tond euz a-berz ar « Breudeur Tramor », euz Bro-Gembre. Or heneil kembraeg H.L. Humphreys, deut da veza Breizad penn-kil-ha-troad, a gemenn deom eo bet diazezet gantañ ha gand eun toullad keneiled, epad gouelioù an Eisteddfod diweza, eur gevredigez he ano: **Cymdeithas Cyfeillion Llydaw** (Kevredigez mignoned Breiz). Felloud a ra d'ar strollad-se esaad ha ledannaad an darempredou sevenadurel etre Breiz ha Bro-Gembre, etre ar re yaouank dreist-oll. Derhel a raio, er bloaz a zeu, eur « stand » (stall) da ziskouez traoù Breiz, e Eisteddfod Broadel Llanelli.

Or gwella gourhemennou da oll izili **Cymdeithas Cyfeillion Llydaw**.

« **KUZUL BROADEL YEZOU BIAN BRO-HALL** » e-neus dalhet e vodadeg diweza e **BERGERAC**, da geñver Skol-Hañv an I.E.O. — Emglevet eo Okitaniz, Bretoned hag Euskariz evid adkregi er stourm evid kemma lezenn 1951, daoust d'an enebiez diskleriet gand renerien Pariz. — Nevez zo o-deus goulennet divennourien yez Korsika ouz Emgleo Breiz harpa o goulenn ezelia d'ar Huzul.

« **SKOL-VEUR AR STUDIOU OKITANEG** » (Institut d'Etudis Occitans): Or heneiled euz an I.E.O. a oa o eil Skol ar C'hoariva Oc e Casseneuveil (Bro-Gwaskogn) e-doug sizun ziweza miz eost, hag o degved Skol-Hañv Kelenouriez ha Sevenadurez Okitaneg e Bergerac, ar zizun goude. — Tro e-neus bet dileuriad Emgleo Breiz da arvesti ouz eur pezc-c'hoari nevez e yez Oc, savet gand or heneil, ar houeriad Léon Cordas: « **La Font de Bonas-Gracias** », gonezet gantañ ar Priz Aubanel. — War dachenn ar C'hoariva o-defe Breiziz kalz da zeski digand Kreisteiziz: n'eo ket eet gwall bell strivou or strolladou diouz an tu-ze, daoust deom kaoud en on touez saverien peziou-c'hoari a dalvoudegez. Er Hreisteiz e vez strolladou a-ratoz ha beteg c'hoarierien a vicher euz ar C'hoarivaou broadel o pledi war an dachenn-ze, hag o rei abadennoù niveruz.

EUSKUALZALEEN BILZARRA (Dalherien an Hengoun euskareg): e Bro-Euskadi, dond a ra da Asamblez-meur « **Euskualzaleen Bilzarra** » eun niver braz a dud euz an oll gevredigeziou oh ober wardro sevenadurez-pobl ar vro: ar c'hoarierien polotenn hag ar « **Beztchulari** » (ijinerien kanaouennou), ker-koulz ha dañserien « **Ohidurak** » (Kevredigez ar Horollou), kanerien ar « **Bergilareak** » (Strollad al Lazou-kana), ha divennourien ar yez, ar re-mañ bodet en « **Ikas** » (= Deski, en euskareg), strollad ezel euz « **Kuzul ar Yezou bian** ». Diouz ar mintin, e vez studiet al labour boutin, ha, goude ar banvez kreisteiz, servijet war ar mêz dindan teltennoù, e tigor ar Henstrivadegou, peb tra o veza greet e yez ar vro. D'ar 7 a viz gwengolo e tigoueze ar vodadeg-veur ar bloaz-mañ.

Ar Gevredigez « **IKAS** » he-deus embannet ar bloaz-mañ, eul leor-dorn evid ar skoliou, e galleg, diwar-benn Douaroniez, Istor ha Sevenadurez-pobl Euskadi. Beb bloaz e vez savet ganti Kenstrivadegou en euskareg evid ar skoliou.

Ti-Moullerez an « **Télégramme** », Brest

Ar Merour: P.-M. MEVEL.

BRUD

Ar Yez hag ar Vro

• EMGLEO BREIZ •

B. P. 17 BREST